


YOUENN O L I E R



E N E Z

A R

V E R T U Z

III

**ROAZHON
GEVRED
1965**

E N E Z A R V E R T U Z

P E M P V E T K E V R E N N

T o u e l l h a d i d o u e l l

TAOLENN AR PEMPVET KEVRENN

1.-Daou donkadur.	p. I
2.- An nijadell.	6
3.- Laniltud.	10
4.- Diviz ouzh taol.	15
5.- Trubuilhoù Tudi.	17
6.- Un dro e kêr.	20
7.- Balvent.	26
8.- Er redva-kon.	29
9.- Nozvezh ar spont.	33
10.- Ar seziz.	38
11.- Tec'hadenn.	45
12.- Ar ouezidi.	50
13.- Konomor a gont e vuhez.	55
14.- Ar pred.	59
15.- O vevañ gant ar "Fraspotch".	61
16.- Kimiadiñ diouzh ar "Easpotch".	65
17.- Paket adarre gant Ledeneziz!	70
18.- Va emwel gant tad Maria.	74
19.- Ar weladenn da Abboell.	77
20.- Breutaenn gant Lansoc'h.	81
21.- Penaos e teuls a-benn da eurediñ gant Maria.	84
22.- Emvod ar Breudoù.	88
23.- Dismantr.	92
24.- Rozaber.	98
25.- Ur muntr.	103
26.- Diviz gant ar wrac'h.	106
27.- En ti-bac'h.	109
28.- Heskinerezh.	114
29.- An distro d'ar gêr.	118
KLOZADUR :	122

Pennad 1

Daou donkadur

D'ar c'houlz-se en doa paouezet Keralen a gomz epad ur pennad. Skuizh en em sante. Aet e oa an noz war-raok ; al loar a oa dija war an diskar hag ar stered a steuzie a unanoù adreñv an dremmwel. Duoc'h e oa an deñvalijenn eget kent : lezet e oa bet an tantadoù da vervel ; ne chome mui nemet glaouennoù arruz a droe goustadik da ludu. Keralen en devoa bet a-greiz-holl ur merzad iskis ; kavout a rae dezhañ ne oa mui Morgan ouzh e selaou ; ne glevet mui e anal. Pishaat a reas e sell : Morgan en doa serret e zaoulagad e gwirionez.

- Morgan ! " a c'halvas.

Ar c'hlañvour a skrijas.

- Petra ' zo ? " a c'houlennas.

- Me ' soñje din e oac'h fatet ha n'edoc'h mui o selaou ac'hanon.

- Bezit dinec'h." eme Vorgan. "Gwall simpl ez on moarvat ; n'em eus nerzh ebet da fiñval hogen ho selaou a c'hellan ervat."

Keralen a laoskas un huanad a zisamm.

- Aon am boa zoken na vijec'h marv," emezañ.

- Kement-se a c'hoarvezo abred pe ziwezhat. Perak avat en em chalañ ? Va gwalc'h am eus bet eus ar vuhez."

Keralen a roas peoc'h adarre. Dezevout a rae e ve da loc'hañ adal tarzh-an-deiz antrohoz a-benn tizhout hep dale ur gêr elec'h e c'hellfe Morgan bezañ prederiet gwell eget en ur c'hamp soudarded. Piv a vije bet gouest d'e sikour e-touez e gompagnoned ? Mezeg ebet ne oa deuet gantañ. Ur c'hoantad en devoe da vont davet Lansoc'h. Hogen ne gredas ket. Hemañ a oa kousket evel ar re all emichañs.

Ha, ne vern penaos, ne vije ket evit e harpañ kennebeut. Mouezh ar c'hlañvour a savas adarre.

- Perak ne gendalc'hit ket gant ho tanevell,

Keralen ?

- Marteze ho skuizhin muioc'h c'hoazh..."

Un tammig mousc'hoarzh a zeuas war vuzelloù disliv

Morgan.

- Er stad m'on erru ne ra ket kalz a forzh, kensil."

Keralen avat a derme bepred. En diwezh evelato e stagas da gomz.

- Kenderc'hel a rin eta, d'ho tiduiñ avat, Morgan,

rak ar prouidoù a ervevis war-lerc'h va chomadenn e Kerneost

n'int ket gwall vourrus ha diegi am bez bepred d'o enforañ.

Miz Meurzh ha miz Ebrel a dremenas evel hen, Morgan. Distroet e oa tad Maria d'ar gêrbenn. Berañ a rae an deizioù hep gouzout din ha padal e hañvalent bezañ peurbadus pa gounen anezho a c'houdevezh. Ar c'hontrol e oa eus va buhez er Ranngêr elec'h e oa hir an devezhioù din, berr ha dister avat ar soñj a zalc'hen anezho ken en em c'houlennan a-wechoù ha bevañ pe huñvreal em boa graet. Krediñ ha goanagiñ a rae em biñe gelllet kenderc'hel da dañva da viken ar peoc'h hag ar wenvidigezh a oa bet va lod e Kerneost. Lansoc'h avat, abarzh pell, a zeuas d'am zrubañhañ adarre: lavaret e vije bet e trouksante e oa an Enezenn o vont da glask ur wech c'hoazh dont e darempred ganin. Hag evit parrat ouzh kement-se e iriennas va c'has da veajiñ a nevez. Bremaik e tisplegin, Morgan, penaos e itrikas va fellaat diouzh Maria evit ur pennad amzer. Ur barrad gwarizi marteze, daoust d'ar pezh a gonte din a-hend-all, a voe kiriek ivez, moarvat, d'e vennad.

Biskoazh kent n'en devoa Lansoc'h va aterset a-zivout va darempredoù gant Maria. Gouzout a rae emichañs en em garemp hag un tamm morc'hed am beze a-wechoù o soñjal ne oa ket va mignon ken diseblant ouzh Maria ha ma rae van da vezañ ; re sklaer e oa ar selloù a bare war Varia bep an amzer, pa grede moarvat ne daolen ket pled outañ ; ha me neuze en em sante kablus egiz p'em biñe laeret digentañ ar pezh en devoa profet din koulskoude. Hogen divizet e oa etrezomp, dre guzh, koulz lavaret, ne vije graet anv nepred ganeomp eus pezh a oa o chalañ pep hini a zevri bev e gwirionez. A-hend-all ne oan ket sur morse da gompren ervat e drivliadoù gwirion rak gouest e oa Lansoc'h d'en em ziskouez digas ha seder egiz ma kare ken e tiskreden meur a dro e oa marteze foll avalc'h evit bezañ kavet ar peoc'h en dilez en devoa graet.

Un devezh e oan chomet va unan er gêr. Aet e oa Maria d'ar stêr da gannañ al lien a-gevret gant unan eus ar mitizhien. Graet em boa un tammig tro war ar maez war-du ar c'hoad. Edo an delioù o paonez diglorañ ; glas tener e oant c'hoazh, hogos treuzwelus dindan bannoù hecl an nevez-amzer. A-greiz-holl, adreñv kammadro ar wenedenn, em boa spurmantet Lansoc'h azezet war ur pennskod ; diflach e oa, serr e zaulagad, egiz pa vije bet o vorediñ ; ul levr a oa digor en e gichen, war ar raden. Skrijal en devoa graet o klevout va c'hammedoù. Savet e oa en e sav ha ruziet en doa trumm.

- Amañ oc'h deuet, Keralen, hoc'h unan ?
- Strafulhet e seblante bezañ.
- Egiz ma welit, Lansoc'h, o pourmen emeon.
- Da reiñ kerse dezhañ e ouzpenis :
- Aet eo Maria d'ober kouez.
- Gwir eo, emezañ. "Dimerc'her eo hiziv."

Dilavar e chomjomp epad ur pennad. Korzhet hor boa endro war-du ar parker. En diabell e verzemp Kerneost. Tost deomp e oa un ti-heskennerezh ; deuet e oan di ur wech bennak a ziarak. Ledeneziz dieub a labourer ennañ hepken. Ne vezent gwelet nemet opad devezhioù kentañ ar sizhun. Diskar a raent gwez, heskennat hag ober plenkennou anezho. Neuze, d'ar yaou, e samment ar plenkennou-se ebarzh tumporelloù ha dezougen a raent anezho da Lezaleg, teir lev alese, d'o gwerzhañ da gilvizion ar gêrig-se.

- Lezaleg, a c'houlennis, "daoust ha n'eo ket bet ho eontr Tudi o vevañ eno." Un damsoñj am boa dalc'het eus pezh en devoa Lansoc'h displeget din ur wech bennak.

- Eo, end-eeun, a eilgomzas va c'hencil.

- Me 'gave din e fellie deoc'h mont d'e gavout.

- Aet on ivez, un nebut bloavezhioù zo, arack din en em enoustlañ e kendrevioù ar reter. Emaon esonj ober ur gwel dezhañ adarre a-benn an hañv. Marteze e c'hellfec'h dont ganin..."

Ardevel a reas, o klask Petra lavarout. N'ouien ket mat Petra ranken respont dezhañ. Lansoc'h avat a gendalc'has.

- Un den speredet dreist a zo eus Tudi, un den fur muoc'h c'hoazh. Talvoudus e vefe deoc'h moarvat ober anaoudegezh gantañ.
- Kozh eo ? a c'houlennis.
- N'eo ket gwall gozh : un tri-ugent vloaz bennak."

Tapet hor boa a-benn neuze an hent bras hag aesoc'h e voe deomp bale war ar chaoser. Difraañ a rejomp rak hogos kreisteiz e oa ha mennout a raemp bezañ degouezhet e koulz evit merenn.

Goude ar pred e tistroas Maria d'ar stêr gant ur boutegad kreziou da welc'hiñ ha menel a ris gant Lansoc'h er gêr. Aet e oa Konan da Lezaleg ivez da werzhañ loened e kenvarc'had ar pastell-vro ; danvez d'ober dilhad ha dafarou a bep seurt en devoa da bourchas ivez ; ne vije ket distro moarvat abarzh diwezhat da noz. Hon unan penn e oamp eta e Kerneost. Tomm grizias e vije an devezh e doare ha n'hor boa ket c'hoant mont da bourmen er-maez. Kavet hor boa repu e sal vras al levr-oueg e kornag an ti. Harpet e oa ar sal-se war bileroù penn derv kizellet. Goloet e oa teir moger anezhi gant astelladoù levrioù, skeudennet ha dornskrivet kalz anezho. Un daol hir hag uhel a oa bet lakaet etre daou biler, e skoz d'ar breneustr : hemañ a oa digor d'an ampoent, daoust d'an tommer, ha karget e oa ar sal a sklerijenn. Un daol all, izeloc'h, a oa stag ouzh ar vogor dindan ar breneustr end-eeun, a veskell ; lastret e oa en devezh-se gant kaeroù, podoù-liv ha pluannoù elcizh : a-hed ar sizhun dremenet e oa bet eontr Maria o studiañ hag o skrivañ eno.

Kregiñ a ris el levr kentañ a gouzhas dindan va

dorn. Bez e oa anezhañ ur roll eus al levrioù a oa bet kavadenet da geñver an Dizoloidegezh, gant anvioù ar ouizieion o doa embannet ha studiet anezho. Pezh a skoas va spered e voe lenn anv eontr Lansoc'h en o zouez, koulz hag hini ar c'helenner em boa klevet kel anezhañ meur a wech endev, Konomor.

- Dal! " emeve. "Amañ em eus kavet anv ho kelenner kozh, Konomor e oa kont anezhañ en devezh all. Petra eo deuet an den-se da vezañ ? "

Lansoc'h a oa o follennata un dornskrid kozh en devoa tennet diwar an astelloù. Mousc'hoarzhin a reas o klevout va goulenn.

- Marteze awalc'h n'emañ ket pell ac'halen ken-nebeut, " a respontas. "Klasket en doa skignañ menozioù direizhkredennek awalc'h el Ledenez. A-hervez, dres, e oa bet diheñchet gant hen levrioù zo en doa pleustret warno hag a blede gant an arboellerezh. A-du e oa gant an armerzh prevez ha esaset en doa lakaat izili uhelbosellgor ar vro da lodañ e venozioù. Gouez dezhañ e oa an armerzh prevez surañ hadiogelañ tu da ziorren al Ledenez. Ne selaoujod ket outañ avat. Berzet e voe outañ skignañ e venozioù. Koll a reas e blas kelenner e Skol-veur Loronan. A-benn ar fin e voe harzet, barnet ha kendonet d'an harlu.

- Marv eo bremañ ?

Lansoc'h a savas e zaoulagad diwar al levr e oa o flourañ ar c'hein anezhañ. Mousc'hoarzhin a rae bepred.

- Ne gav ket din. Emichañs en eus kavet repu e-touez gouezidi ar menezioù, un tammig larkoc'h, e kornog ar vro, nepell diouzh laniltud c'lec'h emañ va eontr o chom bremañ. Gennet eo ar gêr-se etre ar geunioù ha gwezeg ar menezioù hag epad pell e voe anezhi dreist-holl ur c'hreñvlec'h a oa mennet da zizarbenn argadoù ar ouezidi en amez wechall...

- Gwir eo, " emezon, "hoc'h eus kinniget din mont d'ober ur gwel d'ho eontr du-se hogen n'hoc'h eus ket displeget din penaos eo aet hemañ d'ober e annez keit all diouzh ar gêrbenn, ken pell diouzh an holl e gwirionez."

Lansoc'h a dermas da gomz epad ur pennad. Lakaet en doa endro e levr war an astelloù ha graet un nebeut kammedoù dre al levracueg, dic'hoarzh en dro-mañ.

- Diasas eo din kompren ervat va eontr Tudi, " emezhañ. "Mignon bras e oa da dad Maria evel d'am zad a zo marv arack din tizhout pemp bloaz. Eñ a zo bet kelenner va yaouankiz war un dro gant Urien. Eñ an hini eo en deus degaset ar peoc'h e kornog ar vro tregont vloaz zo, p'o doa kroget meuriadoù zo eus ar goadeg da argadiñ kendrevioù ar c'hornog, dre 'n arbenn ma oant marnoniet a-grenn da heul ur vosenn hag a zicouenne neuze ar jiboez e oant kustum da hemolc'hiñ. An atantoù distro a veze taget ganto peurvuiañ; tangwallañ a raent an tiez-annez, lazhadegañ an dud a oa

chomet war-lerc'h, kas ganto ar chatal en o c'hoadeier. Elec'h ober brezel dezho egiz ma raed e kornioù all ar vro, distrujañ anezho egiz c'hwenn pe sklavaat anezho, en doa kavet gwell skoulmañ emglev ganto ha pourchas bevañs dezho epad ma renje an naonegezh. Kinniget en doa zoken neuze dirak breudoù ar vro en em vod bep pemp bloaz o c'helenn war yezh al Ledenez hag o degemer en diwezh da geodedourion, dre 'n arbenn ma oa ar ouezidi-se, war a lavare, diskennidi eus gouenn gozh al Ledenez ha n'o doa ket bet amzer da zeskiñ ar yezh vroadel d'ar c'houlz ma oa erru an Drouziwezh.

Gwall varnet e voe e emzalc'h avat gant an darn-vuiañ eus Ledeneziz hogen ne voe ket klasket trabas outañ dre ma oa azaouezet gant an holl d'ar c'houlz-se endev.

Lansoc'h a davas epad ur frapad egiz pa vije bet o prederiañ. War-lerc'h an darnvodoù-se emezhañ, en doa kendalc'het e eontr gant e vicher epad dek vloavezhu : evezh-ier ha raktreser e oa e kendrevioù Gwalarn al Ledenez. Graet en devoa berzh eno ; savet en doa un ti e Pennharz ha dimeziñ en doa graet ; siwazh, ne oa ket bet ganet bugale dezhañ ; ne zeue gwech ebet da Loronan a-hend-all ha Lansoc'h en doa gwelet e eontr evit ar wech kentañ da geñver mary e gerent-er. Divizet e oa bet avat d'ar mare-se e tauje an emzivad d'ober e annez e ti Urien a oa o chom er gêrbenn kentoc'h eget en ur rannbarzh pell ha dizarempred awalc'h d'an ampoent.

Eilpennet e oa bet a-grenn buhez ha spered Tudi pa oa bet lamet trumm e bried digantañ en ur gwall-zarvoud : aet e oa e-kerz ar goañv d'ober un dro war ar mor, da drouziñ an aber. Ur barr-avel a oa savet pa oa o tont er-maez eus ar porzh ; trec'hollet e oa bet ar vag. Noz a oa anezhi d'ar c'houlz-se ; Tudi n'en doa ket gallet saveteiñ e wreg a oa aet kentizh d'ar strad ; gant poan vras e oa deuet a-benn da dapout an aod. Aziliz avat a oa bet bezet, da c'hwec'h vloaz ha tregont, ha biskoazh ne oa bet adkavet he c'horf.

- Hanter diboellet e voe va eontr gant an degouezhadenn spouronus-mañ, " a adkrogas Lansoc'h. " Dilezel a reas e garg ha kuitaat e di ; kantren a reas dre ar vro evel ur c'hlasker-bara ; an holl a grede e oa kollet e skiant gantañ. A-benn bloaz e oa distroet d'ar gêr, diroget ha dispennet e zilhad, kastiz e zremm, treut eskern e gorf, egiz un den gouez end-eeun. E vignoned a lakaas da grediñ e oa bet klañv e spered epad an amzer-se ha daskoret e voe e garg dezhañ. Hen seveniñ a reas c'hoazh epad bloaz. Neuze e roas e zilez da vat hag en em dennas en ur c'hendrev kravezel e Eusa ; seurt kendrevioù a gaver dreist-holl en inizi bihan tro-dro d'al Ledenez. Graet en doa eno studioù war ar feizdoueontezh ha beleget e oa bet."

Tevel en doa graet Lansoc'h adarre. eE aters a ris :

- Ha neuze, bremañ e lavaret din Petra eo deuet da vezañ ?

Lansoc'h a selle bepred er-maez. Hep treiñ e benn e respontas :

- Pledet en deus da gentañ gant parrez Lezaleg hag aet eo goude-se da chom en ur gêr a oa bet dilezet krenn gant kargidi ar stad en abeg d'ar balventoù a rae o reuz enni bep an amzer, Laniltud, am eus meneget meur a wech endev, tost d'ar geunioù ha d'ar goadeg kreiz. Deuet eo a-benn da wellaat stad ar c'horn-bro-se dre zizec'hiñ darn eus ar paludoù. Skiant-prenet en devoa gonezet, egiz ma ouzoc'h, e kendrevioù ar Gwalarn hag hen lakaat a reas da dalvezout eno. D'ar c'houlz-se e oan ur c'hrennard dija ha kemeret em boa ar pleg ha me emzivad da vont da dremen ur miz bennak en e ser epad ehanoù an hañv. Kalz a frouezh am eus tennet a viskoazh diouzh e zivizoù hag e gentelioù, Keralen," en devoa lavaret Lansoc'h en diwezh, "dacust ma n'oa ket ali gantañ bepred, evel maz eo kaer gortoz..."

Souezhus awalc'h eo marteze, Morgan, Lansoc'h avat a hañvale bezañ fromet o kontañ din kement-se : va c'huitaet en doa a-daol-trumm neuze hep kimiañ ebet.

~~~~~

P e n n a d 2

A n n i j a d e l l

Ur sizhun bennak war-lerc'h an diviz-mañ e oa distroet tad Maria diouzh Loronan da chom ganeomp un nebeut devezhioù e ti e vreur. Klasket em boa kaozeal gantañ ha goulennet em boa zoken keloù eus Loronan hag ar Skol-veur. N'ouzon penaos, krog e oan da enosiñ adarre ; c'hoant am boa gwelout pennoù nevez hag adkavout turmud ur gêr. Ken unanet e oan gant Maria ma kave din a-wechoù e veven va unan penn. Hefiñ a raen dont er-maez ac'hanon va unan ha kejout gant tud arall.

Tad Maria en doa respontet din gant kalz a hegaratted hogen n'en doa ket roet din da spiañ e c'helljen distreiñ du-se abarzh pell.

- Klafñ oc'h bet," emezañ. "Gwelloc'h eo deoc'h diskuizhañ mat. E deroù an diskar-amzer e vo gwelet ha gouest e vlot da labourat endro."

Kement-se ne oa nemet digarezioù toull awalc'h, a soñjen, ha kregiñ a raen adarre da ziskrediñ e oan dalc'het e Kerneost evel en un toull-bac'h. Eus an dra-se e voen peuz-sur pa zic'hañsas din nebeut amzer goude klevout tammoù eus ur gaoz etre Lansoc'h ha tad Maria.

D'ar beure e oa bet kaer anezhi hag aet e oan da ober un tammig tro gant Maria war ar maez. En endervezh avat e oan chomet va unan penn. Va danvez-pried - an holl a rae

va danvez-pried eus Maria - a oa aet betek ar Fav, ur vour-c'hig vihan e kreisteiz Kerneost, da bourchas un nebeut diankachoù, neud ha nadozioù, brochennoù ha gloan da nezañ a gav din. En devezhioù-se e oan prederiet gant an danevell en devoa graet Lansoc'h din eus buhez e eontr e Laniltud. N'oa ket evit krennañ ha fur pe foll e oa bet an den-se ha divourrus meurbet e kaven va entremar dre ma tiskoueze e oan levezonet muic'h-mui gant aergelc'h diskiant al Ledenez ha kredennoù dibocell ar re a veve war va zro. Da glask eta kompren petra e c'helle bezañ speredegzh trevariet ul Ledenezad evel Tudi em boa kaset ganin an dastumad barzhonegoù savet gantañ nebeut amzer goude ma oa bet peurc'hraet gantañ e amred foll, egiz ma lavare e unan e raskrid e levr. Un eilskrid dornskrivet gant e niz e unan e oa war astelloù levraoueg Kerneost. Hènezeh eo a gemeris.

- Fellet en doa din ober ur gwir embannadur eus ar barzhonegoù-mañ," en doa diskleriet Lansoc'h, "ha tennañ kant skouerenn bennak eus e oberenn hogen va eontr n'en doa ket teurvezet va selaou. Ouzh traoù all pouezusoc'h e ranke soursial ha ne felle ket dezhañ kemer poan gant hevelep merfeti."

Setu m'edon azezet e-harz ur c'hleuz en disavel, nes d'ar gampoullenn ; abardaeziñ a rae ; dassonet en doa korn-boud ar mesaer ; ar saout a vleje o tostaat ouzh ar c'hraou ; chilpat a rae ar c'hi a oa o tiwall anezho. Abaoe ur c'hardeur bennak e oan o lenn ; bras ha fraezh e oa skritur Lansoc'h, aas da lenn ; edon erru d'ar bajenn 15 ha setu pezh a lennen neuze :

A n n o r d e ñ v a l

Va c'has a rez war-raok hep pal,  
 Bugul didruez !  
 Ha me dall a rank pellaat  
 hep ehanañ !  
 Ur botoù dir am eus uzet  
 o kantren en anar ;  
 Kant kroaz-hent du am eus treuzet  
 E-kreiz an arvar ;  
 Arouez na sin n'em eus merzet  
 Dre 'n hentoù hir  
 Ha porzh na bod n'em eus kavet  
 nemet er penn

Ar memes dor,  
Ar genoù digor hag a skrign  
hag am ged hag am zizh  
hag am lonk !  
O bugul, daoust ha da c'houlou  
a splanno en tu all d'an nor ?  
Daoust hag hevelep riskl a gemerin ?  
Daoust ha bontañ a rin an nor  
Ha krediñ ez kalv en diwezh ?

Disheñvel awalc'h e oa awenadur ar pezhioù da  
heul :

Ha Doue a lavaras :  
Kas am eus ouzhoc'h, sac'hadoù avel,  
genaouision, c'hwezhet a sottoni,  
reudet a vrazoni, a embann hep mezh  
ez on ho mignon,  
disprizerion, barnnerion, kendaonerion,  
aotrouion d'ho soñj  
am empennit diwar ho skeudenn...  
Piv a anavez neb a garan ?

Izeloc'hik e lennen adarre :

Grit ho ped hag ho c'hoari :  
Ar bed ha'r c'hoari ' zo deoc'h,  
Tudoù, hep an trucher a c'hedit.  
Grit eus ho ped ar gened a c'hoantaan,  
ma vourrin o chom en ho touez...

Linennadoù taer a seurt se a lennen un tammig e  
pep lec'h el levr :

O va breur,  
nac'h an estlamm ouzh neb a c'houl,  
leun a foug, da drellañ mik,

farouelled, sigoterion, furlukined,  
a wisk truilhoù va galloud.  
Nac'h azeuliñ, nac'h asantiñ  
ha torr an idolennoù...  
Den n'eo mestr din ;  
Ned on mestr da hini.

Ret eo lavarout Morgan, ne oa ket ken boull atav  
barzhonegoù ar skrivagner-se. E-kreiz al levr, da skouer,  
e kejis gant ar gwerzennadoù-mañ :

O teur an noz klet ha klouar,  
sklerijenn doucel disgwel da niver,  
dreist d'an ec'honderioù glas  
am dougez hep skuizhañ  
davet ar Gouloù...  
Peur am gani  
ma welin da zremm wirion,  
ma roio da sell bezoud din  
ma ne vin mui ar skeud e oan ?

O lenn ar skrid-mañ e oan eta pa zeuas betek va  
diskouarn bourouell ur varvailhadenn. Daou zen a oa o tos-  
taat war an hent en tu all d'ar c'hleuz Abarzh pell e anavezis  
mouezhioù tad ha eontr Maria. Chomet e oant a-sav d'ur mare;  
moarvat e oant o sellout ouzh ar saout a oa o tistreiñ d'ar  
c'hraoù ; blejadennoù en em astenne a-dreuz ar maezioù sioul;  
sarc'hiañ a rae kammedoù ar chatal o vresañ ar geot. Pa voent  
aet e-biou e savas adarre mouezhioù an daou zen o kenderc'hel  
gant o c'haoz :

- Pegoulz eo c'hoarvezet an dra-se ? " a c'houlenne  
an eontr.

- Ur pemzektez bennak," a responte egile. "Evel ar  
wech kentañ ez eo degouezhet an ardivink, nepell diouzh IORonan  
war ar maez, tostik d'ur gêriadenn a zo anvet Krugell, o lein  
un dorgenn, m'hoc'h eus soñj mat. Gronnet e oa an ijinenn  
en ur pennad danvez teuzwelus ha kalz brasoc'h eget an hini  
gentañ, heñvel awalc'h ouzh ur skaf a-hend-all, gant un doare  
divaskell a bep tu. Plas a zo enni d'un den d'azezañ.

- Petra eo war ho menno ?

Termal en doa graet tad Maria.

- Kavout a ra deomp ez eus anezhi un nijadell ben-  
nak. Spi ar re o deus hen daveet eo e vo diskouezet an ijinenn  
-mañ da Germalen, pa ne ve nemet evit gouzout petra a zo anezhi  
dres - hag e kavo hemañ evel-se un dro bennak da dec'hout ganti...

Diskenn izeloc'h' o doa graet an daou zen ha ne c'hellis mui intent nemet un nebeut bommoù. Kompren a c'hellis evelato e oan sellet atav evel un den-gouestl. "Keit ha ma chomo ganeomp ne vo dañjer ebet moarvat," a lavare eontr Maria. Danc'houde e teue betek ennon un toullad lavarennou daztroc'het : "... e lakaat da reiñ keloù marteze... dimeziñ gant Maria... gortoz ur pennad c'hoazh... pellaat anezhañ evit ar poent, ne ouzer morse, marteze e teuint a-benn da c'houzout emañ amañ... diskoulmañ ar gudenn-mañ da vat maz eus tu."

Degouezhet e oa an daou zivizer e strad ar flagenn hag an avel ne zouge ket mui o c'homzoù betek ennon. Chomet e oan neuze da saouriñ va c'hwervoni betek an noz : implijet e oan gant an holl, gant Lansoc'h moarvat, a rae van da vezañ va mignon a-benn va zouellañ gwelloc'h a se, gant Maria marteze zoken a oa bet stegnet ouzhin evel ur griped d'am pakan. O c'hasaat a zlejer, a soñjen, hogen war un dro e veizen adarre ne c'hellen ket tremen hepto, e oant va sikour nemeti ; en desped din e vijen tremenet d'un treitour en Enezenn, du-hont ; un deiz ivez e vije kredet moarvat e oan marv : neuze e vije distrujet al Ledenez ha me a vije distrujet er memes amzer, ken e teuen da zezevout, Morgann, n'em boa ken disentez nemet skorañ mennad ar re a venne el Ledenez tagañ ha kas da get an Enezenn.

~~~~~

P e n n a d 3

L a n i l t u d

Tec'hout a ranken adarre eta dirak ar re a glaske kemer krog ennon endro. Tri devezh war-lerc'h, da veure, ez is en hent evit an trede gwech. Eontr Maria a oa aet betek lezaleg ha gallet en doa feurmiñ evidomp kirri skeñv ar c'hehonterezh a-berzh-stad, stlejet gant pep a skipailh a c'hwec'h ki. Maria a oa aze da lavarout kenavo din, doaniet eveljust, kalonek evelato ha frealzet en araok gant soñj an deiz ma c'hellfemp en em gavout endro ha chom a-gevret da viken.

- Bez dichal, karedig," emezi. "Abarzh pell e vi distro ha mont a raimp endro da laronan da vezañ euredet." Dour a oa en he daoulagad evelkent. Epad pell e oa chomet war dreuzoù an nor oc'h hejañ he skerb da gimidiñ diouzhin.

An hent a oa kempenn ha dalc'het e ratre ha skarañ a rae hor c'hirri a herr war-du ar c'hornog. Kaer e oa an amzer, hinon an oabl, Klouar an aer, ma oa un dudi beajiñ. Tremenet e oamp dre ur blaenn ; en diabell, un nebeut levioù



pelloc'h, e spurmantemp menezioù koadek, glas sklaer ha rouz tener d'ar c'houlz-se eus ar bloaz. An taolead a dreuzemp avat a oa pinvidik awalc'h, eleizh a zeñved hag a chatal ennañ, edus ha frouezhus dre vras war a hañvale. Da noz e chomjomp a-sav en ur gendrev elec'h e kavjomp bod. Anv Lansoc'h a oa brudet betek eno zoken, moarvat, rak mall a voe war an dud d'ober war hon tro kerkent ha ma klevjont piv oa va c'havandad. Heñvel awalc'h e oa ar gendrev-mañ ouzh re ar reter nemet e oa implijet eno un toullad labourerion sklav a blede gant an trevelloù izel, skarzhañ ar blodoù, skubañ ar straedoù, purañ ha kempenn ar binvioù douarc'honezerezh ; lojet e oant ebarzh lochennoù a gostez diouzh anezioù ar peurrest eus kendreviz. Maget ha gwisket mat e oant avat ha liv ar yec'hed a oa en o c'herc'henn.

Eno ivez ne gomzent nemet yezh o mistri.

Abred diouzh ar beure e loc'hjomp antronoz. An hent avat ne oa ket mui koulz en dro-mañ : un hent douar ne oa ken anezhañ, meinek ha skosellek, turimellek ha poul-trennek. Bec'h o devoa ar chas da sevel war grec'h, ma rankjomp diskenn diwar hor c'hirri en diwezh. Treuziñ a raemp a-benn neuze ur goadeg vras a sapr teñval, goulaouet a-boan gant sklerijenn an deiz, dilabous ha sioul marv, maz ae va c'halon bihan em c'hreiz o klevout hepken endro din anal berr ar chas o tiadaviñ. Div eur bennak e padas hon treizhadenn. A-benn ar fin, e lein ur c'hrec'h, a-dreuz keñvioù diwezhañ ar wezeg, e anadas ur gompezenn vras, bevennet e-harz ar menez gant gwern divent ha serret war an dremmwel, dek lev alese, gant linenn c'hlas dispis ar mor. En traon, etre ar genioù hag ar goadeg, e c'hourveze Laniltud. Di e tegouezhjomp un eurvezh bennak diwezhatoc'h.

Laniltud a oa ur gêr vihan, enni daou pe dri mil a dud. An darn-vuiañ anezho a oa keodedourion dieub ; kavout a raed enni ivez un niver vras awalc'h a sklaved a labour dreist-holl en taouarc'hegi ; korvoet stank e oa an taouarc'h e Laniltud ha tro am boe, e-doug m'edon o vevañ eno, da arvestiñ ouzh ambrougadegoù hir a girri sammet a daouarc'h a veze dezouget betek kêrioù ha bourc'hioù all ar rannvro. Darn all eus ar geizh a labour war lez ar goadeg ; eno e oa un tiheskennerez a bourchase plenk ; en e gichen e oa bet savet ur greantti a soze arrebeurti a bep seurt ; ennañ ivez ne oa implijet nemet sklaved a-berzh-stad. Lavaret e voe din e tenne ar pep brasañ eus ar geizh-se o orin eus meuriadoù gouez pe zamouez a veve c'hoazh er goadeg vras, war ar menezioù, e

gevred Laniltud. Dinoazh awalc'h e oa deuet ar poblañsoù-se da vezañ abaoe ma oant bet diouennet gant kleñvedoù-red ha brezeladennoù didruez kaset da bennhep arsav a-enep dezho. A-benn neuze, a-drugarez da eontr Lansoc'h dreist-holl, egiz m'em eus lavaret deoc'h, Morgan, o devoa annezourion ar goadeg vras darempredoù peoc'hus kenañ gant Laniltudiz. Diskaret e oa bet mogerioù-kêr a-hend-all ha dalc'het e oa spered kêriz gant o labour hag o greanterezhioù. Oberiant tre e oa Laniltudiz, kalet d'ar boan : fourgas a oa war al leurgêr vras gant simidi a garge a varc'hadburezh steudadoù hir a girri prest da loc'hañ war-du Begarvann, brasañ porzh-mor arvor ar c'hornog.

E penn ar blasenn-se, tost d'an iliz vras, edo ti eontr Lansoc'h. Un ti bras a oa eus an nevedenn; evel ma rae Lanoc'h anezhañ, gant ul liorz vras adreñv dezhañ.

Neuze eo e ris anaoudegezh gant Tudi. Skoet hor boa ouzh an nor hag evel ma ne zeue den da zigeriñ deomp en doa Lansoc'h pouezet war an dornell ; dibrenn e oa ar morailh ha gallet hor boa antreal . En diabarzh avat ne oa den ebet. Goude bezañ tankeet en trepas ha skoet adarre ouzh dorioù ar c'hambrou e oa erruet Lansoc'h el liorz. Eno avat, war ur bank maen, e oa azezet un den war an oad, gwisket en ur sae louet ; tarvoal e oa, aotennet pizh e zivjod ken e hañvale e zromm muioc'h kastiz hag askornek c'hoazh ; o lenn edo, gant poan awalc'h moarvat rak drc'hel a rae e levr pell diouzh e zaoulagad. Pa glevas ac'hanomp o tont e lakaas prim e skrid en e gichen ha treiñ war-du ennomp. Sevel a reas e selloù strezek Lansoc'h, en arvar epad ur pennadig.

- Te an hini eo eta, Lansoc'h," emezañ oc'h astenn e zorn dezhañ, sederast en un taol. "Keloù am boa bet ivez penaos e oas e soñj dont d'ober un dro dre amañ."

Stardañ a reas va dorn gant kalz a garadegzh.

- Me 'oar piv oc'h dija, aotrou," emezañ. "Va niz en deus disklariet din ho poa klasket repu en hor bro."

Hor blenian a reas trema an ti.

- Diskuizhañ a reot un tammig moarvat o c'hortoz ma vo aozet koan deoc'h. Faezh ez oc'h gant hp peaj, hep mar. Nag ho chas ? "

Lansoc'h a respontas e oant chomet arsavet dirak an ti.

- O c'has a rin bremañ da gondi kêr," emezañ. "Ne vin ket pell. A-benn ur c'hardeur e vin distro. Keralen a zalc'ho kompagnunezh deoc'h."

Tudi a stagas da vale dirazon d'am ambroug betek e levraoueg ; merkañ a ris e oa souchet, korfet dister ha treut egiz pa vije bet uzet gant ar vuhez.

- Deuit tre, aotrou," emezañ.

En em gavout a ris en ur sal vras, gant daou brenestr ledan a skoe war al liorz.

- Azezit," eme va ostiz o tiskouez din ur gador, dirak an daol-skrivañ. "Ne vin ket evit chom ganec'h siwazh. D'an eur-mañ e rankan mont d'ober un dro e kêr. Klavourion am eus da weladenniñ er mezegva..." Goude tevel e adkrogas : "O chom e Loronan oc'h bet eta ? "

Gouenn a reas keloù diwar-benn tiegezh Urien, ar vugale, ar Gêrbenn hec'h unan, ar Skol-veur. E zisaou-zanañ a ris eus va gwellañ ha va selaou a reas gant evezh, hep troc'hañ va c'homz ouzhin.

- Keuz am bez da Loronan a-wechoù. En em blijet e oan kalz du-se. Hogen dav eo dibab," emezañ en diwez en ur vousc'hoarzhin. "Ne c'hellan ket bezañ amañ ha du-se war un dro, 'keta ! E Laniltud avat ez eus ezhomm ac'hanon..."

Marvailhat a rejomp c'hoazh epad ur pennadig.

- Ma ! " emezañ, "mont a rankan evelato. C'hwil a c'hello teurel ur sell war al levraoueg-mañ ha marteze e kavot ur skrid bourrus bennak da lenn... Mar karit e c'hellot marteze ivez ober ur frapadig bale el liorz. Dudius meurbet eo al liorz d'ar c'houlz-mañ bloaz. Spi am eus ne enoet ket re."

Serriñ a reas an nor goustad war e lerc'h. Da gentañ e oan chomet azezet war ar gador : divi e oan gant al leviadoù hent am hedet abaoe ar beure, brevet va izili ouzhin diwar bezañ bet hejet-dihejet keit all ha dibaouez ebarzh ar c'hirri-post a oa bet feurmet deomp.

- Gant ma ne zaleo ket Lansoc'h re bell, " a zezevis.

Bannoù plaen an heol o vont da guzh a dreuze gwerennoù melen ar prenestr hag a live stummoù eston war al leur deñval. En em c'houlenn a raen pet eur e oa. Diaes e kaven bepred tremen hep curier ebet a nep doare el ledenez.

Div voger eus ar sal a oa goloet gant astelladoù levrioù, holl keinet kaer, war a seblante. Tostaat a ris outo ; an darn-vuiañ anezho avat a oa dizudi a-grenn, levrioù a gravez skrivet en ur jagouilhaj iskis ha digomprenus ; evelkent e tizolois un nebeut levrioù a skiant, ur ventoniezh, un hollvedoniezh, dezhi kealioù espar ha lu awalc'h ; dornskrivet e oa an oberennoù-se, evel an hanter eus al levraoueg, a gav din, gant kalz aked : an tresadennoù anezho a oa graet e liv ruz hag aour ha kaer kenañ da welout. Chom a ris da follennata ar skridoù-se epad ur pennadig ha prest e oan da zont er-maez eus al levraoueg pa verzis war an astell uhelañ etal al lein ul levr heñvel ouzh an hini am boa nevez lennet e Kerneost. Tapout a ris krog ennañ. Bez e oa anezhañ un dastumad barzhonegoù gant Tudi ; ennañ e kavis war-bouez nebeut ar memes pezhioù barzhoniezh am boa kavet er skouereñn eilskrivet gant Lansoc'h.

Neuze em boa azezet endro ouzh an daol-skrivañ hag e oan chomet da lenn ar pozioù-se daoust ma ne gomprenen ket kaer alies ar ster anezho. Daou anezho o doa dalc'het va evezh evelato. O c'hounañ a c'hellan c'hoazh hiziv, Morgan; setu int :

O dremm a splannder disi,
melezour a bep levez,
na c'hellen dioueriñ,
d'az terc'hel da viken
em biije harzet bed hag alvez;
evel ur spez ez out kilet
ha setu m'out troet en ur pred da ludu
skignet ha diverket en avel.

Un nebeut pajennadoù pelloc'h, war-dro diwezh al levr em boa lennet ivez :

A aroukrañs ouzh an Hini
hag a brof hag a lam,
hag a vroud hag a douell
daoust ha da drec'hif a rin
da zegemer erfin an noz
mamm ar marzh hag ar burzhud,
gouel an dremm
na weñvo biken !

mañ :
Evel un doare klozadur e oa skrivet ar gerioù-

O bed estren, kalet, dreistdiraez,
da gizallet em eus d'ober ac'hanout
ur maen prizius leun a c'houlou
da ginnig d'am c'hrouer.
Bremañ on skuizh avat
hag a beoc'h hepken em eus sec'hed,
betek ar marv, Aotrou.

Diaes e oa va spered o lenn hevelep gerioù kleuz, Morgan, stultennoù goull hep ster ebet. Lezet em boa ar skrid a gostez a-benn ar fin ha dre ar prenestr am boa digoret em boa heuliet ebatoù div voualc'h o beg melen a biklamme hag a nijelle war al letonenn ; bep ar mare e kuzhent e-kreiz gwenner ar gwez kerez e bleuñv ; sutal a raent, dudius,

en disgwel. Treiñ a ris va selloù war-du an oabl hinon : ur goabrennig wenn a riskle goustad a-dreuz al lijer. Intret e oan gant klouarijenn an abardaez ; tommoc'h ha bu-anoc'h e skoe ar gwad em gwazhied ; ur wenvidigezh hep he far a aloube va boud a-bezh. Kaer e oa bevañ, bevañ nemetken. Damsañjal a raen e brizh-prederioù Tudi hag e gen-diskianted : nag heugus e oant. Ar soñj eus Maria a glaskas ivez divorañ eus don va spered hogen hen argas a ris kerkoulz all : egiz dremm ur feunteun hud a yafe da vruzhun d'an disterañ stok e oa koun va eurvad kent em eñvor.

~~~~~

Pennad 4

Diviz ouzh taol

Ken na voe distroet Lansoc'h e oan chomet da huñvreal, re skuizh ha ma oan d'ober an disterañ striv. War-dro seizh eur hanter e oa deuet hemañ d'am c'herc'hat el levracueg hag a-gevret hor boa douget ar pakadoù d'al laez en ur gambr vras hanter c'houllo : ne oa enni nemet daou fled ha div arc'h gant un daol vras. Gwennrazhet e oa ar mogerioù, hep kinkladur ebet avat.

- Amañ e vimp lojet epad pemzektez bennak," en doa diskleriet Lansoc'h.

Goude bezañ renket hor c'hrezioù hag hon dafarou all en irc'hier e oamp deuet d'an traon. War-dro eizh eur hanter e oa ha serret e oa an noz abaoe ur pennad amzer endev. D'ar mare-se en doa tintet ur c'hloc'hig da zec'her-vel an dud ouzh taol. Pa oamp erru avat e oa an holl krog gant ar pred. En em gavout a ris etal Lansoc'h, e-skoaz da Dudi ha d'e zaou harper n'em boa ket bet tro da welout betek neuze : daou zen yaouank lent awalc'h a oa anezho, gwisket evel Tudi a-hend-all, ha chom a rejont dilavar peurvuiañ. Unan anezho a servije ouzh taol. Dister e voe ar boused a-hend-all : avaloù douar ha glazien gant un nebeut laezh trenk.

- Ret eo hon digareziñ," a lavare Tudi, "n'hon eus ket bet amzer da aozañ netra evidoc'h. Warc'hoazh e vo drusoc'h ar geusteurenn, spi am eus."

Ur bervig a oa e don e sell hag en em c'houlenn a raen hag-eñ n'edo ket o tejanal. Hogen, nann, sirius e chome. Gant sklerijenn rouez ar c'houlacouenn war an daol e seblante e zaoulagad sanket muioc'h c'hoazh en o zoulloù, lemmoc'h ivez tresoù e zremm. E zaoulagad glas a oa di-c'hoarzh ha sioul peurliesañ nemet e save diouto bep ar mare ul lugern taer ; ur jestr feuls a greñvae neuze e gomzoù. Hogen kement-se ne bade ket ; habask e addeue da

vezañ abarzh pell, ken aes ha tra, egiz p'en dije bet war-nañ e unan un emvestroni glok.

Tevl a rae an holl da gentañ. Lansoc'h a oa skuizh marv evel don va unan ha ne oa ket troet da gaozeal. Diaezet a-benn ar fin gant an dilavar em boa kroget da aters Tudi :

- Perak oc'h deuet d'ober hoc'h annez er c'hornbro warlerc'hiet-mañ," emezon. "Ho niz a gonte din ho pije gelllet dont da vevañ e Loronan."

Ur gwennc'hoarzh berr tre a oa paret war vuzelloù Tudi.

- Bezit dinec'h," a atebas, "n'em eus ket kollet gwall dra. Ur nebeut mizioù am eus tremenet er Gêrbenn hogen buan ez on aet faezh gant spered kintus lenneion ha gouizieion ar Skol-veur, o zabutoù hag o rendaeloù dizivezh, o erezioù hag o droukrañsoù c'hwezhet ha maz int gant ar foughe ha kignet bepred gant ar gourvenn ma n'oañ ket evit o daremprediañ na derc'hel mignon ebet en o zouez..."

Paouez a reas a gomz a-daol-trumm, adkregiñ a-benn ur frapadig :

- N'eo ket d'ar Skol-veur emeus kerse moarvat, d'un nebeut tiegezhioù am eus anavezet er gêr-se ne lavaran ket. Gwir eo ne c'hellan ket seveniñ kement a garfen er gêr-mañ. Hogen un tammig a vad am eus graet d'ar beorion ha d'ar geizh e Laniltud. Un tammig reizhded am eus diazezet marteze..."

Aet e oan neuze war gomz, taer, a-benn broudañ an den-se na intenten ket mat hag a hegase ac'hanon, oc'h ankouaat e oa va ostiz.

- Dre gaer ne dizhot biken diazezañ reizhded ebet," a c'harmis en ur dreiñ war-du Lansoc'h ; gortoz a raen da hemañ va harpañ hogen mat ha diseblant e chomas. "Kement a rit, 'meus aon, a zo mennet da ziboniañ ho koustiañs a ro debren deoc'h, netra ken..."

An daou harper eus Tudi a zisporbelle o daoulagad ouzhin gant ar sebez. Evit Lansoc'h, avat, me gave din e oa ur skleur damc'hoapaus e don e sell : taerijenn ur bugel ne oa ken va hini, kredapl. Tudi n'en doa ket respontet d'am daadenn da gentañ, stouet e benn gantañ egiz pa vije bet o prederiañ :

- En dra-se em eus doñjet a viskoazh, kredit ac'hanon, keneil," emezañ en diwezh. "Mallozh ar bed-mañ eo ne c'heller argas an droug nemet dre un droug arall, ha lemel un direizhder nemet dre sevel un direizhder all, egiz pa ne c'halljed stankañ un toull nemet dre gleuziañ unan all en e gichen : trevell dizibenn hag aner marteze. Ur c'hastiz didec'hus ez eo moarvat ha ne c'heller ket tamall ar re a zo sammet gantañ. Ha padal hag a gened hag a galon e-kreiz al loustoni hag al laoskoni zoken !" a gendalc'has Tudi gant fo. "Ar bed-mañ zo barnet, a zo gwir, hag echuiñ a ray un deiz,

marteze er goursav, marteze, da vat, en Drouziwezh. Ne vern, pasion an denelezh e vo an istor betek an dibenn. Hogen an eost a vo graet ha dastumet ar greun er grigno-lioù. Va roll avat n'eo ket mui kemer perzh war-eeun en aferioù ar vro-mañ, bezañ têt da vadelezh Doue ha d'e silvidigezh ne lavaran ket. Hogen ne vo silvidigezh ebet en hoalad-mañ d'ar bed na da hini ebet eus bugale ar bed -mañ. Doue a salvo hepken ar re o devo kredet en E anv, ar re o devo bet kalon d'E glask ha d'E gavout e-kreiz an arvar hag an deñvalijenn... Pep tra a vo bet adsavet d'ar re o devo bet fiziañs betek ar penn..."

Kenderc'hel a rae da gomz hag e selaou a raen gant souezh ha tregas egiz ur mezeg oc'h heuliañ ambren ur c'hlañvour dre ma tiwan ha ma kresk e don e empenn evel ur blantenn euzh a greiz ar paludoù. Ne veizen grik er pezh a lavare eontr va mignon. War un dro e c'heden Lansoc'h adarre oc'h en em c'houlenn penaos en em zalc'h-je dirak alfo an hini a gare evel un tad. Hogen difiñv e chome bepred, lakaet e benn etre bozioù e zaoarn, damserr e zaoulagad : daoust ha morgousket pe war zihun e oa ? Daoust ha kavout a rae ur ster da ziboeilgredennoù Tudi pe daoust ha ne grede ket o dislavarout ? Faezh e oan aet en un taol. Va unan e oan, estren dalc'hmat. Goulennet em boa digarez hag en em dennet e oan ebarzh va c'hambur.

~~~~~

Pennad 5

Trubuilhoù Tudi

Dihet en em gavis antronoz, droug-penn ganin, hag imoret fall awalc'h. Goude bezañ en em walc'het e oan diskennet d'ar gegin elec'h em boa kavet Lansoc'h a oa o peurzebrif e lein.

- Savet oc'h diouzh ho kwele a-benn ar fin," emezañ, hek e vouezh, mouzhet e doare.

- Petra 'vern deoc'h ?" a zichekis. "Dieub on a soñj din !"

- Moarvat," en doa respontet Lansoc'h en ur zerc'hel war ur mousc'hoarzh. "Evelato n'oc'h ket bet gwall seven ouzh va eontr da neizheur. Perak an diaoul hoc'h eus atahinet anezhañ en un doare ken vil..."

Ruziañ a ris. Mezhekaet e oan.

- Skuizh e oan emichañs, evel doc'h, ha mezv gant ar skuizhder..." a valbouzis.

- Krediñ a rafen awalc'h," a respontas Lansoc'h, siuloc'h, en ur sevel diouzh taol. "Deuit da zebriñ eta. Ne 'zo o vont da aozañ boued deoc'h."

En em lakaat a ris ouzh taol.
 - Petra a vo graet d'ar beure-mañ ? " a c'houlennis.
 - Emichañs ez aimp da ober un droiad e kêr tuchañ-
 tik. Perak ? Daoust ha kerse ho pefe da Gerneost ?
 - Ya, bez em eus," a anzavis, dipitet."N'oa ket
 dav va dispartiañ diouzh Maria."
 - A gav deoc'h? Ankounac'haat a rit emañ ho ken-
 vroiz o klask adpakañ ac'hanoc'h...
 - An dra-se am eus klevet. Un nijadell a oa men-
 net d'amdegas endro d'an Enezenn, 'keta ? Etal Loronan e
 oa douaret...

Spial a raen penaos en em zougfe Lansoc'h o veizañ
 e ouien kalz mui eget a soñje dezhañ moarvat ; e gwirioez e
 oa divarc'het. N'em boa diskuliet gwach ebet em boa selaouet
 ouzh diviz Urien ha Konan. Kenderc'hel a ris :
 - Hogen dreist ez it. Penaos e fell deoc'h ez afen
 va unan eus Kerneost betek Loronan ? "

Lansoc'h a laoskas ur c'hwibanadenn.
 - Va gourc'hemennoù a ran deoc'h, Keralen. Barrek
 ez oc'h ma ouzoc'h kement-se. Neuze avat e tlefec'h gouzout
 ivez ez eus degouezhet un nijadell all nevez zo, nepell di-
 ouzh Kerneost ne dro-mañ, en ur ganienn digevannez. An dra-
 se am eus dizoloet va unan ha n'em eus degemennet da nikun.
 Ne fell ket din spontañ va zud. C'hwil ' oar avat, Keralen,
 petra am eus dezastumet eus an degouezhadenn-se ? Kement-
 mañ : pe ez oc'h kenwall d'ar re a zo o klask ho lakaat da
 zistreiñ d'ho pro pe neuze ez eo ho kenvroiz paot galloudu-
 soc'h eget a soñjen betek hen peogwir int gouest da zazlec'hiañ
 ho pezañs en ul lec'h en un doare resis da sabatuiñ. N'omp
 ket e tailh da herzel ouzh ar re-se. An tec'h eo an tu neme-
 tañ deomp d'en em zifenn.

- Ha rak-se eo hoc'h eus va degaset er pastell-vro
 hanter-ouez-mañ ?
 - Marteze awalc'h," a anzavas Lansoc'h, dinec'h
 avat, "hogen," a ouzhpennas prim, "abegoù all am boa n'eus
 forzh penaos da zont emañ..."

Stagañ a reas da zezrevell din penaos en doa la-
 laet en e benn abaoe pellzo ober un enklask e rannbarzh
 Laniltud a-benn diskouez da bennadurezhioù Loronan a c'hou-
 devezh pegen gwallus e oa ar sklavelezh evit ar vro ha pegen
 mallus e oa diskoulmañ da vat kudenn ar ouezidi.

- Va contr," emezañ, "en deus bet kalz trubuilh
 o klask reizhañ gwall gudennoù Laniltud. Abaoe ugent vloaz
 bennak, abaoe balvent ar bloavezhioù '98 ez eo krog renerion
 al labouradegoù er gêr-mañ da implijout micherourion gaszh
 a zo aesc'h da gorvoiñ dre ma n'o deus tamm gwir ebet dirak
 lezenn ar vro. An disoc'h eus kement-se avat eo ez eo bet
 lakaet vak kantadoù a Ledeneziz dieub er gêr-mañ. Darn o deus
 ranket digêriañ d'ar rannvroioù arall pe da Loronan hep bezañ
 sur da gavout fred ; ar re all a zo chomet e Laniltud ha

bevet int gant sikourioù a-berzh-kêr ; hogen an dra-se n'
 eo ket ur bam rak boazañ a ra an dud dilabour ouzh an diegi
 ha krak-vevañ ne reont ken e-hend-all. Evit ar geizh n'eo
 ket gwell an traoù, kompren awalc'h a rit : korvoet int
 didruez gant o mistri ; ar re-mañ a zalc'h anezho ebarzh
 kampoù, o mag diwar welien, egiz moc'h ; gwanaet ha maz
 int gant an disvoued e vezont diouennet bep an amzer gant
 kleñvedoù-red spontus. Ne vern, awalc'h eo ober un hemol-
 c'hadeg bennak er goadeg evit pourchas brec'hioù nevez d'
 ar greanterezh !

- Piv a zo kiriek ? " a c'houlennis. "Me ' gave
 din ne oa ket ar renerion perc'henn d'o labouradegoù.

- Moarvat," eme Lansoc'h, "hogen setu an abeg
 eus o garventez evit darn : dizornet e c'hellont bezañ ma
 ne reont ket berzh. Awalc'h eo an aon hag al lorc'h evit
 o lakaat da vezañ kriz."

Echuet em boa debriñ. Lansoc'h en doa kroget da
 skaothañ al listri.

- Dre ma ne c'helle ket degemer seurt emgav ez
 eo deuet Tudi da enebiñ ouzh pennadurezhioù kêr dre amañ,"
 a gendalc'has Lansoc'h. "An dud dilabour en em roe da siou
 fall a bep seurt ha dreist-holl d'ar vezventi rak d'ar
 c'houlz-se ne oa ket bet berzet c'hoazh kenwerzh an diedoù
 alkolek. Ret e oa eta, da gentañ, reiñ labour da Ledeneziz
 evit daskoriñ dezho o dellid den, pezh a oa dic'hallus ma
 kendalc'hed da sklaveta er c'hoadeier. D'an eil, evel beleg
 e felle dezhañ plediñ gant ar geizh o unan hag o zreiñ d'ar
 feiz kristen. Renerion al labouradegoù avat a nac'has reiñ
 digor dezhañ en o c'hampoù. Divadez e oa ar sklaved ha di-
 vadez e tleent chm ; anez se e vijent deuet da vezañ stag
 ouzh Ledeneziz gant ur gerentiezh he dije roet brall a-benn
 ar fin da ensavadur ar sklavelezh. Dirak o aheurtrezh e
 skrivas Tudi da boellgor -ren Loronan evit klemm. Ar vistri
 labour d'o zro a zileurias ur c'hannad d'ar gêrbenn da
 c'houlenn e ve kaset kuit Tudi war zigarez e oa anezhañ ur
 beleg a vuhezgezh fall hag a lakae a-hend-all an dispac'h
 e kêr. Kement-se eveljust ne oa nemet gaou hogen eus ar gaou
 e chom breped an diskred ha spi o doa e c'hellfent kas o
 zro-gamma da benn deiz pe zeiz. Kazeg a rejont evelato rak
 difennet e voe Tudi gant pennoù kendrev gravezel Eusa elec'h
 en doa graet e studioù. Me ' gred em eus meneget ar
 gendrev gravezel-se endev. Ar pezh a zo arbennik dezhañ
 eo e reer ennañ studioù a vezegiezh war un dro gant studioù
 all a zoueoniezh. Rak-se dres e ra Tudi kement war-dro ar
 glañvourion emañ hag an dra-se a ziskleir perak ivez
 ez eo karet ha doujet va contr gant an holl er gêr-mañ..."

Lansoc'h a demnas un analadenn don.

- Kompren a rit bremañ perak on deuet emañ,
 Keralen. Levezon am eus e Loronan, a-drugarez d'am mignoned.
 Diwar an danevellskrid a savin e c'helle ar re-mañ harpañ
 va zezennoù hag o lakaat da drec'hiñ dirak poellgor-ren

ar c'heneil."

Lansoc'h a davas epad ur pennad.

- N'eus ket kant diskoulm da gudenn ar ouezidi" emezañ, prederiet e zoare. "Pe neuze o o lazhadeger betek an hini diwezhañ hogen an dra-se ne c'heller ket ober rak n'eo ket reizh ; pe e roer dezho darn eus douar al Ledenez d'en em ziorren o unan hogen an dra-se n'eo ket pleustrus rak skignet eo ar ouezidi e pep lec'h el Ledenez ha re fraost int evit sevel o unan ur sevenadur. Pe neuze e klasker o zreiñ da Ledeneziz penn-da-benn, pezh a zo gallus rak n'eus kemm gouenn ebet etrezomp hag int. Ar sklavelezh avat n'eo ket un diskoulm rak ne zisoc'h nemet da vreinañ ar vro penn-da-benn. Setu va menoz atav ha va seizh gwellañ a rin a-benn her c'has da benn."

Echuet en doa Lansoc'h gant e brezegenn. Abarzh m'em bije bet amzer d'ober an disterañ goulenn dezhañ en doa troet war-du ennon :

- Ha neuze, prest oc'h, Keralen ? Mont a raimp bremañ d'ober hon tammig enklask e kêr."

~~~~~

Pennad 6

Un dro e kêr



A-boan em boa gallet teurel ur sell war Laniltud o tegouezhout en derc'hent. Da lavarout ar wirionez, Morgan, gwall gerseet e voen gant ar weladenn a ris dezhi d'ar beure-se. Tavan-tek e oa Laniltud e-keñver kêrioù all eus al Ledenez. Bez e oa anezhi un nebeut straedoù strizh goloet gant un doare ter-du, a bep tu dezho steudaioù tiez unrezek, stag-ouzh-stag, hañval poch an eil ouzh egile, karrezek ha barrennet

o frenester. Meur a wech e wellis gwazed azezet war skifvier e toull an nor hag int o tommheoliañ, dameerr o daoulagad, diflach evel saout o taskiriat en ur prad.

Tri-c'hent metrad pelloc'h e oamp diboufet war blasenn an ti-kêr na oa anezhañ nemet un tamm savadur e mein-benerezh gant un nor-borched e prenn kizellet. Un dek metrad bennak dirazañ e oa ur puñs kozh gronnet gant ur gael. Lansoc'h a chomas a-sav en e gichen.

- Gortozit," emezañ, "m'em eus soñj mat e teuen

alies da c'hoari er c'harter-mañ, dreist-holl en un ti-debriñ..."

Goude bezañ arvestet pizh ouzh an tiez a oa renket tro-dro d'ar blasenn en doa garmet en ur eeunañ e viz etrezek ur stal dister, tostik i'an iliz, e-skoaz d'an ti-kêr :

- Setu eñ du-se..."

Un talbenn a oa livet e lizherennoù ruz a-us d'

an nor : "BOUEDVA"

- N'eo ket kemmet," a estlammans Lansoc'h. "Abaoe keit all koulskoude..."

Tra ma kerzhemp war-du ar stal e tisklerias va c'heneil din e oa kustum ez vihan da zont da c'hoari en ti-se pa veze glav ha n'ouie ket petra oher. "Div c'hoar a rae war-dro an ti-debriñ-mañ en amzer-hont," emezañ, "unan anezho a oa intañvez. Dres d'ar c'houlz-se avat he doa kollet ur bugel a oad ganin, an hini nemetañ he devoa. Marteze awalc'h he doa en em staget ouzhin en abeg d'an dra-se. Atav e lavare din e tennen dezhañ. Deuet e oan mat d'an div c'hoar-se, da sabatuiñ. Degaset e veze din c'hoarielloù ar paour kaezh krouadur a oa bet sammet gant ar c'hleñved bloaz pe zaou arak. Kar e oant ivez, a gredan, d'ar c'hloc'her a blede gant an iliz."

Dont a rejomp tre en ur sal-debriñ teñval awalc'h, izel he lein, harpet gant treustoù pounner ha pileroù greunvaen ; ouzh ar mogerioù e oa staget panelloù marellet, dislivet avat ha mastaret gant kaoc'h kelien, ken e oa start diverzout petra oa bet skeudennet warno.

Ne oa den ebet tro-aze. Lansoc'h a hopas a bouez penn : "Tud zo ?" hag a c'hortozas. Kammedoù a glevjomp en ur sal e-kichen ; damc'houde e erruas ur vaouezig kozh paket en ur sae zu hag ur skerb hir broudet a dizhe hogozik he seuliou.

- Petra fell deoc'h d'an eur-mañ, aotrounez," he doa goulennet en ur zerc'hel start he skerb war he bruched gant he daouarn, egziz p'he dije bet riv. "N'eo ket poent c'hoazh azc'hañ merenn..."

Lansoc'h a oa aet war he c'homz :

- Hama ! Mammig kozh, n'anavezit ken ac'hanon ?"

An hini gozh a oa chomet alvaonet.

- Me eo Lansoc'h, n'hoc'h eus ket soñj," a adlavare va c'heneil.

Mestrez an ti avat a zispourbelle bepred he daoulagad gant ar sebez.

- C'hwil 'oar mat, me an hini eo a zeue amañ da d'hoari en ho ti gwechall gozh..."

Ar vaouez a seblantas kavout hec'h eñvor endro en un taol.

- Va Doue ! Piv en dije kredet ! Biskoazh c'hoazh ! Anna !" a c'halvas d'he zro.

Ur serr-lagad goude en em ziskoueze he c'hoar. Daoust ma n'oant ket heñvel tre an eil ouzh eben ne c'hellen ket diforc'hañ mat an div c'hoar, en abeg d'o c'hozhni moarvat hag ivez en arbenn eus an dilhad kenseurt a zougent o div hag a roe dezho tost da vat an hevelep neuz.

- Sell 'ta piv a zo degouezhet amañ, Anna ! An hini bihan a c'hoarie du-mañ goude m'em boe kollet va mab. Lansoc'h, kounañ a rez ? "

Anna a save he fenn war-du Lansoc'h, diskredik, en ur grizañ he zal.

- C'hwil ' wel, moereb," eme Lansoc'h. "n'em eus ket ankounac'haet ac'hanoc'h a-grenn."

- Feiz ! Lansoc'h, biken n'em bije anavezet ac'hanoc'h eveljust, nemet ho mouezh hag ho taoulagad. Ya ! Dalit ! Ar memes mousc'hoarzh ha gwechall hoc'h eus bepred. C'hwil ' oa ur c'hwil en amzer-se avat hag a ouie tennañ diganomp ar pezh a c'hoantaec'h, n'eo ket gwir, Rivanon ? "

He c'hoar avat he doa gourc'hemennet dezhi.  
- Alo ! Anna, degasit ur banne chug-avalou d' hon ostizion... hag un nebeut krampouezh ma chom... Pec'hed e vefe deoc'h kuitaat an ti-mañ hep debriñ tamm." Rivanon a selle ouzhimp en ur vosc'hoarzhin tra ma stalie he c'hoar an daol evidomp. "Na chomit ket en ho sav. Azezit ur pennadig 'ta. Vak ez oc'h moarvat. Amzer zo : warc'hoazh e vo deiz 'keta ! "

Azezañ a rejomp ouzh taol etal ar prenestr.  
- Eus pelec'h emac'h o tont eta ? " a c'houlenne Rivanon.

Lansoc'h a grogas da ijinañ ur goñc'henn bennak da ziskleriañ perak en em gavemp e Laniltud en un doare ken dic'hortoz. Ar vaouez a huanadas.

- N'oc'h ket degouezhet amañ d'ur c'houlz mat, siwazh, Lansoc'h. Ur gêr reuzeudik eo ar gêr-mañ, ur gêr ma ren enni an diegi, ar vezventi, ar c'hoarioù fall ha me ' oar-me peseurt si fall c'hoazh..."

Rivanon he doa nesaet he c'hador ouzh an daol ha komz a rae bremañ a vouezh izel. He c'hoar he doa degaset deomp pep a volennad chug avalou.

- Se n'eo ket ar gwashañ, Lansoc'h. Klevet hoc'h eus anv moarvat eus ar balvent spontus a ziboblas kêr Laniltud gwechall nebeut amzer goude m'ho poe kuitaat ar c'horn-bro-mañ..." Rivanon a oa aet da serrin ar prenestr adreñv deomp arack kenderc'hel gant he c'haoz. Sachañ a rae he skerb, nervek, a reuziadoù. "Den ne oar c'hoazh," emezi, " ha ma vijec'h eus an taolead-mañ n'em bije ket diskuliet deoc'h, sur. Ne garfen ket lakaat ar spont da ren er vro hep diazeze ebet marteze. Klevet em eus lavarout avat gant ur micherour a vez o labourat e kamp Trogêr, c'hwil ' oar, an hini a zo bet savet evit ar ouezidi n'int ket gouest evit trevell ebet, er flagenn,

etal ar geunioù, e oa klañvet dec'h da noz ur bugel unnek vloaz gant ur poreadur a zo heñvel awalc'h ouzh an hini a vosennas ar vro ugent vloaz zo. Spi am eus avat n'eo ket gwir pezh a lavar..."

Lansoc'h a lezas ar vaouez da genderc'hel gant he c'haoz. Epañ a rejomp siouluk hor banne chug-avalou. Pa voe echu deomp e savjomp en hor sav.

- Kenavo, mammig kozh," eme Lansoc'h. "Laouen on bet ouzh hoc'h adwelout. Ur wech all e tistroin d'ober ur gwel deoc'h. Da c'hortoz n'en em chalit ket : n'eus bet kontet deoc'h nemet marvailhoù goullou emichañs.

An div vaouez kozh hon ambrougas betek an treuzoù.

- Deuit endro dizale," a lavaras Rivanon. "Koaniañ a c'hellfec'h ganomp un nozvezh bennak."

Lansoc'h he zrugarekaas hag a bellas a-herr. Liv an nec'h a oa en e gerc'henn.

- C'hwil ' gred ez eo gwir pezh a gonte ar wrac'h-se ? " a c'houlennis.

Lansoc'h en doa krizet e dal.  
- Esperout a ran n'eo nemet koñc'hennoù ur mezvier bennak."

En tu all d'ar blasenn e tiskennjomp gant ur straed strizh ha disochañ d'ul leurgêr all a oa dalc'het gant un nebeut labouradegoù ; eno e veze oberiet horolajoù - gros ha tuzum awalc'h e gwirionez, Morgan; gwelet em eus diouto a c'houdevezh ; bemdez e pakent un hanter-our dale ! - priaioù ha dafaroù metal a bep seurt, listri, kiboù, mel-zourioù ha me ' oar-me. Micherourion dieub a labourer enno, hervez a lavaras din Lansoc'h.

Pellloc'hik e tiboukjomp war ur savenn ec'hon a valire a-us d'un draonienn. Er strad anezhi e troidelle ur stêrig a lugerne dindan heol miz Ebrel : gwez elv uhel a greske war he ribloù, hanter dibourc'h c'hoazh ha damrouz o deil rouez ; kriz e oa bet ar goañv. Tarzhet e oa avat broisoù an haleg a zouge adal neuze gwiskadur skañv o glasvezh tener. En tu all en em astenne ur grec'hienn hir a denne awalc'h d'ul lestr, gant e aros hag e staon, peget ouzh he zor foulinenn deñval ur saprenneg, brizhellet he gorre avat gant flammennoù al lann nevez bluniet.

Goude bezañ diskennet er saonenn e pignjomp betek kern an uhelenn-se. Pa voemp erru el lein e tizolojomp en tu all, e-harz ur tornaod serzh, ur blasenn hir en em lede betek an dremmwel ; lagennoù lufr a lintre amañ hag a-hont, rannet an eil diouzh eben gant racsklegi divent. Tizhet hor boa ar geunioù. Lansoc'h a oa chomet a-sav.

- Selaouit," emezañ.  
A-greiz an didrouz e sone notennoù flour ha digenvez ar gougoug. Ur merzad trumm a velkoni en doa karget

va c'halon.

- Da belec'h e fell deoc'h mont eta ? " em boa goulennet ouzh Lansoc'h.

Hemañ n'en doa ket respontet din da gentañ : oc'h arvestiñ ouzh ar vro tro-war-dro e oa.

- Dre amañ e c'heller tizhout Trogêr ; me ' gred ez eus un hent-treuz dre ar c'hoad," a lavaras en diwezh, dezhañ e unan, hep teurel perzh ebet ouzhin.

An enkreuz a savas ennon pa veizis e oa mennet va c'heneil da vont betek ar c'hamp.

- N'emaoc'h ket ganti, Lansoc'h," a c'harmis. "Ha ma vefe gwir komzoù ar wrac'h..."

Lansoc'h avat n'en doa ket lezet ac'hanon da da echuiñ va frazenn. Aet e oa war-raok ha ranket em boa mont d'e heul. Goude bezañ treuzet ur c'hoadig pin en em gave dirazomp e oamp degouezhet d'ul laneg vras a wiske kein ar grec'hienn penn-da-benn. Un nebeut tuchenoù mein-skient, glas-du, a save amañ hag a-hont, gronnet gant bodoù bezv mistr ; islonkoù a zigore a-drumm dindan hor c'ham-medoù ; en don anezho, e-harz mogerioù serzh, e chage an dour gwer d'ifiñ, yen evel lagad an naer.

- Ar mengleuzioù," a zisklerias Lansoc'h. "Dilezet int a wergo. Amañ e labourer ar geizh gwechall."

Ur bod pin a dreuzjomp adarre. A-greiz-holl, e penn ar grec'hienn, e paras ar c'hamp, serret adreñv e vegerioù-peulioù uhel, diwallet er pevar c'horn anezhañ gant tourioù-geñ. A-us d'an nor-borched a roe digor dezhañ e oa bet gwintet ur mell liketenn livet e lizherennoù flamm. Lenn a c'helled aes a bell :

GWAREZVA AR OUEZIDI. AMAÑ E REN HEZ HA DIOGEL. Lansoc'h a wiskas war e c'hoant c'hoarzhin.

- Darn a oar farsal evelato," a skrignas. Chom a rejomp da spiañ ar c'hamp, kuzhet adreñv ur bod lann. Diverzout mat a raemp an hent a gase dezhañ, a gleiz, eus tu Laniltud.

- Biskoazh c'hoazh!" a c'hrozomlas Lansoc'h a-daol. "N'eus gward ebet dirak ar porrastell ha soudard ebet kennebeut e lein an tourioù."

Gant souezh e veizis e lavare ar wirionez. - Tec'het int emichañs," a eilgomzis. Ha kent ez eas bihan va c'halon em c'hreiz : komzoù ar wrac'h ne oant ket gaou eta. Ken fromet e voen gant an anataenn-se ha na c'hellen ket dizarbenn m'en em gavis dic'houest a-grenn da rannañ ur ger ouzhpenn. Lansoc'h an hini eo a zisplegas ar soñj n'oañ ket evit anzav ouzhin va unan.

- Kement-se n'eo ket reizh, Keralen. Ur c'hleñved a zo oc'h ober e reuz er c'hamp-se. Dav eo din mont da welout diouzhtu,"

E aspediñ a ris da chom hep ober. "Ne viot ket gwell goude, n'oc'h ket mezeg ha pa vijec'h, diremed eo seurt kleñvedoù en ho pro." Hogen ne selaoue ket ouzhin muioc'h

eget ouzh ur bugel. M'en em grennis en desped din da vont d'e heul : anez kemer Lansoc'h da arouezier, Morgan, e vijen bet kollet el Ledenez evel e-kreiz ar gouelec'h.

Pa voemp erru war-hed daou-gant metrad bennak diouzh ar c'hamp e chomas Lansoc'h a-sav en un taol, ma voen dienkreuzet evit ar pred, ha treiñ a reas war an tu dehoù.

- Deomp du-se," emezañ o tiskouez din unan eus an tuchenoù mein-skient a oa strewet penn-da-benn ar gre-c'hienn. "A ziwar laez e c'hellimp merzout pezh a c'hoarvez er c'hamp."

Krapat a rejomp betek lein ar grugell. Diouzh eno, egiz ma soñje da Lansoc'h; e tapjomp gwel war ziabarzh ar c'hamp. Digenvez a-grenn e oa hemañ war a hañvale ; den ebet n'en em ziskoueze etre ar foukennoù dister toet gant korz ha dibrenestr.

- Daoust ha tec'het kuit e vefent ivez ? " en em c'houlenne Lansoc'h.

N'en doa ket peurlavaret ar c'homzoù-se pa voe digoret dor al lochenn dostañ deomp : ur c'hrouadur hogozik noazh, gant un tamm pilhenn endro d'e zargreiz, koeñvet e gof, treut eston e izili avat, re-bar d'ur gevnienn, e zaoulagad sanket en o zoullou, ma seblantent prest da darzhañ, en em ruzas ar-maez war e grabanoù ; war e lerc'h en em stlejas un tasmant all a denne d'ur vaouez, dispak he blev gwenn, endro dezhi tammoù truilhoù a-ere gant fisel ; o daou e chom-jont en o sav epad ur serr-lagad, war api, egiz p'o dije dou-jet na vije deuet unan bennak war-dreuz d'o soupren. Erfin e lavare ar vozogell-se d'ar c'hrouadur :

- Vie tsit, vie tsit..." Pegañ a reas e dorn ar bugel ha gwelikañ ma c'hellent e stagjont da redek betek ur feunteun a oa le-c'hiet nes-awalc'h ouzh ar voger-beulioù ; kluchañ a re-jont en he c'hichen ha lapañ an dour evel loened.

A-boan ma oant distroet d'o lochenn e tibouke daou zen dre alez kreiz ar c'hamp ; gwisket e oant-veul labou-rierion sklav Laniltud hag ambrouget gant pep a vell ki a zalc'hent en o roll. Dre ma tremenent dirak ar foukennoù e c'harmant ur bomm e yezh ar ouezidi ha na dizhen ket in- tent ervat. Pa voent pellaet dre un alez all e kuzulikas Lansoc'h e pleg va skouarn :

- 'M eus aon, Keralen, ez eo kroget ar c'hleñved -red d'ober e reuz. Ar re-se a zo o tifenn ouzh ar ouezidi dont er-maez eus o lochennou war zigarez ebet. Salv na vo ket ret ober kemendall emberr e Laniltud..."

Diskenn a rejomp diwar herr eus ar grugell ha pakañ an hent a gase da Laniltud. Bale a raemp, tizh warnomp. Er gamdro gentañ, e don ur ganienn, e oa gouezidi all o touarañ kelanoù gronnet ebarzh seier gros ; ur maskl a oa war o dremm. Neuze e krogjomp da redek evel tud foll etrezek kêr.

~~~~~

B a l v e n t

Un eurvezh bennak goude e tiraezjomp an neve-
denn. Tremenet e oamp dre rakkêriou an hanternoz, e-biou
da c'hreanterezhioù ar sklaved. N'hor boa merzet dizurzh
ebet enno.

- Ne ouzont netra emichañs," a zisklerias din
Lansoc'h. "Ar re nammet, gwraez, kozhidi ha bugale hepken
a vez dastumet e Trogêr."

Kentizh ha ma voemp degouezhet en em strinkas
Lansoc'h er sal-studi gant ar spi da gavout e contr eno.
.her c'havas ket avat. Ergerzhout a reas prim an holl sa-
lioù. En aner. N'edo ket Tudi er gêr.

- Tost kreisteiz eo koulskoude," a verkas Lan-
soc'h. "Amañ e tlefe bezañ." Termal a rae, o tankeal en tre-
pas. En diwezh e lavaras : "Chomit amañ, Keralen. Kemerit
ul levr hag it da lenn el liorz. N'oc'h ket evit hor sikour
en ur seurt degouezh."

Redek a reas er-maez. Va unan e chomis ha va me-
noz a ris d'ober hervez e ali. Diwar astelloù al levraoueg
e tapis endro dastumad barzhonegoù Tudi end-eeun ha mont a
ris d'azezañ war ur bank-maen, el liorz, adreñv an ti. Ne
ouijed faltaziañ bourrusoc'h andred d'ar c'houlz-se eus ar
bloaz, Morgan, gant freskter al letonenn c'hlas ha flammer
ar bleunioù nevez digloret, jonkilhez melen mouk ha melen
gwer, jenoñ ruz mouk; pelloc'hik, er penn all, en em veske
krev ruz ar c'hastilhez ha blev roz liant an tamariskl a he-
je goustadik o barroù dindan aezhennoù klouar an nevez-amzer.
Ur voialc'h hec'h unan a zeuas da biklammat war al letonenn,
e-harz va zreid hag a redas kuit d'en em skoachañ er bodoù
frondus. Douster an natur am gronne ha, padal, ne c'hellen-me
kaout peoc'h ebet. Al levr a oa chomet serret war va barlenn
ha ne soñjen ket hen digeriñ. N'oa ket evit diverkañ diouzh
va spered an daolenn euzhus eus ar bugel marnaoniet hag e
vamm, nag an hini ken heugus all eus an doullerion-veziou
masklet a stlape o samm doñjerus e don ar foz.

A-benn argas ar gwall-ehvorioù-se em boa klozet
va malvennoù ha gant holl nerzh va empenn e klasken degounañ
neuz ha tresoù Maria, egiz p'em bije karet dedennañ va danvez
-pried betek annon, devoùdañ he bezañs em c'hichen ha klask er
bezañs-se irealz d'ar strafuilh ha d'an anken am c'hriage.
P'em boa kroget gant va deskoniadur en Enezenn, Morgan, e
oan bet gourdonet gant Omour ouzh seurt embregerezh. Hogen
gwenn e voe va striv en dro-mañ. Goullo e vare va spered evel
ur gouelec'h ha ne vriataen nemet an avel : daoust hag anave-
zet em boa zoken ur plac'h a oa hec'h anv Maria ? Nann, dirak
an Ankoù ne oa mui lec'h em c'halon nemet d'ar Spont. Ken kri-
z

merzad a ziwaskis neuze ma savis em sav da hejañ ar broud
am flemme.

- Dav eo din tec'hout diouzh ar gêr villiget-
mañ," a zezevis.

Tennet e voen diouzh va gwall rambre gant gwigour
dor al liorz o treiñ. Tudi a oa dirazon.

- A ! " emezañ egiz pa vije net disammet." Amañ
emaoc'h ! Ha Lansoc'h, va niz ?

- Aet eo d'ho klask," a respontis.

- Me 'wel. Gouzout a rit moarvat pebezh dar-
voud braouac'hus a zo nevez en em gavet er gêr-mañ, bugale
gaezh ?

- Ervat e ouzomp," a eilgerias. "Un dro hon eus
gruet betek Trogêr."

Tudi a hejas e benn gant tristidigezh.

- N'eo ket eno e kavot ar vegenn eus hor seve-
nadur, actrou. Penaos avat eo savet deoc'h ar soñj mont
betek du-se ?

Diskleriañ a ris penaos e oamp tremenet e stal
an div vaouez kozh ha penaos e oamp bet disaouzanet ganto
a-zivout an darvoud.

- Ma ! " eme Dudi, dinec'het un tamm e doare,
"a-drugarez Doue ne oar ket c'hoazh an dud peseurt gwalenn
a zo o kinnig o reuziañ. Re wir eo siwazh, bugale : krog
eo ar vosenn da wastañ ar gêr-mañ endro. Ne felle ket din
krediñ dec'h. Hiziv avat... Ma ne zeuomp ket a-benn da
c'hourizañ ar balvent-mañ e vo sammet nouspet kantadoù a
dud gant an Ankoù emberr..."

Ur jestr a zic'halloud a reas, kemm kaoz.

- Kreisteiz e vo abarzh pell," emezañ, "ha n'
eus bet azet tamm boued ebet en ti-mañ. Dav eo deoc'h va
digareziñ : gant an darvoudoù... Kaset em eus va daou har-
per diwar herr da Lokeltaz ha Maezker da gemenn e ve degaset
amañ hep dale daou rannvezen da zerc'hel an urzh. Tec'het
eo kadoriad poellgor kêr d'ar beure-mañ abred..."

Digeriñ a reas an nor. "Deuit tre ha debret un
tamm : va ostiz ez oc'h ne vern penaos ha dav eo din soñjal
ennoc'h."

Mont a rejomp tre er gegin ; Tudi a lakaas ur
skudell hag ur c'hib war an daol ha va fediñ a reas d'azezañ.

- Kemerit un tamm kig yen," emezañ.

En em servijout a ris.

- Ne zebrit ket ? " a c'houlennis.

- N'em eus ket ezhomm," emezañ. "Trawalc'h am
eus debret d'ar mintin-mañ."

Chom a rae en e sav dirazon, antellet holl,
anat e oa, egiz pa vije bet o c'headal. Skrijal a reas en un
taol pa voe bet skoet ar mail ouzh an nor.

- Lansoc'h an hini eo," a c'harmas Tudi. "Spi am
eus da vihanañ."

Ha Lansoc'h an hini e oa, poultrennet holl e

zilhad, spelc'het e zremm gant an heol, berr e anal. Dam-c'houde edo ganeomp er gegin. Diskenn a reas dezhañ ur volennad dour hag evañ a-dreuz-kil.

- Galoupet em eus awalc'h," emezañ,"ha sec'hed am eus." Treiñ a reas war-du e eontr.

- N'em eus ket ho kavet. E pelec'h edoc'h ? Ha penaos hoc'h eus gouezet ivez pezh a oa c'hoarvezet ? " a c'houlennatas.

- Dre zegouezh a-grenn, Lansoc'h, evelloc'h. Kejet em eus gant ar soudarded a rankje bezañ bet war ziwall er c'hamp hag a oa o tec'hout d'an ampoent.

- Pelec'h emañ ar re-se bremañ ?
- E luti Kerizel, c'hwi ' oar, war hent Begarvann, arack tizhout ar maeziou. Keran a zo e penn al luti-se.

- E anavezet em eus e Ioronan," eme Lansoc'h.
"Un den ouest eo ha fiziout a c'heller ennañ. Petra a zo bet divizet gantañ ?

- Da gentañ bac'hañ ar soudarded o deus dilezet o lec'h. Ouzhpenn ar gwall o deus graet o chom hep sentif ouzh urzhioù o rener e c'hellont degas ar poreadur e kêr. Ha d'an eil, daveiñ ur c'hevrennad soudarded da sezizañ ar c'hamp, kas boued ha louzeier, maz eus tu, d'ar boreidi.

- Me ' gred ez eo fur," eme Lansoc'h.
- Me ' gred ivez," a adlavaras Tudi.
Lansoc'h a reas un nebeut kammedoù a-dreuz ar pezh, sellout a-benn a-greiz-holl ouzh Tudi.

- N'eo ket chañs, va eontr. Trawalc'h a drubuilh hoc'h eus bet a-hed ho puhez koulskoude ha n'oc'h ket mui yaouank en dro-mañ."

Tudi a chomas da brederiañ.
- N'ouzoc'h ket Lansoc'h, emañ oc'h en em c'hou-lenn hiziv ha n'on ket bet faziet e meur a geñver o chom hepken war dachenn ar gravez evel m'em eus graet betek hen. Aner eo bet evit darn va abostolerezh er gêr-mañ dre ma choman dic'halloud a-grenn dirak emgavioù zo. Dejanal Doue eo goulenn digantañ c'hoari ar roll a zleomp-ni c'hoari hag arc'hiñ digantañ traoù zo e degouezhioù zo. Ebat eo stourm ouzh ar vezventi e-touez tud reuziet gant an dilabour. Moarvat n'eo ket dienez Laniltudiz ken gwazh hag hini ar Geizh, pell emañ zoken ; didalvez en em sant avat gwazed ar gêr-mañ peogwir n'o deus mui lec'h ebet en hor c'hevredigezh hag en died e vennont, dreist pep tra, disoñjal o stad. N'eus ket bet klasket nepred uhelaat o spered ; me 'm eus esaeet hen ober ; dister avat va galloud e skoaz da hini ar vistri-c'hreanterezh ; ar re-mañ avat a zo kiriek. Dre guzh hag a-enep da lezennoù ar stad o deus pourchasat alkohol da wazed Laniltud ; c'hwi ' oar a-hend-all pegen nebeut a forzh a reont eus levierezh-kreiz al Ledenez ; int ivez o deus o broudet d'en em reiñ d'ar c'hoarioù. E-keit-se, 'keta, n'o deus trubuilhe bet ganto."

Azezañ en doa graet Tudi. Skuizh divi e oa, a gave din, liv an doan en e gerc'henn, e zaouarn o krenañ un disterañ.

- Un dra a anzavin ouzhoc'h, Lansoc'h. A-wechoù e kav din, siwazh, ez on ket bet pilpouz un tammig o vennout a-grenn bezañ un den gravez rik. Daoust ha n'eo ket bet kollet a-grenn va labour ha va foan amañ ? Daoust ha n'em eus ket bourret o prezeg er gouelec'h, a-benn sioulaat va askre nemetken ? Goap eo komz eus reizhded ha karantez pa dremener an nesañ da amprevaned evel ma reer er vro-mañ e meur a lec'h."

Huanadiñ a reas.
- Daoust ha re abred e teuy bepred kemennadurezh an aviel ? Daoust hag ar bed-mañ a zo barnet ne vern penaos da vont da goll peogwir ne c'hellor biken trec'hiñ an Drouk-spered anez kemer e armoù ? Pe daoust ha re nebeut a feiz hor bo betek ar penn ? "

Tudi a blegas e benn egiz pa vije bet flastret gant samm e donkadur ha me, Morgan, a gemere truez ouzh ar c'hoziad-mañ a soñje e fin e vuhez n'en doa ket heuliet an hent a zleje bezañ pleustret a viskoazh. Lansoc'h avat en doa klasket e zinec'hiñ.

- Alo ! Va eontr," emezañ, "perak magañ morc'hed hep abeg egiz ma rit ? Ho kalvedigezh e oa hepken diskouez d' an dud petra oa un den Doue. Rummadoù a zeuy a c'hello estlam-miñ ouzhoc'h hag heuliañ ho roudoù. Hol labour-ni eo prientiñ ar bed d'ar rummadoù-se ha plijet gant Doue n'en em gollimp ket o kas da benn al labour omp bet graet evitañ."

Ur mousc'hoarzh dister a sklaeraas dremm an hini kozh.

- Me ' gred emañ ar wirionez ganit, va niz. Degouezhet out e poent d'ur c'houlz ma oan prest da fallgalo-niñ. Doue an hini eo en deus da heñchet betek Laniltud en devezhioù-mañ."

Savet e oa en e sav.
- Deus ganin. Er gwall zegouezh-mañ e roi din ur sikour dibriz. Anavezout a rez Keran, a lavarez..."

~~~~~

Pennad 8

Er redva-kon

Troc'het e oa bet komzoù Tudi gant storlok ar mailh o skeiñ ouzh dor ar straed.

- Gwivegi a vije distroet ken dillo se! Biskoazh c'hoazh!" a c'harmas Tudi. "It da welout," a ouzhpennas o treiñ war-du Lansoc'h.

Hemañ a redas betek an nor. Ur serr-lagad goude



edo deuet endro gant Gwivegi, unan eus harperion Dudi.

- Graet eo ho tro ganeoc'h dija ? " a c'houlennas eontr Lansoc'h.

- Gelllet em eus feurmiañ ur c'harr-post, Tudi," eme egile, "an hini oc'h deuet gantañ da Laniltud, dres," a ouzhpennas o treiñ war-du Lansoc'h.

- Daoust ha gwelet hoc'h eus Meven, rener rannvezen Maez-kêr ? " a atersas hemañ. Gwivegi a respontas en doa graet hag en

doa displeget dezhañ penaos e oa an traoù e Laniltud.

- Petra emañ e soñj ober da barrat ouzh ar walledenn d'en em ledañ ? " a c'houlennas Tudi adarre.

- Pezh hoc'h eus kinniget hoc'h unan Tudi : gourizañ a-grenn Trogêr ha Laniltud keit ha ma pado ar vosenn ; tri-c'hant soudard a erruo fenozh emañ. War un dro en deus daveet un douger-lizhiri da Blouvael da c'houlenn e ve purchaset bitail awalc'h da vegañ Laniltudiz epad ar seziz a rankint andur.

- Doue ra viro ouzh ar balvent-mañ a badout pell," a hiboudas Tudi. "An dalc'h e vo derc'hel an urzh ; dav e vo da gentañ lemel digant ar wazed an alkol a c'hellfent kuzhat er gêr."

An holl a roas peoc'h. Gwivegi a oa o termal egiz pa vije bet diaes e spered.

- Gant un dra ha n'em boa ket soñjet enni da gentañ on bet gwall-mac'het o tistreiñ, Tudi. C'hwi 'oar peseurt deiz omp hiziv ?

- Ya, eveljust, d'ar merc'her triwec'h. Perak ?

- Ha kement-se ne lavar netra deoc'h ?

Tudi a savas trumm e benn.

- Gwir eo, kensail, devezh ar redadegoù-kon e kador-an-diaoul ez eo hiziv..."

Lansoc'h a zisklerias din e veze kustum gwazed dilabour Laniltud d'en em vodañ bep merc'her war lanneier Kador-an-diaoul da c'hoari redadegoù-kon.

- Ma ne rafent nemet se," eme Dudi oc'h hejañ e ziskoaz. "Hogen en em vezviñ a reont alies gant odivi aozet dre guzh en atantoù tro-dro war ar maez hag a vez gwerzhet ker ruz, a-hervez ; lod a lavar e vez prenet a vras gant ar vistri-c'hreanterezh ha darnaouet ganto d'ar wazed dilabour. En devezh-mañ e tistro an darn-vuiañ eus ar re a vez gant ar redadegoù meyv dall d'ar gêr. Riterezh ha kann a sav etrezo alies rak klaoustradegoù a vez ganto ouzhpenn-se..."

An holl a davas a nevez. Neuze e adkrogas Lansoc'h, krizet e dal gant an tregas :

- Ne c'hellomp ket lezel an engroez-se a dud e unan du-se hep hen diwall. Koulz e ve moarvat diskuliañ dezho ar wirionez araok ma vint mezv, p'emañ c'hoazh o skiant ganto.

- Perak ? " a c'houlennas disoñj kaer. Lansoc'h a zirollas.

- Perak ! Sed aze ur gouleñ. Tud vezv a zo koulz ha tud diskiant, Keraleñ. Ma teuont da c'houzout goude bezañ evet ez eo tarzhet endro ar vosenn en o c'hêr ez int gouest da ober krizderioù ha follentezioù diniver...

- Da skouer ? " a gendalc'his difrom.

- Da skouer ? Pe ne ve nemet tec'hout ha skignañ ar c'hleñved dre al Ledenez, da gentañ...

- Ha c'hoazh ?

Lansoc'h a oa peurhegaset.

- N'hon eus ket amzer da goll o sevel marvailhoù emañ, Keraleñ. Gwell a zo d'ober. Selaouit, va eontr," emezañ, "mont a ran diouzhtu davet Keran. Gouleñ a rin digantañ kas ur bagad da goll'hiañ Kador-an-Diaoul ; c'hwi a c'hello chom e kêr. Kalz a c'hellot da sioulaat speredoù an dud pa zeuint da c'houzout pezh a zo c'hoarvezet."

War-nes mont kuit e oa.

- Ha c'hwi, Keraleñ, deuit ganin. Gwelloc'h e kavan c'hoazh ho kaout em c'hichen..."

Kerkent e kimiadjomp diouz Tudi ha Gwivegi.

Pignat a rejomp ebarzh ar c'harr a oa chomet a-sav girak an ti ha ni en hent etrezek Kerizel, war hent Begarvann, a-dreuz kêr, didud d'ar c'houlz-se e-kreiz an endervezh. Pa voomp erru e Kerizel e lammas Lansoc'h d'an traoñ hag en em strinkañ a reas betek merva al luti da c'houlenn digor. Ne chomas ket gwall bell eno.

- Hama ? " a c'houlennas pa voe distro.

- Ne c'hello ket Keran kas da Gador-an-Diaoul kement-se a soudarded," emezañ, prim. "Kalz a zo aet endev da sevel gward e Trogêr."

Ul lev bennak diouz Kerizel emañ Kador-an-Diaoul, Morgan. Heuliet hor boa da gentañ gourhent Begarvann ha, neuze, treiñ a gleiz ha krapat gant un hent-kev strizh ha serzh. Diwar neuze avat e rankjomp bale war hon troad. Divi e oa aet hor c'hwec'h ki ha re bounner samm e oa dezho sachañ ur c'harr karget evel hon hini. Kluchañ a rejont en ur prad ha chom eno da ziadaviñ, kollet o anal ganto. Pa voe savet nerzh dezho endro e vlegnjomp anezho goustadik betek ur gêriadenn vihan, en ur stankenn, e-harz Kador-an-Diaoul. Gouleñ a rejomp digant ar gouerion eno plediñ gant hor chas ha dou-rañ anezho. Asantiñ a rejont gant kalz a hegaratted. Neuze e kendalc'hjomp gant hon hent.

Goude bezañ graet hon treuz dre ur wrac'hellad

kerreg bras berniet stal ur wazh-dour e tiraezjomp en diwezh uhelblaenn Kador-an-diaoul. E tro pemp eur e oa, a soñj din, Kentizh ha ma voemp degouezhet di avat e voe anat deomp ne oa ket deuet c'hoazh ar gwall geloù betek Kador-an-diaoul. Ar redadegoù a yae bepred endro distrob kaer, a-hed ur roudenn gelc'hiek, e kreiz al lanneg. Er penn all, war ur savenn, en em gave kontrolerion ar redadegoù hag int emellet bras d'ar mare ma errujomp ; krog e oad gant ur redadeg ; edod o paouez leuskel da vont un dek bennak a levrane a rae neuze tro ar roudenn, tizh warno; da arouez-diforc'h e tougent seizzennoù liv endro d'eo gouzoug. An arvesterion en em waske adreñv ar c'hlovedoù, birvilhet an tamm anezho, kri ganto, pep hini oc'h isañ e loen a helligentañ rak klaoustreadegoù a veze graet a-hed ar wech da geñver ar redadegoù-mañ, egiz m'em eus lavaret deoc'h endev, Morgan. Souezhet e voen avat dre ma ne welen plac'h ebet tro aze. Lansoc'h a zisklerias din neuze e oa berzet a-grenn ouzh ar merc'hed arvestiñ ouzh hevelep c'hoariadegoù hag a ouzhpennas : "Ma vije deuet Maria amañ e Laniltud, n'ho piije ket gallet he c'has ganeoc'h war an dachenn-mañ, sur mat."

Iskisat tra, Morgan, an anv-se am frome ken don ergentaou, ne gave mui hekleb ebet em spered egiz pa vije aet divi va c'halon goude kement a drivli hag a strafuilh. Nann, ken dreistordinal e oa ar pezh a c'hoarveze endro din d'an ampoent ma ne c'hellen soñjal e tra all ebet. Diouzhtu e voe dedennet va evezh gant bodennoù bihan a arvesterion o doa en em dolpet a ziforc'h, nepell diouzh ar reier, adreñv bodoù lann uhel, egiz pa vijent bet o klask en em guzhat. O diskouez a ris da Lansoc'h ha dre laer e tostajomp outo da evezhiañ ouzh pezh a raent. Goude bezañ loaget prim war o zro o doa diskoachet boutailhoù pri diouzh o forpantoù ha kroget o doa da evañ a stag penn. Tommet mat e oa dezho dija a-hend-all rak damc'houde en em lakjont da dabutal ; kann a savas etrezo abarzh pell. Hogen ne badas pell an abadenn. Eus penn all an dachenn, tost d'ar savenn elec'h edo ar gontrolerion, e oa deredet ur skipailh polised, archerion eus kêr Laniltud, a c'helled anavezout diouzh o harnez gwer. Hep kemenn ebet e krogjont da vazhata pacted ar sabad, a-helebin ha dizamant groñs. Ar re-mañ a ziskampas neuze a bep tu ha ne voe mui gwelet al liv anezho.

An darn-vuiañ eus an arvesterion n'eo doa taolet reiz ebet ouzh an degouezhenn-se. Dalc'het e oa o evezh gant ar redadegoù, na petra 'ta, hag ar re-mañ, a-hend-all, a gen-dalc'has betek c'hwec'h eur hanter bennak, hep kadabuilh na dizurzh ebet en dro-mañ. Er c'heit-se avat e oa erru ar bagad soudarded degaset gant Keran, ur c'hant-pemont anezho, ha gronet o doa an dachenn penn-da-benn. An dra-se, dres, avat, a zeraouas ar freuz, Morgan. An arvesterion hag int souezhet gant donedigezh dic'hortoz ar bagad-se o doa denesaet ouzh ar soudarded ha toulllet kaoz ganto. Goulnnet e voe outo perak e oant bet daveet da Gador-an-Diaoul ; ar wirionez a voe diskuliet neuze, na petra 'ta, hag en ur par berr, egiz ul luc'hedenn, en doa ar c'heloù graet tro ar redva-kon.

Nozvezh ar spont

Diaes e ve deoc'h faltaziañ pezh a c'hoarvezas neuze, Morgan.

Ur serr-lagad war-lerc'h e oa Laniltudiz o skarañ a bep tu. Darn a lammas e strad ar stankenn, e-harz ar c'herreg, war var da derriñ o gouzoug, hag a a gidellas war-du Kerizel. Ar re niverusañ e oant, a gav din. Un nebeut avat a oa chomet war an dachenn ha nac'hañ a raent groñs mont endro d'ar gêr.

- Gwell eo ganeomp chom da vervel amañ gant an naon eget tapout ar c'hleved e kêr ha mervel eno goude poanioù kriz," emezo. Kluchañ o doa graet war ar savenn, startet an eil ouzh egile da herzel gwelloc'h ouzh ar re a defe klasket o c'has kuit alese. Goude bezañ breutaet ganto en aner, e reas e soñj, Edern, rener ar bagad a oa bet kaset da Gador-an-Diaoul, o lezel eno dindan evezh ur voznennad a soudarded.

- Me 'gav din ez int mezh dall pe dost," emezañ d'en em zigareziñ. "Koulz eo gortoz ma vo divadaouet mat d' o fenn." Bajanek awalc'h e seblante bezañ an Edern-se, Morgan. Distreiñ a rejomp da Laniltud. E tro seizh eur hanter e oa pa ziraezjomp tiez kentañ rakkêr ar c'hornog. Gwivegi a oa ouzh hor gortoz eno.

- Petra a zo a nevez amañ ? " a c'houlennas Lansoc'h.

- Netra arbennik," emezañ, "nemet ez eo erru e kêr bremaik an darn-vuiañ eus ar wazed a oa e Kador-an-Diaoul en endervezh-mañ.

- Aet int d'o c'hêr ?  
- Ya, moarvat, lod anezho a zo aet. An hanter all avat a zo en em vodet e daelva an ti-kêr.

- Sin fall," eme Lansoc'h. "Mennadoù diboell a vo diferet ganto marteze, seul vui ma n'eo ket diwar zour ur c'halz anezho. NE gav ket din ez int gouest da welout an traoù evel m'emaint.

- Tudi a zo ganto," a ouzhpennas Gwivegi.  
- Salv ma c'hello o lakaat da glevout mouezh ar furnezh."

Da eizh eur edomp er gêr. Aozañ a rejomp un tamm boued war ar prim ha debriñ hep rannañ ger. Serret kloz e oa an noz a-benn neuze. Tudi ne oa ket distroet bepred. Skuizh marv e oan ha prientiñ a raen mont d'am gwele ; kimiadet em boa dija diouzh Lansoc'h ha Gwivegi pa oa deuet betek ennomp en un taol hekleb un talabav spontus diouzh tu an iliz. En em deurel a rejomp er-maez. Kant metrad pelloc'h e oa stanket an hent gant ur bagad kêriz, goulaouennoù rousin en o daouarn ; armoù a oa ganto ivez, gouzifiadoù ha gouglegeier hag a hejant

en ur youc'hal dibaouez. A greiz ar safar e intentemp bom-  
mon lavar a seurt-mañ : "Deomp d'ar Gwarezva ; dav eo ober  
ur skarz h eno, diouennañ anezho holl da vat. Trawalc'h a  
zroug o deus graet deomp endev."

Un den savet war ur menk-ti a oa oc'h esa komz  
outo hag o sioulaat.

- Va eontr ! " a c'harmaas Lansoc'h pa voemp  
deuet tost awalc'h evit anavezout an dud.

Tudi an hini e oa e gwirionez, gronnet ha gwasket  
a bep tu gant an engrcoz evel gant ur mor dirollet. Moarvat  
en doa fallet dezhañ distanañ ernez e gengêriz hogen en aner,  
sur awalc'h, rak war-du ennañ ne oa troet nemet dremmoù tort  
gant ar gounnar, ar gasoni hag ar braouac'h, a lufre gant an  
dourc'hwez ha skleur arruz ar goulaouennoù.

Mouget e oa komzoù Tudi gant koagerezh ar mouezhioù  
raouliet a harzhe endro dezhañ. Neuze en doa kriet Lansoc'h.

- Roit peoc'h, mar plij ! "

An dud a oa chomet didrouz, sebezet ha divarc'het  
epad ur frapad. Tudi avat en doa anavezet e niz.

- Deus amañ, Lansoc'h, " a c'halvas ar beleg.

"Ro o skiant endro d'al loened gouez-mañ."

Lansoc'h a oa sailhet prim war ar menk-ti.

- Me ' zo Lansoc'h eus Loronan, " emezañ.

Mentet bras evel ma oa, nerzhus e vouezh, asur  
e emzalc'h, e kemeras e greñv didenn kaer war an dispac'herion.  
- Petra hoc'h eus c'hoant ? " a c'houlennas.

"Displegit din."

Unan eus ar wazed a stagas da zezrevell o devoa  
gouezet d'abardaez peseurt poreadur spontus a oa enem zis-  
kouezet er Gwarezva I. Gant anken e tistagas ar ger euzhus:  
ar vrec'h !

- C'hwil ' oar, kenseurt, petra a c'hoarvezas ugent  
vloaz zo en hevelep degouezh er gêr-mañ. Neuze e oa tarzhet  
ar vrec'h e diwez an diskar-amzer er Gwarezva II en dro-se.  
Hep dale he doa redet ar vosenn dre ar c'horn-bro hag en ur  
ober ur sizhun he doa lazhet an hanter eus poblañs Laniltud.  
Re enk e oa ar c'harnelioù da verniañ enno ar c'helanoù. Ret  
e oa bet kleuziañ fozioù don en ur park da zouarañ ar d'horfoù  
-marv.

- Ma vez miret ouzh ar Geizh a zont er-maez eus  
ar Gwarezvaoù ne viot ket tizhet gant ar poreadur, " a verkas  
Lansoc'h, sioul.

- Setu an dalc'h, " a eilgerias ar gwaz. "Gouezet  
hon eus e oa tec'het hiniannoù eus merc'hed ar Gwarezva I.  
Darn a lavar emaint o kuzhat e kêr. Ma n'o zaper ket emaint  
war var da boreañ ar vro a-bezh."Tennañ a reas kreñv e anal.  
"D'an enkadenn-mañ n'eus nemet un ode : lemel diouzhtu mam-  
menn an droug, elese, ret eo dieneañ holl Geizh ar Gwarezva  
I koulz ha re ar Gwarezva II ma par ar poreadur eno ivez.  
Reizhpoeñ eo kement-se, ya pe nann ? "

- Hag hemañ a garfe parrat ouzhimp d'en em save-  
teñ, " a chouas ur vaouez en ur sevel he meilh-dorn etrezek  
Tudi. Ar beleg a zistouas trumm e benn.

- N'on ket evit ho lezel da seveniñ un torfed, " a  
zivegas, " sec'h e vouezh. "Ar pezh a zo torfed a zo torfed,  
hepmuiken."

- Ar re-se n'int ket tud, beleg. N'int ket badezet  
zoken ; n'eus penn-kristen ebet en o zouez, " a arguas an hini  
en doa prezeget da gentañ.

- Ar re-se a zo tud ; ar re-se n'int ket loened, "  
a adlavare ar beleg.

Kroz a savas e-touez an dud. Ur goaf a oa bet  
bannet war-du Tudi hag a oa deuet neuze da sankañ en ur grenañ  
ebarzh preñ un nor adreñv dezhañ. Simudet e oa chomet an  
holl dirak ar seurt gwall-daol. Lansoc'h, avat, kerkent, a oa  
lammet e traon ar menk-ti ; abarzh m'en devoe bet hini amzer  
da fiñval en doa kroget en hini kablus hag e slapet a nerzh  
korf ouzh an diri tost ; horoset en doa ar penn ouzh ar mein ;  
diflaket e oa an den evel ur sac'h goull, hep garm ebet.

Lansoc'h a oa sailhet endro da lein ar menk-ti.

- Ha bremañ, klevit, set on skuizh ganeoc'h. Urzh  
a ranker kaout er gêr-mañ. Eus poell e komzit ? Hama ! Lavarit  
din : pet a brizonidi a zo tec'het kuit ?

- Un dek bennak, war hon eus klevet, " a lavaras ur  
vouezh.

- Hep dale e vint paket ha kaset d'ar Gwarezva en-  
dro. Eno e vo diforc'het ar glañvourion diouzh ar re yac'h. Tu  
a vo da herzel evel-se ouzh ar poreadur. A-hend-all, foll ez  
oc'h o vont betek Trogêr. Tapout ar c'hleñved a c'hellfec'h hag  
hon degas ganeoc'h d'ar gêr. Daoust ha gwel e viot goude ?

- Gwir a lavar an den-mañ, " emezeur.

- It d'ar gêr ha lezit al lu da blediañ gant an  
urzh e Laniltud. An dra-se n'eo ket hoc'h afer, e hini ne  
lavaran ket..."

Kendrec'hus e oa e gomzoù. Nikun ne gredas enebiañ.  
A unanoù e stagas an dud da gilañ ha d'en em skignañ a bep tu.  
An deñvalijenn hag an didrouz a aloubas endro ar straed a ne-  
beudoù.

- Deuit bremañ, va eontr, " en doa kemennet Lansoc'h  
en ur astenn e zorn da Dudi d'e harpañ da ziskenn.

A dastorn o doa klasket o hent, a-hed mogerioù an  
tiez. Daoust ma ne oa nemet kant metrad bennak o doa lakaet  
hogos pemp munud da dizhout an nevedenn. Og e oa Tudi.

- Ar gwashañ eo bet an emvod en ti-kêr, " a ziskle-  
rias ar beleg. " Mezv e oa an hanter eus kêriz a oa bodet eno,  
egiz ma soñjit awalc'h. Deuet on a-benn da gendrec'hiñ an darn  
-vuiañ anezho evelate, a drugarez Doue, ha da ziskouez dezho  
e oa ar furañ heuliañ ar reoliadurioù hag ar reizhenoù a oa  
bet diazezet a viskoazh da stourm ouzh ar seurt kleñvedoù-red.

Hogen lod a chome aheurtet ha n'houlent klevout anv a sezizadur nag a rektres-herzel all ebet ; ur menoz a oa hepken en o fenn : argadiñ Trogêr ha lazhadegañ an holl eno, gwraez, kozhidi ha bugale. Kendalc'het em boa da vreutaat gant ar re-se paz oc'h erru hogen berzh ne raen ket nemeur... Panevedoc'h, siwazh..."

Degouezhet e oamp dirak an ti. Dibrenn e oa an nor. Pa zeujomp tre e verzjomp gouloù el levraoueg. Gireg, avat, eil harper Tudi, a oa dija o tont da geñ ouzhimp.

- Pellzo emaoch degouezhet ? " a c'houlennas Tudi.

- Pemp munud bennak. Krog e oan da vezañ nec'het o verzout ne oa den ebet en ti-mañ..."

Termal a reas. Gireg ivez a hañvale bezañ faezh marv.

- Me ' gred ez eo sioul awalc'h an traoù a-benn bremañ," eme Lansoc'h. " Bez e c'hellot mont da ziskuizhañ, va eontr," a ouzhpennas o treiñ war-du Tudi.

Gireg a grizas e dal.

- Fazioet oc'h o krediñ ez eo deuet ar peoc'h e kêr, Lansoc'h," emezañ. "Bremaik en em gaven gant Meven en deus kemeret warnañ derc'hel an urzh e Laniltud egiz ma ouzoc'h ha lavarout a rae din en doa ranket kas ur bagad all da zifenn Trogêr : ur strollad gwazed all a zo o tostaat ouz ar Gwarezva I, dre an noz, a-dreuz ar maezioù, eus kostez Kadon-an-Diaoul..."

- Marteze ar re a zisklerie e felle dezho chom du-se," a droc'has Lansoc'h. "Perak ivez n'int ket bet rediet da zont e kêr egiz ar re all ? Ne oa ket fur evelato ! Moarvat o devo kendalc'het ar re-se d'en em vezviñ hag a-benn ar fin ez eo deuet d'o fenn ar memes stultenn diskiant..."

Tevl a reas. En un taol e oa savet cholori war ar straed. "Klevit," eme C'hireg. "Daoust han'em boa lavaret deoc'h ar wirionez ? "

An holl a zilmmas d'an nor. E penn all ar straed, war hent Trogêr, e oa ur vandennad wazed oc'h erruout, goulaouennoù hag armoù en o daouarn adarre. Dre ma nesaent e teue **fræshoc'h** o garmadennoù :

- Harz dezhi ! Harz dezhi ! Tapit krog enni ! "

Oc'h en em c'houlenn e oamp piv e cant o klask pakañ evel-se pa spurmantjomp ur vaquez o tont en arbenn deomp ; hag hi da gouezhañ un dek metrad bennak dirazomp. Lansoc'h a yeas a lamm betek enni, a zibradas anezhi hag he dougas betek raksal an ti. Un dalc'hadez eus Trogêr a oa anezhi, gwisket e truilhoù, egiz holl brizoniadezed ar Gwarezva I. Ur gouli don a oa digor en hec'h ividiñ kleiz. Ker-kent war-lerc'h avat e lanvezhe war hon tro engroez kounnaret an hemolc'herion. Nikun avat ne gredas not tre en nevedenn. Unan eus ar re a oa e penn ar gronnad a zeuas neuze war an trezoù hag a c'houlennas breutaat gant Tudi.

- Petra a fell deoc'h ? " eme hemañ.

- Ar vaquez hoc'h eus roet bod dezhi a rank bezañ lazhet. Eus Trogêr e teu.

- N'eo ket klañv, a gav din, gloazet ganeoc'h ne lavaran ket..."

- Ma n'eo ket klañv hiziv e vo warc'hoazh hag unan ouzhpenn e vo o skignañ ar c'hleñved. Daskorit-hi deomp.

- Ne rin ket, sur," a respontas Tudi o taerifiñ.

Garm a savas e-touez an heulierion. Unan a chouas : "Laoskit ac'hanon da dremen ; me ' zo o vont da gomz ouz hemañ."

- Selacuit," eme Lansoc'h neuze. "Daoust ha prest e vefec'h da lazhañ ho kwreg pe ho mamm ma pegfe ar c'hleñved enno warc'hoazh ? "

An dud a chomas direspont. Ur vouezh lent a savas evelato a-benn ar fin evit distagañ bepred ar memes diskan : "Ar re-mañ avat n'int ket tud..." hogen gonezet e oa an abadenn : torret e oa bet lañs an heskinerion.

- Deomp pelloc'h," eme unan neuze. "Re all a zo o skoachañ tro aze moarvat... Dont a raimp da gerc'hat houmañ evit echuiñ."

Ar vandennad a yeas war-raok da glask preizhoù

all. - Dougit ar vaquez d'al laez hag grit war he zro," a gemennas Tudi. Gwivegi ha Gireg a sentas outañ. Lansoc'h a lavaras neuze :

- C'hwi ' wel, va eontr, gwir e oa eta an disaouzan en deus roet deomp Gireg. An torfed foll-se a zo bet kaset da benn!"

Tankeal a reas er raksal, brouezet groñs.

- Pebez beulkeed divarrek, digalon ; n'int ket evit kas da vat kefridi ebet ha bremañ, sur, e tamanto an holl dre benn o diegi. Pa soñjan ez eo aet ar c'hemoueion-se da gerc'hat ar c'hleñved e Trogêr..."

Treiñ a reas war-du Tudi.

- N'on ket evit chom amañ hep ober netra, va eontr, paz eus kement a reuz endro din. Dav eo din gouzout da gentañ petra a zo c'hoarvezet dres e Trogêr. Klask a rin kejout gant Meven. Mont a ran. Keralen a zeuic ganin."

Ambroug a ris Lansoc'h eta. Kemer a rejomp hent Trogêr. A-vec'h ma oamp aet dreist da diez diwezhañ kêr avat e verzjomp ne oa ket gaou pezh en doa displeget Gireg deomp.

- Sellit 'ta, du-hont," a lavaras Lansoc'h oc'h eunañ e vrec'h war-du an hanternoz. "Graet eo an taol."

Du-se, un hanter-lev dirazomp, e oa toullt an deñvalijenn gant flammennoù divent a droielle e-kreiz bouilhoù maged arruz hag a zispake gwez ar goadeg nes war an uhellennoù.

Kenderc'hel a rejomp da vale. Bep an amzer e tamwelemp er foz, a-hed an hent, kelan ur vaquez pe ur bugel bet labezet betek ar marv ha goloet a vein ; un dek bennak anezho

a voe kontet ganeomp adal treuzoù kêr betek ar c'hondi. Eno avat hor gortoze un arvest braouac'hus ha keit ha ma vevin, Morgan, e chomo an eñvor anezhañ garanet don em spered. Ar pezh en doa dedennet hon evezh da gentañ e oa ar yudadeg spou-ronus-se a drebarzhe an noz teñval hag a zeue betek ennomp douget gant an avel ha mesket gant flaer brein an anevaled hanter ouez-se. Pa voemp erru tost d'ar c'haelioù avat, gwin- tet hor goulaoennoù ganeomp dreist d'hor peñoù, e tizolojomp ur selladur a hurlink. Edo ar chas o trailhañ kelan ur c'hozhiañ a oa bet stlapet dezho gant ar vandennad hemolc'herion a oa nevez tremenet eno ; dija n'en doa mui ar c'helan-se dispennet ha divouzellet stumm den ebet ; a-greiz yudal ha diskrougnal e tiframme an euzhviled-se o zammoù preiñ an eil digant egile; bep an amzer e lamme ur c'hi e gouzoug egile hag a chome peg ennañ ken n'en dije taget anezhañ. Ar gwel eus ar geolioù leun wad-se, eus ar c'horf-se diroget ha dicafrantet, eus al loened-se ken diskiant hag an dud, a oa bet dreist d'am nerzh, Morgan : laosket em boa va goulaoenn da gouezhañ hag en ur redadenn, dre an noz, em boa klasket repu etal Tudi, en nevedenn

~~~~~

P e n n a d 10
A r s e e r i z

Betek antronoz vintin ne c'hellis serriñ lagad ebet, Morgan. Padal e chomas didrubuilh kêr betek eurioù kentañ ar beure. War-dro nav eur avat p'edon o kemer va lein er gegin gant Tudi hag e zaou harper - Lansoc'h ne oa ket distroet c'hoazh - e kavase deomp en un taol e oa an ti o krenañ dindanomp. En em strinkañ rejomp da doull an nor a sko war ar straed da welout pezh a oa o tegouezhout. Dirazomp e chale ur stêriad stank a wragez, a wazed hag a vugale, stardet an eil ouzh egile, kej-mesk, a zifraee war-du ar maezioù, dilavar, stouet o fennoù, evel un tropellad deñved oc'h heuliañ ar maez ; krouadurioù a oa douget war ziskoaz o zadoù pe war zivrec'h o mammoù ; hag int ivez a roe peoc'h, skodeget.

- Emaint o klask tec'hout diouzh kêr," a c'harmas Gireg.

Hogen aner e oa bet o mennad. Ur c'hardeur goude e weljomp an engroez-se o tichalañ endro war e giz, ambilhet dizamant gant ar soudarded, diglemm bepred avat, o plegañ a-benn ar fin.

- Gronnet eo bet kêr gant al lu ; ne c'heller mui dont er-maez," a verkas Tudi.

Pep hini en em dennas ebarzh e gambr. Klask a ris lenn hogen peurluiñ ne raen nemet rambreal. Ar soñj eus Maria

a save bep an amzer d'am spered, adarre, hep degas din frealz ebet avat ; marteze en abeg d'an anken am c'hriage dalc'hmat : ar c'hleñved a c'helle va zizhout evel ar re all ; bac'het e oan evelc ivez hag e ken bras argoll hep mar ; hogen an anken-se ne oa ket awalc'h, a soñje din, evit kas da heñsk pep mammenn a levenez em c'hreiz ; en em c'houlenn a raen eta ha ne oa ket kiriek d'am c'hinder kalon end-eeun va zrivlierezh bas a vire ouzhin d'en em stagañ da vat ouzh plac'h ebet ; kou- nañ a raen pegen dillo em boa disoñjet Anna, ar vaouez kentañ am boa karet el Ledenez. D'ar c'houlz-se, a zastumen, daoust ha n'oa ket nemet touell ar survad bresk-se a hemolc'hen gant holl nerzh va boud hag a lakaen en eskemm gant ar beurbadelezh grataet din el Ledenez ?

Lansoc'h oc'h erruout a dorras d'am melkoni. Divi e oa. E-doug an noz hag ar beure war-lerc'h en doa redet e kêr hag en tro-war-droioù ; aet e oa betek Menez-Meur, un arsavlec'h soudarded a save gward er c'hreisteiz, war lez ar goadeg, ha goulennet en doa digant ar rener eno kas da Laniltud ar wa- zed a c'helle diouerñ.

- Bremañ ez eo kelc'hiet kêr penn-da-benn ha ne vo mui tec'hadeg ebet," a verkas Gwivegi.

- Me ' anavez darn a zo deuet a-benn da achap kouls- koude," a respontas Lansoc'h.

- Piv ? " a c'houlennas Gireg.
- An Aotrouion renerion al labouradegoù...
- Graet mat o deus," a griis, "ha m'em befe gelllet...
- N'on ket ali ganeoc'h, Keralen," eme Lansoc'h.

"Paket e vint hep dale ha d'en em zifenn o devo dirak al lez- varn e Loronan evit bezañ torret lezennoù ar Riez diwar-benn ar balvent, bezañ dilezet o lec'h ha kiriek d'ar walenn hec'h unan dre wallegañ reolennoù ar yec'hedouriezh er Gwarezvaoù a oa dindan o evezh. Hep kentañ ar peurrest... Me ' respont deoc'h ne garfen bezañ en o c'hroc'hen ! "

C'hoant am boe eilgeriañ : marteze awalc'h hogen evel-se zoken o deus moarvat muioc'h a chañs da saveteiñ o zam- mig buhez eget o chom e Laniltud. Gwell avat e kavis tevel. Lansoc'h a gendalc'has.

- Amzer a vo evit se diwezhatoc'h. Se n'eo ket ar pep difraeusañ er mare-mañ. Dav eo deomp mirout ouzh ar vosenn da zont tre er gêr-mañ pe da vichañha zont er-maez anezhi. Abarzh pell e ouezimp petra a vo bet divizet gant an Tonkadur!"

Un nebeut devezhioù a dremenas. Netra ne c'hoarve- zas da gentañ, Morgan. Laniltudiz o doa degemeret o stad hag a harze ouzh ar balvent gwelikañ ma c'hellent, hervez keme- nadurioù ar pennadurezhioù o devoa perzh warno. Ne veze mui gwelst den ebet war ar straed ; serr e oa ar stalafioù war an holl diez ; darn eus an annezourion zoken o doa stignet meze- rennoù du ouzh o frenester hag o dorioù.

- Evit mirout ouzh ar wall-avel da dremen," en doa diskleriet Lansoc'h. Digas avat e chome-eñ, hep reiñ nemeur a



ouez, a gredan, da seurt di-
arbennoù.

Eñ e unan ne zouge maskl
ebet paz ae e kêr, pezh a rae
Gwivegi ha Gireg ma c'hoarveze
ganto dont er-maez eus an ti.
Dre vras, a-hend-all, e ranke
an holl chom er gêr nemet kar-
gidi kêr o devoa ur gefridi
resis da seveniñ. Ar pourve-
zioù a veze degaset gant bozen-
nadoù soudarded a dremene ur
wech bemdez war-dro kreisteiz.

"Kleierigoù a stage da dintirinat

a bell. Eus penn all ar straed e tenesae pevar pe bemp
soudard, goueliet o fenn, o tougen korbelloù bitañ hag
a ziskane en ur vale e-biou d'an tiez : "Erru eo ar vosenn
er vro ; chomit en ho tiez ; pourchaset e vo boued deoc'h
keit ha ma pado ar c'hleñved-red..." An dud a zamzigore o
dor neuze, a leze ur c'hirin bennak war ar derezioù, a veze
leuniet ha lamet kentizh.

D'ar merc'her war-lerc'h eo e tarzhas ar c'he-
loù spontus evit an eil gwech. Paret e oa ar c'hleñved e
Laniltud end-eeun, da gentañ er c'hlañvdi : en ur ober
peder eur warn-ugent e oa marvet ar vaouez a oa bet dastu-
met gant Tudi hag herberc'het eno a c'houdevezh. Neuze,
a eur da eur, e teuemp da c'houzout e oa bet tizhet heñ-mañ-
heñ gant ar c'hleñved ; da gentañ ar re o doa kemeret perzh
e tangwallidigezh Trogêr ; neuze izili zo eus o zigegezh.
Adal ma verzed azonoù kentañ ar c'hleñved e teued gant ur
strakerez war dreuzoù an ti hag eno e chomed da drouzal ken
na errue d'ar red ur bare soudarded a samme ar c'hlañvour
war ur c'hravazh hag hen douge a-dizh betek klañvdi kêr.

Gwashaat a reas ar walenn en devezhioù war-lerc'h.
Tiegezhioù a-bezh a glañve en ur par berr. Gouzout a raed
hepken e oant bet skoet gant ar gwalleur pa welod e chome
serr dor o zi dirak ar bourvezerion. Tumporelloù sachet gant
ejened a dremenas dre ar straedoù. Sammañ a raed klañvour-
rion ha kelanoù mesk-ha-mesk. Ar vosennidi a veze diskarget
dirak ar c'hlañvdi. Ar c'helanoù a veze stlapet ebarzh
fozioù don er-maez eus kêr. Unan eus harperion Tudi a rae
ur bedenn verr e-harz ar garnel. Kerkent war-lerc'h e kroge
ar vezierioù da vannañ mein ha raz da stankañ an toull.
An ifern a droge e Laniltud e korf ugent vloaz.

A-wechoù e kolle hini pe hini e skiant. Mammoù
vanne a-daol-trumm o c'hrouadur dre ar prenestr gant ar gredenn
e oa o mab pe o merc'h o vont da dapout ar poreadur. Dam-
c'houde e kejed war ar straed gant ur vaouez pennfollet,

Gwashaat a reas ar walenn en devezhioù war-
lerc'h. Tieggezhioù a-bezh a glañve en ur par berr. Ara-
vezout a raed o zonkadur pa chome serr dor o zi dirak ar
bourvezerion. Tumporelloù sachet gant ejened a dremenas
dre ar straedoù. Sammañ a raed klañvourion ha kelanoù
mesk-ha-mesk. Ar vosennidi a veze diskarget dirak ar c'hlañv-
di ; ar c'helanoù a veze stlapet evel blodoù vil ebarzh
fozioù don er-maez eus kêr. An ifern a droge e Laniltud
e korf ugent vloaz.

Bep ar mare e kolle hini pe hini e skiant.
Mammoù a vanne o bugale a-daol-trumm dre ar prenestr o
kredif e oa o mab pe o merc'h o vont da dapout ar poreadur.
Danc'houde e c'haloupe ur vaouez foll en ur c'harmiñ war
ar straed didud, skoelf he daoulagad, dispak he blev, hanter
noazh a-wechoù. Ned ne ket gwall bell avat : arack ar c'hent-
tañ kroazhent e veze harzet gant ar soudarded ha degaset
d'an ti-bac'h elec'h e talc'hed an diskianted.

Ret eo lavarout, Morgan, n'en doa ar c'hleñved
a oa anvet ar vrec'h gant Ledeneziz netra da welout gant
ar poreadur brudet a rae e reuz en amzervezh ragenezel.
Devoudet e oa e gwirionez gant ur vazhigell vourzhat a voe
dezoget d'an tir dre zegouezh e deroù an XXIvet kantved,
nebeut amzer arack an Drouizezh. Goude bezañ drastet
rannbarzhioù ec'hon eus Azia d'an ampoent e oa bet bzh-
yevet da vat a-benn daou pe dri bloaz war-lerc'h. Anvet
ez eo, egiz ma ouzoc'h PSEUDOGONAS MK-L. Diouzhan diskle-
riadurioù a voe roet din neuze gant Lansoc'h ha Tudi diwar-
benn ar c'hleñved e c'hellis hep poan ebet dianavezout al
loenigan a oa kiriek d'ar "vrec'h"-se. An efed heverkañ
hag arvestusañ a oa koeñvadur an dremm ; an daoulagad
dreist-holl a veze taget ; e berr amzer e teue ar c'hlañ-
vour da vezañ dall ; war un dro e veze tizhet nervedoù
ar poread ; seizet e veze e izili tamm-ha-tamm. Mervel a
rae pa veze savet an droug betek ar galon. Kollet e veze
e emskiant gantañ a-benn neuze ha peurluiad e tremene ar
c'hlañvour hep ma teuje e vez dezhañ endro.

Souezh ebet eta, Morgan, ma ve deuet mammoù
zo da sodiñ o toujañ na ve taget o bugel gant hevelep
gwall-gleñved hag a oa dibare a-grenn a-hend-all ar peurl-
liesañ. Gwell e oa ganto - hag er c'heñver-se na oant ket
foll mik da vihanañ - e lashañ diouzhtu da esperi dezhañ
poanioù spontus ha didalvez. Ar gwellañ tu e oa ivez - an
dra-se a lavaran deoc'h didro kner - da bellaat dezhañ e
unan arvar ar poreadur.

Un degouezhad seurt-se a voe kiriek d'an arack
tec'hout sirius nemetañ a glaskis kas da benn tra m'edon
o vevañ el Ledenez ; tro-wenn a reas emberr, a-hend-all,
egiz ma welot, Morgan. Ur sizhunvezh bennak war-lerc'h a'

he devoe ar walenñ kroget da wastañ Laniltud eta en devoa Tudi degaset d'ar gêr ur c'hrouadur a bevar bloaz bennak a oa bet dilezet er mod-se gant e vamm. Hemañ a oa klañvet ha marvet damc'houde a-hend-all. Ar bugel a oa blizik ha gouezel c'hoazh, koantik hag hegarat, skoet avat e spe-red gant an darvoudoù braouac'hus a oa o c'hoarvezout endro dezhañ. Glozet e oa bet o kouezhañ diwar un diri ha lienet e oa e benn. Daoust ma ne oa terzhienñ nag azon ebet eus ar c'hleñved gantañ evit c'hoazh e voen tregaset awalc'h p'e welis oc'h erruout er gêr.

- Perak n'hoc'h eus ket kaset ar bugel-mañ gant ar glañvourion all ? " a damallis da Dudi.
 - Gwelout mat a rit n'en deus ket an doare a vezañ klañv !"
 Ur c'hruz taer a ris d'am skoaz.
 - Warc'hoazh e c'hell parañ arouezioù ar poreadur ha re ziwzhat e vo neuze.
 - Mar kasan anezhañ davet ar glañvourion all eo diarvar e tapo ar c'hleñved. Amañ da vihanañ en deus ur chañs da chom hep bezañ tizhet.
 - Ne c'hellit kemer riskl ebet...
 Tudi en doa ruziet trumm; evit ar wech e se-blante prest da goll e emreizh.
 - Ebarzh va zi emañ amañ, aotrou ! Fiziañs ameus e Ragevezh-Doue."
 E yezh veleg a blante droug ennon a-hed ar wech.
 - Lezit ho Tous en e neñv. An disterañ louzoù a vefe gwell egetañ.
 - N'em eus ket lakaet em penn o fareañ, aotrou.
 Gouzout a ran ez eo dreist d'am galloud, o frealziñ war o zremenvan ne lavaran ket."

Dirollet e oan. Kement a bilpouserezh am lakae da heugañ.
 - Un toueller ned oc'h ken. Ar servij gwirion nemetañ a c'hellfec'h renta d'ho klañvourion e vefe o helazhañ da zeverra o foanioù."
 Fulenniñ a reas daoulagad Tudi.
 - Aesaat a ran dezho kement hag a c'hellan, aotrou.
 Hogen ar reolenn a verkit din ne c'hellfe ket bezañ sevenet hep bezañ kollus meur a wech. Hini pe hini a zeu a-benn evelato da drec'hiñ ar c'hleñved dioutañ e unan. Dre froudenn hepken e tibabfeb ar re a vefe da zieneañ. "Ur mousc'hoarzh berr a hiraas e vuzelloù epad ur pred berr. "N'on ket Doue, aotrou, ha n'em eus ket da c'hoari e roll."
 Neuze en doa Tudi troet kein ouzhin.
 Un den speredet ledan a oa anezhañ e meur a geñver evelkent, Morgan. Damc'houde, antronoz, a gav din, em boa kejet gantañ er sal-debriñ ha toulllet en doa kaoz didro kaer, eglz pa ne vije bet biskoazh tamm chabouz ebet etrezomp.
 - Prederiet em eus a-zivout an tamm diviz hon

eus bet dec'h" emezañ. "Arabate e vefe deoc'h kredañ na gomprenan tamm ebet ho savboent : n'on ket eus ar re a zispriz ar skiant el Ledenez-mañ, en eneb. Roll ar skiant eo lemel kement ha ma c'hell an droug a zo o waskañ mab-den hag a vir outañ a verzout Doue. Hogen, dres, aotrou, ne c'hell ar skiant kaout pal all ebet. Dre zegouezh hepken e tizhas ar Skiant en amzervezh ragenezel gwellaet un tammig da walennoù an denezelz. Al lorc'h, ar fouge, ar vrazoni, an daeaerezh ouzh Doue a awenas diorreadur ar skiant da neuze. Ponaos souezhiñ ma taolas hevelep skiant an Drouziwezh da frouezh : kontammet e oa ar wezenn betek en he gwizienn.?"

Lansoc'h ne oa ket aze d'ar mare-se. Gwivegi ha Gireg a selle ouzhimp hep rannañ ger. Hegaset e oan bet adarre gant komzoù Tudi. N'em boa ket prizet respont. Ar beleg en doa kendalc'het da brezeg hep sellout ouzhin, evitañ e unan, a vije bet kredet.
 - Ne c'hellomp er mare-mañ nemet goulenñ burzhudoù. Pedennoù a seurt gant ar re a rankomp ober er bed m'emaomp a denn bepred da c'houlenn burzhudoù. Petra a c'hellfemp ober estreget se ?
 - Ha goanagiñ a rit saveteiñ ar gêr-mañ gant ho pedennoù ? " a c'houlennis a-benn ar fin.
 - Hen goanagiñ a ran ha pa rankfen prenañ va goulenñ gant va buhez-ma va unan..."
 Ken diboell e oa ar menoz a zamveizen er c'hom-zoù goloet-mañ ma chomis alvaonet, hep gellout respont. Tudi avat en doa kuitaet ar sal e-keit-se ha n'em boe ket tro d'e aters pelloc'h.

Diwar neuze e veris serret ebarzh va c'hambri pe ebarzh al liorz pa veze aet an holl diouzh an ti. Ne welen mui den. Buzhiñ a raen ouzh an dremmoù masklet a verzen e pep lec'h endro din, war ar straed, er raksal pa zistroe harperion Dudi diouzh kêr. Dre zegouezh e tapen tammoù keloù bep an amzer : leun chouk e oa klañvdi kêr ken e oa bet dav reiñ bod d'ar glañvourion en iliz end-eeun. Eno en em gave Tudi peurvuiañ ha n'her gwelen mui er gêr koulz lavaret.
 Biskoazh ne oa bet ken kriz all va damañ ha m' em bije bet nerzh kalon awalc'h em befe en em zistrujet sur awalc'h. Diharak e oa deuet an amzer da vezañ hag an dra-se a washae d'am melkoni ; glav a zisac'he er-maez a varradoù, stlapet gant ar gorventenn a yude er c'hriognol a-us d'am penn ; ranket em boa serriñ ar prenestr ha gwasket e oan gant an anken o chom bac'het adreñv ar gwernennoù divoull-se ha na lezent stumm ebet eus ar bed diavaez da dremen, a veske hag a ziverke pep dremm ha pep lun. Chom a raen neuze azezet ouzh va zaol, lakaet va fenn etre bozioù va daouarn, dinerzhed a-grenn, o lonkañ soñjoù a zic'hoanag. Pa zigoren ar prenestr

En diwezh e vezen badaouet gant tec'h herrek ar c'houmoul pounner en oabl du. Neuze e kounen ur varzhoneg eus Tudi, an den-se am strafuilhe hag a gasaen war un dro, hag a greske c'hoazh va dispi :

Evel jibl an aodoù
ha poultrann an hentoù,
hep anv na niver
ez omp dindan da dreid.

Ha ken n'hor bez savet
hor selloù dall davedout,
Aotroù, n'hor merzez ket
en ifern hon amvoud.

Berañ a rae an amzer, diziwezh, stagus evel ar pri a bege ouzh va botoù el liorz a roe din repu pa veze kaeraet an amzer epad ur frapadig, elec'h e troen-distroen hep astal ebet, evel ul loen paket en ur gaoued. Rak bepred e vezen war api, o c'hedal klemmvan pe c'harm a rofe din da c'houzout e oa bet tizhet ar bugel d'e dro hag e oa an Ankoù war dreuzoù va dor.

Evel-se eta eo e teuls da soñjal a-zevri tec'hout diouzh Laniltud petra bennak ma cuien ervat e oa ar soudarded o sezizañ kêr didruez e-keñver ar re a glaske achap. Lusket e oan moarvat gant ar spont a save ennon pa envorñ-taolenn an droug evel ma oa deskrivet ebarzh al levrioù a vezeñniezh er C'hreñvlec'h (rak, a-drugarez, n'en em gavas biskoazh klañvour gwirion ebet neuze dirak va selloù : ne vijen ket bet evit padout ouzh ar gwel anezhañ, Morgan, a gav din) hogen ivez gant ar soñj a zalc'hen neuze eus an Enezenn a hañvale din bezañ e-keñver al Ledenez gwir varadoz an douar.

Helmoet e oan eta, un drovezh, da noz, ouzh rizenn ar prenestr hag arvestiñ a raen ouzh bolz teñval an neñvoù. Koun a zeue din eus ar ouennad doueed-se he doa trec'het amzer hag egor, ar ouennad-se a oa bet krouet ganeoc'h, Morgan hag Omeur, ha dre ar spered o heulien en o beajoù peurbad a-dreuz al lijoz divevenn. Hag o c'heferata a raen ouzh an astud-se, an hanter dud-se a oa bremañ war va zro hag int sujet d'ar fazi, d'an diskiantegezh, d'ar c'hleñved ha d'ar marv. Doñjer am boa o soñjal e komzoù eontr Lansoc'h hag o veizañ em boa gallet kouezhañ e karantez gant ur verc'h eus ar ouenn-se; skrijal a raen o kompren e vijen degaset endro dre heg un deiz d'an Enezenn marteze hag e vijen daskoret hep mank da varn difaziuz ar bredkleñveddianavezerioù. Va soñj a ris neuze startoc'h eget biskoazh d'en em zleubiñ, da derriñ ar chadenn am stage ouzh Maria, chadenn ar garantez, an engehenta hag an Ankoù. P'em boe graet din va unan al le da zistreiñ d'am bro

ha da aliañ distrujidigezh al Ledenez e steuzias va anken ha skañvoc'h e voe va spered.

~~~~~

Pennad 11  
T e c ' h a d e n n

Kas a ris va dezo da benn ahtronoz d'abaradaez. Edo Tudi hag e zaou harper o paouez mont kuit d'an iliz goude bezañ kemeret o c'hoan er gêr. Lansoc'h a oa aet adarre da gavout Meven. Abaoe un eur bennak e oa tremenet ar bourvezerion. Ar c'hentañ bagad-ged ne dremenfe ket abarzh nav eur, evel boaz. Pred e oa din kas da benn va soñj d'ar c'houlz-se pe biken ne rafen a-hend-all. En em silañ a ris er-maez. Redek a ris a-dizh betek penn ar straed, war-grec'h. Aet e oan e-biou d'an iliz a oa damsklerijennet he frenester d'an ampoent. Kavout a rae din e kleven gouelvanoù difraezh o c'hronnañ al lijoz endro din. Nann, wat, ne oa kement-se nemet empentadenn va spered birvilhet. Troet em boa neuze war-du an hanternoz. Kêr a c'hourveze dirazon, lusennet er beuznoz. Gouloù ebet ne bare adreñv ar gwerennoù kafunet. Ha me da sakañ tizh war-draon. E korf pemp munud em boa diraezet bevennoù kêr. Ar maezioù divent en em astenne endro din. War-du ar mervent e tamwelen tolzennoù ar menezioù koadek a guzhe meuriadoù ar ouezidi. E-touez ar re-se em boa graet va menoz klask repu. N'em boa dibab all ebet.

Ne vije ket aes kas da vat va mennad avat. Tro-dro da gêr Laniltud e oa strewet bagadoù-ged o sevel gward ; hep kant-pemont metrad bennak e flamme un tantad a daole e sklerijenn war ar parkeier tost. Kavout a rae din da gentañ e oa dic'hallus din mont pelloc'h war-raok hep bezañ merzet gant ar c'hedourion. Oc'h en em ruzañ eus ur bod strouezh d'egile avat e c'hellis nesaat war-hed ur c'hwegont metrad bennak ouzh un tantad. Eno avat e rankis chom a-sav : dizolo e oa an tachad a oa da dreuziñ neuze. Daou ward a oa o vonedone etre daou dantad, unan o pellaat tra ma veze egile o tostaat ouzhin : atav e vijen en em gavet dindan selloù hini pe hini.

Chom a ris daoubennet eno : ne oa tu ebet da dremen. Kuzhet e oan adreñv ur bod-lann, war ar brug, riellet, rak erru e oa fresk an noz. Paket e oan : dre wall-chañs e oa al loar en he c'hann prest d'am diskuliañ ma vijen deust er-maez eus va c'huzhiadell.

N'ouzon pegeit amzer e chomis eno da c'hortoz. Eep an amzer e taolen ur sell war-du ar c'hedourion. Aze edont bepred ; dindan skleur an tantad e treluc'he o armoù hag o zokarn ; o skued en em astenne, divent, betek ennon.

Derc'hel a raent o gwareg en o dorn, prest da dennañ war gement hini a arnodfe tremen. Ur gaouad spont a grogas ennon pa lakais mein da ruilhal adreñv din d'ur mare o klask en em skoachañ gwelloc'h dindan ar bod strouezh. Ur gedour en doa baleet goustad war va zu ; gant e c'hoaf en doa skoet taolioù a-dreuz al lann, hep va zizhout avat. Bec'h a raen da chom difiñv a-grenn, ha me o waskañ va anal, hanter fatet diwar an efreiz, aet va c'halon d'an daoulamm, ken feuls ma kave dine oa o vont da vreviñ va bruched.

An den a chomas da yariñ tro-dro, war vordo ; neuze, a-benn ar fin, e teuas endro war e giz en ur c'hwi-tellat.

Betek hanternoz e rankis chom kropet er mod-se, hep ober jestr ebet. D'ar c'houlz-se e troas ar Chañs a-du ganin. Ur barrad glay puih a zizac'has en untaol : epad pemp munud bennak e tifaragoellas an dour eus an oabl a gelorniaoù. Aet e oa ar c'hedourion da glask repu dindan an taltennoù.

En em strinket e oan war-raok. Redek a ris war-hed kant metrad bennak, dindan ar bouilhard, bouzaret gant an talmoù kurun a darane war laezioù ar menez. Disoc'hañ a ris d'ur park bras dindan ed, bevnet gant ur c'hleuz don, aet a-benn neuze d'ur riolenn fankek. Hogen forzh ne raen, va c'huzhat a rae ; hen heuliañ a ris ha me o sankañ va divesker betek ar c'hof-gar. Uheloc'h e tegouezhis d'ul lanneg vras. Difraeañ a ris. Un tri-c'hant metrad c'hoazh hag erru e oan d'ar goadeg. Saveteet e oan, betek gortoz, da vihanañ.

Goude bezañ kemeret va anal endro em boa adkroget da valc a dastorn a-dreuz an argoured, hep gouzout mat war beseurt tu e skoen. Gwell a se e oa paouezet ar barrad ken trumm ha ma oa deuet : skubet kuit e oa bet ar c'hoabrennoù gant an avel hag al loar, war an diñskar, en em zamziskoueze a-dreuz an deil dasskedus hag a sklaerie an oabl ec'hon. Skrijal a raen bep ar mare o klevout a-drumm sourrevezh ar barroù breset gant ul loen o tided'hout d'e ched pe c'harmadenn dic'hortoz ur gaouen guzh er gwez. Hogen daoust da gement-se, evidon da vezañ skuizh brein hag o krenañ gant ar riv, gleb teil va dilhad endro din, e soure ennon ar joa da vezañ bet dieubet diouzh an ifern e oa bet darbet din bezañ serret ennañ. An hollved a-bezh a oa digor dirazon adarre ; a nevez e c'hellen analat hep anken. Deiz pe zeiz e teufen moarvat da skoulmañ darempred e stumm pe stumm gant an Enozenn. C'hoarzhin a ris va unan o soñjal pebezh penn a raje Lansoc'h pa veizje e oa nijet kuit al labous e oa karget da ziwall.

Gant dudi e vanis kousket da darzh-an-deiz war lez ur frankizenn. Tost kreisteiz e oa, a gav din, pa zihunis. Dic'hourdañ a ris gant levenez. Sec'h e oa va dilhad ; richanañ a rae an evned er gwez a-us d'am penn ;

war ar skourroù e rae ar gwilivered lamm-choug o fenn en ur c'hoari kuzh-muz ; ur gouver a skliintine nepell alese e don ur ganienn ; diskenn a ris betek ennañ ha freskañ va dremm. Dluzed ha gwenniged ac'hantek a neuas kuit a denn angell pa soubis va dorn en dour. Azezañ a ris war ribl ar stêrig ha chom da arvestiñ ouzh an nadozioù-er a nijelle a raosklenn da raosklenn, dibreder a-grenn.

Emberr avat e stagis d'en em chalañ. Soñj a zeue din eus kement en doa Lansoc'h dezrevellet din a-zivout ar goadeg-se. Rannbarzhadoù bras anezhi a oa dalc'het gant strouezh didreuzus, rannet etrezo gant paludoù terzhiennus. N'oa hent na wenodenn e neb lec'h. A-hend-all, d'ar c'houlz-bloaz m'edomp neuze n'em bije kavet boued ebet d'en em vagañ. Penaos en em reteriñ ivez ma teue ar glay hag an amzer fall? Hep kontañ al loened ferv : n'em boa arm ebet d'en em zifenn.

E gwirionez ez eas an heol da guzhat a-droñv ur pallennad koumoul c-kreiz an endervezh ; morglav a grogas da gouezhañ, munut ha spegus. Goude bezañ soñjet ervat e varnis e oa ar furañ heñvel ar wazh-dour e strad ar ganienn ; gwir-heñvel e oa e kajfen evel-se gant meuriadoù gouezidi da vare pe vare.

Da gentañ e kerzhis diboañ kaer. Pa voen deuet er-maez eus ar stankenn e tuezis ur wezeg uhel, derv ha fav enni ha disoc'hañ a ris en diwezh d'un digoadenn vras. Diwar neuze avat e voe diaesoc'h din mont war-raok. Brousgwez ha strouezh, drez ha lann a save ken stank ha ken start dirazon m'am boa mil poan da doullañ va hent. A-benn div pe deir eur e rankis arsav, divi a-grenn. Abardaeziñ a rae. Edo an heol, dispak d'ar c'houlz-se, a rez gant bleñchoù ar gwez. Gras a gavis o c'hourvez e-harz ur saprenn da ziskuzhañ.

War-nes morediñ e oan pa skiltras a-greiz-holl ur yudadeg. Dasseniñ a rae an douar gant galoupadeg ur vandennad anvaled. Diwar herr e oan lammet em sav ha krapet em boa war ar wezenn sapr. Damc'houde e terede a ziw ar gres'h ur gronnad chas bras ha melon rouz, eus gouenn ar "c'hon dieub" evel ma rae Lansoc'h anezho a-wechoù ; breudeur ar re zoñv ez int nemet e kendalc'hont bepred da gantren er goadeg-kreiz. Ferv ha kriz evel ar bæizi kent ez int : sur, ken buan all e vijen bet taget ha drailhet ganto. Skrijal a ris a ziw ar lerc'h oc'h empennañ pebezh planedenn spontus e vije bet gallet c'hoarvezout ganin. Hogen pell e oa dija an anvaled : oc'h hemoc'hiñ ur preizh all e cant. Hep dale en em ledas endro ar sioulded. Hiboud an dour ha geiz an evned a voe deuet mat din evel sonerezh ar baradoz.

Kentañ a ris pa voen diskennet diwar va c'hlud e voe kerc'hat din ur geueudenn start. Ur pennbzh a vije talvoudus din d'en em zifenn.

Heuliañ a ris ribl ar stêrig adarre. Epad un eur

hanter bennak e c'hellis kerzhout. Neuze e kouezhas an noz en un taol. En em astenn a ris dindan un dervenn. Kerkent e chomis kousket. Hogen berr e voe va fennad hun. Tregerniñ a rae yudadeg ar c'hon e-kreiz ar c'hoad, pell awalc'h diouzhin avat hag a sachadoù. A dastorn e oan kra-pet adarre er wezenn ha dispourbellañ a raen va doualggad tro-war-dro war glask al loened gouez. "Chañs am bo m'en em ennan yac'h ha saly diouzh an onkadenn-mañ," a soñjis. Kounañ a raen ne grede ket Ledeneziz dont tre e koadegi kreiz o bro en abeg d'al loened gouez koulz ha d'ar pobladoù disuj o unan. Hag evit ar wech kentañ em boe keuz na vije Lansoc'h en em gavet stal din. Gantañ n'em bije ket doujet kement mont da goll.

En diwezh e oa tavet ar yudadeg evit mat. Hogen da c'houlouñ-deiz hepken em boa kredet kuitaat va goudor. Kousket em boa graet adarre. Pistig an naon am divoras : gouzout a ris n'em boa debret begad ebet abaoe peder eur warn-ugent. Pellaat a ris diouzh ar wazh-dour ha pignat betek un uhelenn a hañvale bezañ bet gwastet gant un tangwall e-kerzh un hañvezh gor er bloavezhioù kent : penn-dogennoù ha targosioù kras a oa strewet penn-da-benn dezhi. O furgutañ er geot gant va bazh e tichouis hep men-nout din ur vozad yer a ziskampas, pennfollet, en ur c'hra-gailhat. Galoupat a ris war o lerc'h en ur hejañ va bazh gant ar soñj da lazhañ unan anezho hogen strebotiñ a ris ouzh ur wrizienn ha setu me kouezhet a c'hwen va c'hof war al leur. Sevel a ris endro kerkent met dirusket mat e oa va deouarn ha torret naet va c'hoant mont da chaseal. "A-hend-all," a soñjis d'en em frealziñ, "penaos em bije gallet pozhañ al labous-se ?" Kregiñ a ris neuze da c'hwilliñ an trowardroioù gant an dezo da zizoleiñ neizhioù. En dro-mañ ne ris ket kazeg hag abarzh pell em boe dastumet un toullad mat a vioù. Klukañ a ris un nebeut anezho hag an tamm pred-se am c'hennerrzhas. Neuze e tiskennis endro betek ar stêrig hag e torris va sec'hed eno.

E-doug an deiz e kendalc'his da vale. E-tro kreisteiz e ris un ehan ha debriñ ar vioù a chome ganin. Ha me war-raok adarre. Hogen dre ma tremene an amzer e teue pounneroc'h-pounnerañ va izili ; sammet e oan gant ar skuizh-der ; roget e oa va dilhad, drailhet solennoù va botoù, un tamm botoù kerdin e oan kustum da lakaet er gêr hepken peurvuiañ. War ar marc'had e oa teñvalaet an amzer a nevez. Ar glizhach a veuzas an argoured. Deverañ a rae an dour a dakennoù lintrus gorrek a-hed an delioù pounner. Bep an amzer e klaske an heol en aner en em zamziskouez adreñv pallennoù unvan ar c'hogus : lufrennaouiñ a rae ar c'hoad epad ur pred berr. Kentizh avat en em serre an neñv endro ha bac'het e oa ar c'hoad adarre er voustrailhenn louet. Evidon da hedañ bepred ar stêrig ne ouien tamm ebet war besurt tu e valeen, ma kave din e oan kilhet a-grenn.

A-benn ar fin, war-lerc'h ur gornblegenn, e oa aet naoz ar stêrig war ledanaat ; ur c'heoteg a zigo-ras e-kreiz ar c'hoad. N'em boa ket mui nerzh d'ober ur c'hammed war-raok ; mont a ris em c'hoazez e gwasked ur bod skav. An heol a oa deuet a-benn da barañ d'an ampoent ha gwrez e vannañ a reas vad din.

Edon o tiskuizhañ eno abaoe un hanter eur ben-nak pa voe dedennet va evezh gant un trouz iskis, a seblan-te bezañ da gentañ hini ur c'haloupadeg hogen a droas buan d'ur soroc'hadeg mesket gant gwic'hadennoù. Daoust d'am loes e savis em sav ha bale dillo war-du ar gwez da glask repu. N'em boe ket goar avat da gas va ratozh da benn : e-biou din e tremenas ur bodad moc'h a skoas kerkent war-du ar wazh-dour elec'h e chomjont da ebatat ha da dorc'hwenial hep teurel tamm pled ebet ouzhin. Epad un herrad e chouis da arvestiñ ouzh al loened espar-se, gant o min tougn, o daoulagad bihan kuzh adreñv o diskouarn ledan da sabatuiñ. Egiz ma ouzoc'h, Morgan, bez e oa milionoù eus ar bromneged-se el Ledenez en amzer an eil riez : unan eus pinvidigezhioù ar vro e oant. Ar re a oa dreistvevet d'an Drouziwezh a oa deuet da vezañ gouez ha Ledeneziz n'o doa ket klasket betek neuze o doñvaat endro. Davez hemole'h a bourchasent hepken d'ar ouezidi.

Dres, o nesaat ouzh ar bagad e verzis e chome unan eus an anevaled a goster diouzh ar re all, gourvezet war ar geot, serr e zaoulagad : ur gouli don a oa en e dalier, graet moarvat gant ur saezh bennak bannet gant ar ouezidi. Pa guitaas al loened all ar stêrig en em ruzas d'o heul en ur gammañ.

Chomet e oan va unan penn. Diouzh an darvoudig-se em boa dezastumet ne c'helle mui bezañ gwall bell ar meuria-doù disuj. War-bouez un devezhiad bale e tizhjen anezho emichañs. "M'am bez nerzh awalc'h warc'hoazh da gerzhout," a reizhis em c'hreiz. En abardaev-se ne oan ket gouest da gendroc'hel gant va beaj.

Diwezhat e oa anezhi dija a-hend-all. Izel e oa an heol ; erru e oa a rez gant bleñchoù ar gwez a voe karget a aour epad ur pred berr. Ur voull ruz a baras etre barrennoù ar c'hefioù hag a steuzias en un taol adreñv ar c'hrec'h. Ludu ar serr-noz a ouellias ar goadeg a nebeudoù.

Klask a ris ul lec'h klet evit kousket. Ha me da c'hourvez e-harz ur wernenn. Dolt e voe an noz avat hag anoued am boe : ne c'hellis ket kousket. En diabell e laoske ar c'haouenned o garmadennoù efreizus o respont an eil d'eben. Logod-dall a nije-dinije endro din, ouzh va spinañ, diwelus ha didrouz, gant un donster heugus. Neuze e serren va daou-lagad ha klask a raen un tamm dihez e fistilh peoc'hus ar wazh-dour a varvailhe bepred e don ar stankenn.

\*\*\*\*\*

Pennad 12

Ar ouezidi



Adkregiñ a ris da vale antro-  
noz vere . Kacraet e oa an  
amzer. Gollet em boa diskoachañ  
vioù douryer hag en em vagañ  
ganto. Deuet e oan a-benn dre  
un taol chañs da bakañ un dluz  
er wazh-dour hogen n'oan ket  
bet evit hen debriñ en kriz  
evel-se ken em boa taolet ane-  
zhañ kuit a-benn ar fin.

War-dro kreisteiz em boa  
ehanet epad tri c'hardeur ben-  
nak. Neuze en em lakais endro  
da gerzhout a-hed ar vriell :

aeoc'h e oa din a-benn neuze  
rak ul letonenn stank a c'holoe  
ribloù ar stêrig. D'abardaez  
avat e oan og adarre. Daoust m'em  
boa kerzhet war ar geot  
abaoe kreisteiz e oa kignet va  
zreid. Moarvat ne c'helljen  
ken mont gwall bell war-raok.  
Hogos e oa din eta fallgaloniñ  
pa daolis evezh a-greiz-holl,  
war-lerc'h ur gammdroenn,  
ouzh roudoù treid tud en un  
tachad eus ar ribl, tud diarc'henn  
hep mar - tres ar biz-meud  
dreist-holl a oa anat. Sellout a  
ris endro din : nepell alese e  
tarzhe ur wenodenn a gase  
war-laez dre greiz ar goadeg ;  
pleustret stank e oa moarvat  
an divarzh-se rak kalemarc'het  
e oa e meur a lec'h.

- Ar wech-mañ n'on ket pell  
diouzh ar pal," a

soñjis.

Gant un tamm enkreiz hogen  
mennet mat evelato e stagis  
da heuliañ ar wenodenn. Didenn  
kaer e saken tizh eno hag  
abarzh pell em boe graet ur  
pennad mat a hent. War-dro,  
c'hwec'h eur, a gav din, e kejis  
gant ar ouezidi gentañ. Bez e  
oa anezho un tolpad gwrac'hed  
kozh, dispak o blev gwenn,  
a oa o wriat kroc'henoù loened  
d'ober dilhad moarvat ; kozh e  
oa ar merc'hed-se da welout,  
Morgan, hogen an darn-vuiañ  
anezho, egiz ma ouezis a-c'houde-  
vezh, n'o doa ket tapet hanter-  
kant vloaz. Dre jestraoniñ e  
Klaskis lakaat ar maouezed  
-se da ziskouez e pelec'h edo o  
c'hêriadenn hogen ne oant ket  
chomet da selaou. En ur choual  
e oant en em skignet a bep tu.  
Koll a ris ar gwel anezho.

Kendalc'het em boa neuze da  
vont war-raok. Un tammig larkoc'h,  
e kern ur run, e oa paret dirak  
va selloù un dremmeliad ec'hon  
a uhelennoù dereziet an eil war-  
c'horre eben, kafunet en un  
nivlenn arc'hlas ; distankoc'h  
e hañvale ar gwez bezañ er  
rannad-vro-se. Ul lenn kann  
a lufre sioul en traon ; war  
ar ribloù anezhañ e oa strewet  
lochennoù toet e plouz ha  
savet war bostoù.

A-greiz m'edon oc'h arvestiñ  
ouzh ar gwelva dic'hortoz-se  
e tregernas un hir a daboulinadeg  
a heklevas a dorgenn da dorgenn,  
ur skrij her c'hlevout. Dek  
munud goude e teue d'am  
diarbenn ur bagad gouezidi  
armet gant bouc'hili maen,  
gwaregoù ha biroù, gwisket  
gant krec'hin loened - krec'hin  
kizhier ar c'hoadeier, a verzis  
- hir o blev hag o barv, ma  
oa hanter guzh o dremm. En  
ur serrlagad e voen kelc'hiet  
gant ha rankat a ris mont  
d'o heul.

Pemp munud goude e oan  
degouezhet er gêriadenn. Ouzhpenn  
al lochennoù bras a oa bet  
savet war bostoù war c'hlannoù  
al lenn e spurmantis un dek  
bennak a foukennoù all renket  
tro-dro un doare leurenn ; e-  
kreiz al leurenn -se e oa bet  
plantet ur peulvaen livet gros  
e stumm un den gant diskouarn  
vras hag ur fri hir. E-kichen  
ar peulvaen-se e voen lezet  
epad ur frapad amzer.

A-boan ma oant em c'hoazez  
war an douar e oa dilammet  
d'am bete un toullad merc'hed  
ha bugale, c'hoant dezho  
kuriuziñ ouzh an estrañjour  
nevez erru. Ar vugale a oa  
noazh pih peurliesañ ; hini-  
nnoù, ar re vrasañ, a zouge  
un tamm otoù berr endro d'o  
dargreiz ; darn ne oant ket  
gwall yac'h emichañs rak  
moanston e oa o izili ha  
koefvet euzhus o c'hof. Ar  
merc'hed a oa fichet iskis,  
livet o divjod gant ur meni  
pri ruz, gwisket gant lostennoù  
berr, noazh o divronn avat.  
Epad ur pennad e oa manet  
an holl re-se da zisloagal  
ouzhin, hep filval, egiz  
delwenoù. Tamm ha tamm avat  
o doa kemeret hardishegezh  
ha dedostaet e oant ouzhin.  
Staget o doa da stekiñ ouzh  
va dilhad gant un aer souezhet  
hag aonik, o sachañ war-c'  
horre, da wiriañ moarvat e  
peseurt danvez e oant graet.  
Neuze o doa en em lakaet  
da gaketal ha da flepiñ taer  
kenetrezo. En diwez e oa  
degouezhet unan eus ar  
wazed o doa harzet ac'hanon  
ha dichouet en doa ar frioù  
ranell diwar va zro.

Graet en doa sin din mont  
d'o heul. Sentet em boa outañ.  
Chomet e oamp a-sav war  
ribl al lenn. Eno edo ar  
peurrest eus ar bagad a oa  
deuet d'am diarbenn, o c'hor-  
toz a rener da zont moarvat  
rak troet e oa selloù ar  
wazed etrezek al lenn egiz  
pa vijent o c'headal unan  
bennak. Chom a rejomp eno  
un hanter-our test da vat.  
An noz a oa o serriñ pa  
nesaas ouzh ar ribl un  
toullad skafoù strizh :  
gouezidi bet o pesketa a  
oa enno, sur awalc'h. Rener  
ar meuriad a oa ouzh o  
ambroug atav. Bez e oa  
anezhañ un den yaouank,  
kaer e neuz ha dedennus  
awalc'h, gant e vlev du  
hir rodellek hag e varv  
ruz. Ret eo din lavarout  
deoc'h, Morgan, ne vev ket  
gwall bell ar pep brasañ  
eus ar ouezidi-se, maget  
treut ha maz int, diviet  
gant ul labour dizehan,  
gwasket gant an amzer fall,  
ar yenien hag ar glebor,  
taget gant klefvedoù e  
bep seurt : kalz anezho a  
varv etre pergont ha  
pement vloaz.

Hogen n'eo ket ouzh  
hemañ e taolis pled ar  
muiañ, Morgan, ouzh an  
hini a oa ouzh e amheuliañ  
ne lavaran ket. Gwisket e  
oa, gwir eo, evel ar  
ouezidi all, da lavarout  
eo

gant foulennou gwriet gros kenetrezo hogen en eneb d'an holl re a oa war e dro hag a oa bleuet hir ha stank e oa moal ha luf e glopenn evel ur vi, blouc'h ha roz e zivoc'h, ur bam. Bihan e oa a-hendall hag er c'heñver-se e tenne awalc'h d'ar ouezidi. Hogen tev ha kofek e oa ivez tra ma oa treut eskern ar ouezidi.

Kerkent ha m'o devoe ar besketourion tapet douar en em daolas ar ouezidi da gej outo ha gant jestrou bras, o tiskouez ac'hanon a heligenta, e krogjont da zezrevell moarvat penaos o doa paket ac'hanon. P'o devoe echu e troas ar rener war-du ar paotr tev ha lavarout a reas dezhañ en e drefoedaj :

- Kek se-s mek-la ? Dmañd-li dou-s k-i veñ.

Evit va brasañ souezh e stagas ar paotr tev da gomz ouzhin e ledenezeg fraezh ha goulenn a reas ouzhin :

- Piv oc'h hag eus pélec'h e teuit ?

Kregiñ a ris da zisplegañ penaos e oan deuet eus an Enezenn d'al Ledenez - hep resizañ eveljust gant peseurt mennad e oan deuet - ha penaos ivez e oan bet prizoniet gant Ledeneziz. Pa venegis anv Lansoc'h avat e troc'has an hini tev va c'homz ouzhin.

- C'hwi ' anavez hemañ ! " a estlammas.

- Ya," eme.

Ar paotr tev a oa strafuilhet. Divegañ a reas a-benn ar fin.

- Va gwellañ studier e oa en amzer ma oan kelenner

e Loronan.

- Piv oc'h-c'hwi 'ta ? " a c'houlennis neuze.

- Konomor ez on-me," emezañ, "harluet gant va c'henvroiz digar etouez ar ouezidi. Marteze hoc'h eus klevet anv ac'hanon.

- Ervat," a respontis.

Diwar neuze e voe disammet va spered ha gant muic'h a frankiz hag a hardishegezh kendalc'his da gontañ dezhañ va avanturioù. P'em boe echu en em lakaas Konomor da dreiñ va c'homzoù. Skiltrus e oa e vouezh hag orbidoù e-leizh a rae, egiz an holl ouezidi. Eveljust, ne intentis grik pe dost eus kement a lavaras. Daoust din anavezout, Morgan, an hen yezh veur a sevenadurezh ma tiskenn an trefoedaj-se diouti n'oan ket evit heuliañ tamm diviz ebet er galleg arnevez-se (evel ma rae Konomor anezhañ), ken distreset ha displeberet ha maz eo bet abaoe mil vloaz war vuzelloù ar ouezidi : a c'houde an Drouziwezh n'eo ket mui na lennet na skrivet.

Pa voe bet peurzistaget e brezegenn da Gonomor avat e vezis em boa gounezet fiziañs ar ouezidi. Ar rener, Lfef e anv, a zistilhas adarre un nebeut komzoù a voe troet din evel hen :

- Lavarout a reer deoc'h ez oc'h deuet mat amañ Keralen; meuriad ar C'hallaoued a ginnig deoc'h e herberc'h a galon vat."

Diwar neuze ez eas pep hini diouzh e du da bleidiñ gant e gefridi. Chom a ris gant Konomor ha me bamet awalc'h gant onestiz ar ouezidi-se em boa klevet kement a zroug diwar o fenn. En ur varvailhat e rejomp un tamm tro er gêriadenn. Edod oc'h aozañ un tantad bras e-kreiz al leurren vras evit rostañ unan eus ar moc'h a oa bet lazhet gant ar ouezidi epad o hemolc'hadenn diwezhañ. "En hoc'h enor-c'hwi e vo debret ar pemoc'h-se fenozh," a zisklerias Konomor din. "Evel-se e lid ar C'hallaoued darvoudoù bras ha dic'hortoz evel ho kweladenn a hiziv - rak lavaret em eus dezho e oac'h un den a bouez en ho pro hag e oa houmañ dreist da hini Ledeneziz.- hag eus ar gouel-se e reont Fest an Hoc'h, ha na c'hoarvez ket bemdez, me ' respont deoc'h."

E gwirionez e krogas ar merc'hed da zivouzeñ ha da gignat ur pemoc'h. Ampart ha nerzhus e labourent ; abarzh pell o devoe kaset o zrevell da benn. Koant e vije bet ar gwragez-se, Morgan, ma ne vijent ket bet bec'hiet gant al labour evel ma oant : int a rae war-dro ar gegin; drailhañ a raent ar c'heuneud, choukata a raent ar sammou. Truez am boa outo e gwirionez. E-keit-se e chome ar wazed da landreantiñ, c'hoari bizibul pe n'ouzon peseurt c'hoari all - bet ijinnet evito gant Konomor eunan egiz ma vezis a-c'houdevezh - gant tammou prenn a bep seurt liv.

Lezet hor boa ar merc'hed da fardañ koan. Ha ni da skeiñ war-du al lenn. Manet e camp a-sav war ar ribl, etal al lochennoù savet war bostoù. Eno e oa stag ar bigi, un doare kanodoù hir aozet diwar barroù aozilh plezhet ha kenweet, ha krec'hin loened peg outo ; lusket e oa ar skafoù -se gant roevioù divloek. Akuit tre e oa ar ouezidi da fardañ hevelep bigi, Morgan.

An noz a oa o serriñ a-benn neuze. Skinoù izel an heol a glisie bleñchoù alaouret ar gwez tro-dro al lenn, diroufenn a-grenn ar gorre anezhañ, par awalc'h d'ur pennad mohera o treiñ da limestra en devalded en em lede ; moudig -avel ebet, dilusk ha klouar an aer o kouviañ d'an diskuizh e diwez an devezh. Poan am boa da grediñ, Morgan, edon e Laniltud, rouantelezh an Ankoù, ur sizhun arak hag e oa fin d'am zrubihoù diwar vremañ.

Azezañ hor boa graet war ur garregenn, war vord al lenn, er-maez eus ar gêriadenn. Da gentañ em boa gouenna-taet Konomor diwar-benn ar meuriad en doa roet bod dezhañ.

- Evit komz resis," eme Gonomor, "Gallaoued n'eo ket anv ar meuriad-mañ hepken met kentoc'h hini ar ouezidi dre vras. Ledeneziz desket a oar mat an dra-se met dre zispriiz a gredan, e arveront an anv a "ouezidi". Me ' gav din ez eus un seikont bennak a veuriadoù a C'hallaoued, an holl o komz rannyezhoù disheñvel, ken o deus poan d'en em intent eus un taolead d'egile. N'o deus ket kalz darempred etrezo a-hend-all. Diaes tre eo beajiñ a-dreuz an argoued. Ouzhpenn -se ez eo troc'het Gallaoued ar Reter diouzh re ar C'hornog

abaoe maz eo bet trevadennet kreiz hor bro. Evelato e oar an holl veuriadoù e tennont o orin diouzh an hevelep kef evito da zougen pep a lezanv disheñvel d'en em ziforc'hañ an eil diouzh egile. Meuriadoù ar ranngoadeg-mañ da skouer a vez lesanvet "Potch". "Fras-Potch" eo anv klok ar meuriad -mañ.

- Pebezh lezanv farsus," emezon en ur c'hoarzhin.  
- E gwirionez ez eo aes tre diskleriañ al lezanv -se hervez trefodaj Gallaoed ar c'horn-bro-mañ," a adkrogas Konomor. "Potch a zo ur berradur eus ar ger "podcha". Eval ma c'harvez alies er rannyezhoù-mañ ez a da vut vogalenn diwezhañ ar ger. "Podcha" a yeas eta da "bPodcheu" hag en diwez holl da "bPotch".

- N'hoc'h eus ket diskleriet ster ar ger-mañ," a verkis.

- Gwir eo," eme Gonomor. " 'Podcha' eta a zo hen stumm ur ger hag a dalvez hepuiken "kroc'hen-kazh" pe "kroc'hin-kizhier" - rak n'eus liester ebet e yezh ar C'hallaoued egiz ma ouzoc'h hag an dra-se (etrezomp!) a ziskouez pegen izel eo bredrez ar bobl gaezh-mañ. Me ' gave din gwechall e oant isdiorreet hepken ; ar wirionez eo ez int isvarrek ivez siwazh !

- A soñj deoc'h ? " emezon, suezhet.  
- Sur eo, aotrou ha pezh hen diskouez eo dres ar boaz en deus roet dezho an anv iskis-se. Abaoe meur a gantved e savont kizhier d'en em vagañ ha d'en em wiskañ. C'hwil ' vo ali ganin war ar poent-se da vihanañ, aotrou : houmañ n'eo ket ur c'hiz tud seven."

Kounañ a ris neuze e oa gwisket gant krec'hin kizhier ar gouezadezed kentañ em boa kejet ganto.  
- Penaos avat," a c'houlenis, "eo deuet dezho ar soñj eus an ijinerezh dibar-mañ ?"  
- Displegañ a rin deoc'h," a respontas Konomor. "Gwechall gozh - me a gomz eus meur a gantved zo - e oa leun an argoued a loened addeuet da vezañ gouez war-lerc'h an Drouziwezh. Hep dale e vordilhas eno moc'h, kon, kizhier, konikled, yer, houldi, gwazi hag all. Ledeneziz a grogas abred da bakañ ha da zamesa ar c'hon. Ar re a chom c'hoazh er goadeg a dag kentoc'h ar moc'h : bras ha kreñv evel maz int e teuont aes a-benn eus an anevaled-se a zo dinoazh ha dizifenn awalc'h a-hend-all. Ar c'hizhier avat o doa liesaet spontus o niver e berr amzer hag abarzh nemeur e neradent e pep korn eus ar argoued. N'o doa ket kalz tra da zoujañ a-berzh ar c'hon a veze hemolc'het gant an dud ; gouest e oant a-hend-all da dec'hout diouto dre gratat er gwez. Bevet o doa da gentañ diwar logod, logod-mors, razhed ha me 'oar-me. A-benn ar fin, ken stank ha ma oant-i, e tiouennjont an holl grignerion-se gwtibunan ma ne chomas bev hini ebet anezho. D'ar c'houlz-se eo e stagas ar c'hizhier da dagañ ar c'honikled. Evel-se avat e teujont da gevezañ gant ar ouezidi rak ar re-mañ ivez a rae eus al loened-se o bevañ pennañ ; ar c'hrec'hin anezho a impli-

jent zoken d'en em wiskañ. Petra a rejont avat pa ne gavjont mui konikled awalc'h diouzh o ezhommoù ? Hama ! treñ war-du heskinerion ar c'honikled kaezh, na petra 'ta ! A ! Aotrou, an dra-se a brou mat penaos ez eus ur justis er bed -mañ.

- A-dra-sur," emeve, rak ne felle ket din feukiñ va ostiz.

- Goude bezañ padet da gizhiera epad ur c'hantved bennak e kavas gwella ar "Fras-potch" o sevel a unan, kuit a redek ar c'hoadoù d'o fourchas. Ar sevel-kizhier a voe eta ur c'hammed kentañ war hent an diorreadur hogen me ' lavar deoc'h o deus c'hoazh hent d'ober arak diraez live-sevenadur Ledeneziz. Setu eta, aotrou, un diverra eus istor ar meuriad-mañ. Ret eo lavarout evelato o deus bet kalz da c'houzañv a-berzh va c'henvroiz hogen an dra-se a vefe re hir da zezrevell deoc'h."

~~~~~

Pennad 13

Konomor
a gont e vuhez

An noz a oa serret a-benn neuze. Edo al loar o paouez dispakañ dreist da vleñchoù ar gwez en tu all d' al lenn, ul loar rouz ha ramzel, he doa enaouet mil dassked flammen doureier teñval. Konomor avat a oa chomet dilavar. Huñvreal a rae. Ne greden ket e zirenkañ. A-benn ar fin evelato, disoñj kaer, gant an dezo da adskoulmañ gant an diviz, em boa goulennet goulennet outañ :

- Ha c'hwil, aotrou Konomor, penaos eo dic'hañset deoc'h dont d'ober hoc'h annez e-touez ar ouezidi-mañ ? "
Sebezet e voen, Morgan, o verzout pebezh strafuilh em boa plantet e-kreiz va c'hendivizer. Konomor en doa laosket un huanad don, troet e selloù war-laez ha dis-taget ar c'homzoù-mañ :

- Siwazh, aotrou, karet em befe-me dibradañ va bro d'an uhelrez m'emañ degouezhet hoc'h hini ennañ hogen handeet on bet gant gwarizi verrboell hag erez dall va c'henvroiz, ha c'hwitet em eus. Me ' wel ervat en em c'houlenit penaos eo c'hoarvezet ganin, siwazh, kouezhañ e ken mantrus reuzeudigezh, penaos ez eo bet kriz awalc'h va c'henvroiz hag a-wechoù zoken va c'henvreudsur evit va barn da beurvevañ va buhez e-kreiz ar boblad diseven-mañ. Emaon o vont d'hen diskleriañ deoc'h bremañ tuchant ha c'hwil ' c'hellou merzout, aotrou, e pebezh gwalleurioù e vez taolet neb a sent hep fur-nezh ouzh broud ha tan ar yaouankiz."
Tevel a reas Konomor epad ur frapad a-benn sec'hañ an daeroù pounner a ziruilhe war e zivjod.

- Ur pemzek vloaz bennak a zo," emezañ, " e oan kelenner e Skol-veur Loronan. Brud am boa gounezet da neuze oc'h addembann gant notennoù stank un nebeut skridoù a oa bet kavadenet da vare an Dizoloidigezh hogen a oa bet gwalleged betek neuze gant hor gouizieion dre ma ne glote ket ar menozioù anezho gant hor c'henurzh-armedh. Mulet e oant bet evit ar wech kentañ un tammig amzer araok an Drouziwezh. Pledet em boa dreist-holl gant ar peder oberenn-mañ a oa talbennet evel hen : "Dornlevr ar bankerezh", "Korvo ha kampi", "Arver an arc'hant", "Penaos ren un embregadur".

Diwar-lerc'h va labourioù e oa bet kinniget din ar gador a istor an arboellerezh en amzer an eil Riez e Skol-veur Loronan ha tapout a ris zoken uhelañ merk-enor ar gelednadedrezh en hor bro : ar velchonenn aour d'an oad a dregont vloaz. Re vrav e oa kement-se evit padout, siwazh. Tamm ha tamm, hep gouzout din zoken en deroù, e teuis da erbediñ ar menozioù a oa displeget el levrioù-se ha da ginnig pennsturiennoù an embregerezh dieub da ziskoulmañ kudennoù hon armerzh-ni. En ur ger, foll awalc'h e voen evit krediñ edo er gevalaouriezh louzoù burzhodus hon holl drubuilhoù kevredigezhel. Mallus ha difraeüs bras e oa, a skriven neuze, ma felle deomp diorren e berr amzer armerzh ar vro-mañ, degemer endro ar gevalaouriezh a-benn dedeurel diouzh an druilh marc'hadourezhioù ha traezoù oberiet a bep seurt hag uhelaat buan evel-se rez-kuzumiñ ha rez-bevañ hor c'henvroiz.

Kavout a rae din e oa anat awalc'h va dezastumadurioù hag e vijent resevet dichipot kaer gant an dud skiantek el Ledenez. War ar poent-se avat e oan gwall faziet e gwirionez. A-vec'h m'em boa kroget da ober un tammig bruderezh endro din e savas a-enep din an darn-vuiañ eus renerion ar stad hag atebieion an iliz. Ar re-mañ avat a oa ar re dactrañ. Tamall a raent din klask degas el Ledenez sioù ha c'hoantegezhioù hudur a rae o reuz en amzer an eil Riez pa oa c'hoazh hor gourdaoù gwall levezonet gant ar bobl he doa o gwasket a viskoazh hag a zo aet da get abaoe, sioù ha c'hoantegezhioù hag a oa, a drugarez Doue, emezo, dianav betek neuze en hol Ledenez venniget, ar bizhoni, an direizhded, ar mac'homerezh, al lontegezh, ar vezventi, ar gwall-youl da berc'hennañ madoù dibad ar bed-mañ ha me 'oar-me petra c'hoazh. Arnodif a ris breutaat gant tierned ar c'hen-drevidioù kravezel hogen en aner e ris. Ar re-mañ a felle dezho bezañ mirourion an Hengoun hag, eveljust, n'o doa feiz vat na lealded ebet. Stag e oant ouzh ar boutinelerezh dre ma oa anezhañ an Urzh kozh ha netra ken ; biskoazh n'o doa esaet burutellañ anezhañ.

Pell amzer e stourmis da lakaat va menozioù da drec'hiñ. Diskouez a ris anat e oa ar gevalaouriezh kalz reizhoc'h eget ar boutinelerezh peogwir e roe da bep hini e chañs d'ober berzh ha da sevel betek uhelañ pazennoù ar

gevredigezh. En ur gevredigezh voutingar, a zisklerien, ne vez enoret nemet an dud a spered pe an dud a vertuz; ar perzhioù-se, avat, a zegouezh bepred diwar herezh en hevelep tiegezhioù. Perak, neuze, n'o defe ket an dud dispered koulz hag an dud divertuz o zammig chañs ivez ? Araok an Drouziwezh, a gendalc'hen, o tennañ skouerioù diwar al levrioù kozh am boa adembannet, e c'helle n'eus forzh piv, gant ma ouije en em ziluziañ, dastum mouneiz eleizh ha derc'hel a se ur ank enorus er gevredigezh. Siwazh, en trede Riez e oa bet kemmet penn d'ar vazh er c'heñver-se. Sujet e oa an holl d'an dud parfet, mailhed ar c'henstrivadegoù hag an arnodennoù, hag ar baotred ouesk, war zigarez n'oant ket douget d'ar studi, n'o devoa mui an disterañ chañs d'en em c'horren e svenadur kompred al Ledenez.

Evel ma soñjit awalc'h, va mignon, ne blijas ket nemeur va frezezennoù d'al lod muiañ eus va selaouerion hogen d'am c'henvreudeur eus ar Skol-veur, e tisplijjont ivez meurbet. Komprenit : ar re-mañ n'oant ket evit pardonif din bezañ tapet ar velchonenn aour da dregont vloaz. Ken dizamant e kavailhjont a-arep din avat ma tizhjont lakaat Henour ar Skol-veur, ur c'hozhad kripou anezhañ d'an ampoent, da lemel diganin va c'hador-geleñn. Kaset e voen da skoliata ar c'hrouadurioù en ur vour'hadennig dister eus hanternoz al Ledenez. A ! Ma vijen bet poellek awalc'h eno da chom peoc'h evit mat. Siwazh, broudet e oan dalc'hmat gant va arc'hwere. Ne c'hellen ken komz ouzh ar ouizieion ? Hama ! D'am skolidi e prezegfen an aviel! Adsevel a ris evito un hen c'hoari em boa kavet an taolennadur anezhañ er skridoù am boa studiet a-ziagent hag a oa anvet "M o n o - p o l i g". Gant levezon eleizh e verzis e kemere va skolidi kalz a zudi ennañ. Dija e soñje din e vijent gouest da gompren va menozioù ur wech ma vijent kresket da c'hour ; zoken e viren ar spi da gavout harperion nevez er rannvro m'oa bet dilec'hiet enni ; awalc'h e vije, a faltazien, skignañ ar c'hoari burzhodus-se en holl skolioù an hanternoz. Hogen, allaz!abarzh pell e kouezhas va biz-meud em dorn. Flatret e voen dirak poellgor ar barrez. Tamallet e voe din kontammañ spered ar yaouankizoù. Harzet e voen, stlejet betek Loronan, kraouiet en ti-bac'h kreiz."

D'ar mare-se e paouezas Konomor a gomz. Lakaat a reas e benn etre bozioù e zaouarn ha dirollañ adarre da ouelañ.

- Va mamm, siwazh, a voe rannet he c'halon gant an darvoudoù mantrus-se hag a varvas damc'houde. Evurusamant ne oan ket dimezet."

Konomor a chomas dilavar epad ur pennad. Neuze e sec'has e zaoulagad gant kil e vrec'h hag e adkrogas :
- Tri miz war-lerc'h e voe graet va frosez hag er gêr-hont he doa estlammet ouzh va c'hliod a c'hoapaas va dismegañs. N'oa ket follet din kemer breutaour na difennour ebet. Hogen va barnerion ne deurevjont ket zoken va lezel

da zistagañ va frezegenn penn-da-benn ; n'houljont ket kle-
vout diganin pegen spletus e oa ar stumm arboellerezh am boa
ijinet. A-greiz ma oan o komz e savas an tamallour en e sav
hag en ur eunañ war va zu ur biz gourdrouzus ha dialus e
c'harmas :

- Na selacuit ket ouzh an ampouailh-mañ, aotrou-
nez. Na zisoñjit ket en deus an torfetour anzavet e unan e
wall-daol p'en deus roet d'e c'hoari milliget an anv a
"vMono-Polig" a zo deuet da vezañ ken gwall-vrudet el Ledez-
nez. N'ouzoc'h ket moarvat, aotrounez, petra a lavar an anv
daonet-mañ "Mono-Polig" e skrijan ouzh hen distagañ. Emaon o
vont d'hen diskleriañ deoc'h. Klasket em eus pizh en devezh-
ioù-mañ ebarzh an "Dafar-meur", an hen geriadur-se a zo gues-
tlet d'ar c'hentledenezeg, egiz ma ouzoc'h..."

Neuze e troas an tamallour war-du ennon, o kas
reut e benn war-dreñv d'am daciañ, tan an egar en e zaoulagad.
- Te a grede, Konomor, emichañs, ez pefe hon touel-
let gant an anv misterius-mañ, hogen, n'en em chal ket, difaziet
e vi emberr. Ya, aotrounez, en "Dafar-meur GP", pajenn 3.745,
en traon, em eus kavet alc'hwez e dorfed. Rak petra a dalvez
"Hono" pe kentoc'h "Monok" er gentyezh, nemet mestr hag aotrou.
Evit ar ger "Polig", n'en deus, a soñj din, tamm ezhomm ebet
da vezañ plaenaet : sklaer awalc'h eo ar ster anezhañ peogwir
ned eo nemet lezanv an Droukspered, mestr ar gaou. Evel-se
eta, Konomor, az poa roet d'az c'hoari milliget an anv a zeree
outañ : Polig eta, mestr ar gaou, a oa da vezañ aotrou. Setu
petra e oa da uhelvennad hag e kave dit moarvat ez pijs sacht
d'az heul ar sodion a oa o c'henaouegñ ouzhit. Hogen aze edomp,
paotr, ha lavarout a reomp dit : Hopala !

An tamallour en doa tennet e frilien diouzh e chakod
ha goude bezañ torchet ar c'hwezenn diwar e dal e youc'has
kement-mañ :

- Daoust hag ezhomm a zo, aotrounez, eus ur broenn
all evit kendaoniñ an hailhon-mañ ? Nann, ne gredan tamm
ebet : en em varnet en deus e unan oc'h ijinañ ar ger droch-mañ
na c'hell kristen ebet distagañ. Biken, aotrounez, ne c'hellimp
degemer en hon touez un den hag a venn adsevel el Ledenez al
Leue sour. Rak-se, barnerion, e c'houlennan diganeoc'h dougen
a-enep d'an tueller-mañ ar varnedigezh pounnerañ ha war un
dro an hini reishañ a lakay da greñañ ar re a vije diboeil
awalc'h da c'hoantaat e drevezañ...

- Ar gwashañ kastiz n'eo ket ar marv el Ledenez,
egiz ma ouzoc'h ervat emichañs, "a gendalc'has Konomor, " an
harlu ne lavaran ket. Hogen estlammit ouzh pilpouserezh va c'henn-
voiz, aotrou : rak, da beseurt harlu e vez barnet an damallidi
el Ledenez ? Hama ! D'an harlu er c'hoadegi divent e reter hag
e korneg ar vro, e-touez ar ouezidi, a dremen, darn anezho da
vihanañ, da vezañ dendebrerion. E krabanou ar re-se e koezh
ar varnidi reuzeudik abarzh pell, ma n'int ket marv a-gent gant
an naon hag an dizesper, a-wechoù drailhet ha plaouiet gant ar

c'hon."

~~~~~

Pennad 14

A r p r e d

Huanadiñ a reas Konomor. Neuze e c'houlennis  
outañ.

- Penaos avat oc'h deuet a-benn d'en em glevout  
ken mat gant ar ouezidi ?

- Ret eo din lavarout, eme egile, "ez on bet  
dedennet a viskoazh gant kudennoù ar ouezidi. Pa oan yaouan-  
kiñ flamm, o paouez kregiñ gant va studioù e Loronan, em  
boa savet a-gevret gant un nebeut kenseurted ar "gK.W.A.O."  
pe c'hoazh ar "gK.G.A.C'H." evel m'hen anvemp a-wechoù,  
da lavarout eo "Kevredigezh Wareziñ Ar Ouezidi" pe "Kevredi-  
gezh Wareziñ Ar C'hallaoued". Ar gevredigezh-mañ a gouezhas  
buan en he foull daoust ma oa bet harpet gant ar veleion da gen-  
tañ : renerion ar stad o doa kalz disfiz outi hag a nac'has  
pep skoazell outi. Gweladennet em boa neuze ar c'hampoù hag  
eno em boa kroget da zeskiñ parlantoù ar ouezidi. Ne oa ket  
aes, rak maz eo rannet ar yezh-se en un niver stank tre a  
drefoedajoù. Tutaet em boa zoken etouez ar brizonidi hag  
ar prizoniadezed ur bagad gouezidi ha goueziadezed, gwisket  
egiz o gouenn, gant kroc'henou kon pe kroc'henou kizhier  
hag o lakaet em boa da zañsal o c'horolloù broadel evit brasañ  
bam Ledeneziz ar c'hêrioù gant ar ratozh da zedennañ evezh  
ar pennadurezhioù war walleur ar geizh-se. Hogen c'hwitañ  
a reas va mennad hael en abeg da emgarantez ha digalon ar  
re a zo o tiheñchañ Ledeneziz hiziv.

Da heul an droukverzh-se a-hand-all em boa di-  
lezet ar yezhoniezh evit en em ouestlañ da studi an armerzhou-  
riezh. Hogen va studioù kentañ a servijas din evelato ur  
wech ma voen bet eskumnuget hag harluet e mirva ar ouezidi.  
Dre gomz outo en o yezh e c'hounezis o fiziañs ha deuet mat  
e voen dezho. Graet em eus va mad zoken eus va chomadenn  
hir en o zouez evit sevel kentañ yezhadur ar galleg a ve  
bet savet biskoazh.

- Ha c'hwitañ gav deoc'h ez eo yezh ar ouezidi  
ur yezh kaer ? " a c'houlennis.

- O! Tamm ebet, aotrou, " a c'harmas Konomor  
gant gred. "Dic'hallus eo diorren yezh ar ouezidi, ha disple-  
tus e vefe a-hand-all. Ar C'hallaoued n'int ket ur bobl  
hag o zrefoedajoù n'int ket ur yezh. Pezh am eus goulennet  
bepred eo ober Ledeneziz eus ar C'hallaoued ha n'eo ket  
reñ dezho un emskiant-bol a c'hellfe bezañ mozhus ouzhimp.  
Ur brogarour ez on, aotrou."

A-benn e zivrouezhiñ e lavaris dezhañ :

- Ha petra eo d'ho soñj doareoù pennañ ar galleg ?

- Evit lavarout deoc'h ar wirionez egiz m'emañ, aotrou, n'eo ket gwall heson ar yezh-se. Kollet he deus kalz eus he vogalennoù ha ne chom mui nemet kensonennoù enni. Egiz m'em eus displeget deoc'h endev n'eus roud ebet a liester enni. Eeun kenañ eo a-hend-all evel m'hen diskouez displegadur ar verb'bezañ en amzer-vremañ :

J-e, t-e, i-e, w-e, v-e, zi-e.

Evelato e kaver enni roud pe roud a gemmadurioù pezh a rofe awalc'h da grediñ e oa anezhañ ur wir yezh gwechall gozh, da skouer e displegadur ar verb'bouf' a dalvez 'debrin' :

J-bouf, t-pouf, i-mouf, oñ-mouf, v-bouf, zi-bouf

A-hend-all, aotrou, ez eo paour tre yezh ar ouezidi : n'eus ket ouzhpenn mil ger enni, a gav din, hag an holl o tennañ da draoù fetis ha danvezel kenañ...

Prest e oa Konomor da genderc'hel gant e gaoz pa dregernas a-greiz-holl ar c'horn-boud.

- A ! eme Gonomor. "Me ' gred eo poent tostaat ouzh koan. "Moarvat emañ aezet ar fest en hoc'h enor."

Distreiñ a rejomp war hor c'hiz trema kreiz ar vourc'hadenn dre hed ar ribloù. Ur vogidell arwenn a riskle bremañ war an doureier lufr : uhel e oa al loar dija ha dindan he sklerijenn guñv e lintre deil ar gwez tro-war-dro.

Pa errujomp war ar blasenn vras e laoskas ar ouezidi o garm broadel en hon enor "vivlefraspotch!"

Pa voe tavet an todilhon e savas henour ar meuriad en e sav - ar rener yaouank am boa gwelet oc'h erruout a oa en e gichen - ha kregiñ a reas da zistilhañ ur brezegenn a zegemer mat, a soñj din, rak ne intentis ket kalz tra en e gomzoù. P'en devoe echu o savas ar wazed endro en o sav hag hejañ a rejont o gouzifiadoù hemolc'h en ur youc'hal adarre : "vivlefraspotch!"

Mont a rejomp en hor c'hoazez en ur c'helc'h endro d'an tantad a oa bepred o teviñ hag a roc gouloù deomp. Kig-moc'h a voe servijet neuze , ebarzh skudilli prenn, da bep hini drailhañ e damm a leizh dent, par ma c'helle ; goude-se pesked kraz ; erfin avaloù put ha youd kistin, heugus awalc'h, bet miret ebarzh jarloù pri : ur pred stambouc'hus a-benn ar fin ha gras a gavis pa voe fin dezhañ. Da zied avat ne oa nemet dour. Dianav eo ar vezventi etouez ar ouezidi, Morgan.

Maouez ebet ne oa o tebrin ganeomp. Ar boued a veze degaset deomp gant krennarded hanter noazh a hañvale bezañ abaf awalc'h. Da ziwezh ar pred avat e tegouezhas ar merc'hed, en ur renk, kazel ha kazel, gwisket ganto o brozhoù e kroc'hen-kazh ha kofoù plu liesliv. Stagañ a rejont gant ur c'horoll hir endro d'ar paou a flammine a nevez ; a bep eil e skocent war an tu kleiz en ur frapañ o zreid ouzh an douar a ventadoù reoliek ; ha neuze e teuent war o c'hiz



endro ma oan mezevellet a-benn ar fin gant o monedone diastal; ruz e oa o dremmoù, lufr gant an dour-c'hwez, skoeif o daoulagad evel re an darlavaridi a zo dalc'het gant an Awen.

A-benn ugent munud e paouezjont, dielc'het holl hag int da sec'hañ an dour-c'hwez diwar o zal gant o blev dispak. Kluchañ a rejont neuze endro d'an tantad. Unan eus ar maouezed avat a savas en he sav hag a stagas da lavar-

ganañ ur werz hir. Dibunañ a rae ar pozioù war un ton skiltrus iskis en ur ziskouez an oabi noz gant he brec'h bep ar mare.

- Petra emañ o kontañ ? " a guzulikis en diwezh ouzh Konomor.

- Mojennoù kozh a zispleg kurioù kozh o gouenn en amzer m'o devoa bigi a rede o unan an hentoù pe a nije a-dreuz al lijour, taolioù-kaer o gourdadoù o doa aloubet an hanter eus an tir, mil daou-c'hannt vloaz a zo... Mojennoù..."

Melkonius e oa an ton. Ha dont a ris, Morgan, da drueziñ ouzh an dud kaezh-se a oa kouezhet kalz izeloc'h eget Ledeneziz - n'ouzont ket ober gant ar rod zoken - hogen a zalc'he un tamm soñj bennak eus klodoù meur o broad a wechall.

~~~~~

Pennad 15

O v e v a ñ g a n t
a r "F r a s p o t c h"

Tremen hanternoz e oa moarvat pa echuas an abadenn. Og e oan ha me diviet en arack gant va redadenn er c'hoadeier. Pa voe mouget an tan er paou e voen blienet betek ribl an lenn, lakaet da bignat en ur skaf ha dezougat betek ul lochenn vras war beulioù, un ugent metrad bennak diouzh ar glannoù. Neuze e krapis gant ar skeul ; dre un traped izel en em silis ebarzh al lochenn. En ur c'horn a dastorn, e kavis ur fied graet a foulinennoù loened. En em deurel a ris warnañ ha klaskar c'houssked.

Hogen n'her c'havis ket, Morgan. Re skuizh e oan moarvat. Pa serren va daoulagad e kave din e welen adarre bolz c'hlas ar goadeg ; flaez pouner hag heugus ar vouestijenn a garge anevaz va frounelloù ; ar c'hon a rede

war va lerc'h, a sailhe warnon, am plaouio.

Ha war un dro, en desped din, Morgan, ne c'hellen ket mirout ouzhin a brederiañ diwar-benn va stad. Moarvat e oan deuet a-benn da dec'hout diouzh bosenn Laniltud ha da saveteiñ va buhez marteze evel-se hogen ne oan ket paot gwella a se ; dalc'het e oan e ser tud a oa hogos ken izel o bredrez hag hini al loened. Peseurt sikour a c'hellen gortoz diganto ? Daoust hag Omeur a zeuje a-benn da zazle-c'hiañ resis elec'h edon? Ma tavee din un nijadell da reiñ tro din da dec'hout ez raje houmañ da zianken e-kreiz an argoured ha didalvez e vije din.

Se avat ne oa ket ar gwashañ. Abaoe m'edon va unan em boa dizoloet e karen bepred Maria. Va digenvez en doa lakaet va c'harantez da darzhañ a nevez em c'halon evel ma ra da vare an diskar ur vammenn aet da hesk e-kerzh an hañv krin. Neuze, daoust ha gouest e vefen da guitaat an douar-se hep bezañ torret an hirdezh am deve adarre ?

Echu e oa ar sec'hor met un enkreiz all am broude. Pa faltazien edon e-kichen Maria, e starden anezhi etre va divrec'h e teue da zistresañ, da zisneuziañ, da steuziañ a-grenn eñ diwezh ar skeudenn a dennen diouzh va empenn diviet ; ne vriataen nemet an avel hag an noz ; an deñvalded hag an didrouz am sebelie.

Neuze eo e kinnige va spered boued eleizh d'ur warizi eston. Maria a grede e oan marv. Hec'h adwelout a raen, e Loronan, nemet, en dro-mañ, a-gevret gant ar baotred yaouank a luc'he outi e porzh ar Skol-veur. Adarre e raent al lez dezhi. Hag hi dieubet diouzhin o selaoue. He mousc'hoarzh boemus a vire bremañ evito. Warc'hoazh e roje dezho he c'horf, gouestl he boud. Ha me a oa disoñjet, diverket, distrujet araok ar marv. He c'hoarzh a gleven pa zistaged va anv. Daoust hag he sellou he doa taolet warnon un deiz ? Ar bed a-bezh a goll e ster.

Ken kriz bourreviadur a ziwasken neuze m'em bije karet mont da gavout n'eus forzh piv, Konomor zoken, an istrogell-se e oan o paouez kejout gantañ, a-benn klavout mouezh un den ha bezañ dieubet diouzh an tasmantoù am jahine. Savet e oan diouzh va fled ha deuet goustadik e toull-dor al lochenn. Strinkellikat a ra e steredegi a-us d'am penn ; edo al loar war an diskar, tost d'ar goadeg ; al lenn alufre bepred sioul ha difiñv. Stouñ a ris un tammig ha damwelout e don an dour ar skeudenn ac'hanon teñval ha krenus dindan barroù an avel. Damsañjal a raen e c'hellfen kouezhañ, beuziñ - perak herzel hen? -, ankouaat, bezañ dieubet a-benn ar fin diouzh ar bezoud hag ar stourm, ar stourm-se na baouez nepezh hag a oa ken estren ouzh va natur.

Prest e oan da blegañ d'an achantadur am dedenne p'am boa lakaet, hep gouzout din, un tamm koad da gouezhañ en dour : diverket e oa bet ar skeudenn ac'hanon ha torret ar gazel-gae am chadenne. En un taol e oa aet diouzhin va sec'hed a netraidigezh hag a ziskuzh. Distroet e oan d'am

fled. Kerkent, evel dre varzhud, e oa deuet ar c'houked din.

Antronoz veure em boa disoñjet a-grenn hurlinkoù an noz. Naon am boa. Gwell a se e kavis etal an nor un doare galetez hag ur picherad dour. Va sec'hed ha va naon a c'hellis terriñ evel-se. Neuze e klaskis un tu da guitaat va lojeiz. O tigeriñ an trapped a skoe er-maez e welis e oa stag ur skaf ouzh peulioù an ti. Sachañ a ris anezhañ betek ennon ; ur rarr-lagad war-lerc'h e tapen douar etal ar gêriadenn.

Abred awalc'h e oa c'hoazh. Edo an heol o paouez dispakañ a-us d'ar gwez er reter. Ar vourc'hadenn a seblante bezañ morgouket c'hoazh. Pa zeuis tre ne gavis nemet gwragez enni ; o labourat e oant evel en dorc'hent, darn o frikañ kistin d'ober ur seurt bleud, a gav din ; hiniennoù a oa o turgnañ listri e pri ; ur forn a oa bet aozet en ur c'horn eus ar blasenn ; lod all a rae war-dro ar c'hrouadurioù : ouzh o c'hibellañ ebarzh aoglennoù e oant. N'eus ket a zimezioù e-touez ar ouezidi, Morgan, diouzh an degouezh, hervez ar c'harantezioù, e vez ganet ar vugale ; ar re-mañ a vez desavet a-stroll gant ar gumuniez. Rannet eo a-hend-all karter ar gwragez diouzh hini ar wazed, pezh a gavis iskis awalc'h.

Hogos e oa din enoññ pa zeuas Konomor en arbenn din. A-bell hen anavezis gant e gloenn a luire dindan an heol.

- Hello, paotr," emezañ, drev an tamm anezhañ hag eñ o frotañ e varv gell stank dispak war e vruched, "penaos emañ ar bed gansoc'h ? A-boan dibikouzet ho taoulagad emaoc'h oc'h ober un tamm pourmen. Daoust ha kousket mat hoc'h eus da vihanañ.

- Evit se atav n'em eus ket graet," a respontis a galon.

- N'eo ket souezh," emezañ, "n'oc'h ket boazet c'hoazh ouzh hoc'h annez nevez. Hogen bezit dinec'h : abarzh pell e viot.

- Pelec'h emañ ar wazed ? Ne welan anezho e neb lec'h. Aet int da diaseal ? " a c'houlennis.

Konomor a c'hoarzhaz.

- Tamm ebet : trawalc'h o deus paket dec'h.

N'int ket diblouzet c'hoazh. Amañ eo baradoz ar wazed, paotr : an holl labour a vez graet gant ar merc'hed.

En ur varvailhat e oamp degouezhet da garter ar baotred en tu all d'al louger was. Dor ebet ne oa digor c'hoazh.

- Amañ ez eo hunva ar baotred eta ?

- Ya," eme Konomor.

- Ha dre 'n arbenn a betra ez eus bet savet

Lochennoù war ribloù al lenn du-se ?

- Dastumvaoù-boued ez int dreist-holl. Servijout

a reont ivez pa vezont goulllo da reiñ bod d'an estrañjour-
rion o tremen."

Distroet e camp betek al lenn. Bale a rejomp
a-hed ar glannoù. Digatar e oa an oabl ha tomm an devezh
endev. An doureier sioul a lintre evel ur meleour divent
e stern teñval ar sapr hag an ivin er c'hreisteiz. Bugale
a oa oc'h ebatall endro deomp ; reoù zo a oa o neuñ ; ur
re bennak avat a oa a-zevri gant ur c'hoari iskis : ober
a raent gant meinigoù lieslivet a eskemmet kenetrezo.

- Sellit," eme Gonomor, teneraet e doare, "pe-
gen ouesk e ouzont c'hoari gant ar "Moño-Pollig !"
- Neuze hoc'h eus klasket ivezskignañ ho ke-
lennadurezh amañ, war a welan," emezon.
- Eveljust, actrou, met, siwazh, ar ouezidi n'
o deus tamm ebet skiant ar C'horvo..."

Ur mounreiz en devoa ijinet evit ar "Fraspotch",
emezañ, gant pezhioù koantik kenañ d'e soñj, kantennoù ha
deñgoù e pri poazh livet flamm. Hogen ar ouezidi n'o doa
ket prizet ober ganto. Nac'het o doa ivez deskiñ micher
ebet ha rannañ al labour etrezo.
- Me 'gav din ez int barnet da chom isdior-
reet da viken, siwazh..."

Skuizh o klevout va c'hendivizer o siwadiñ
ingal em boa kavet gwell tevel a-benn ar fin. Kerzhet hor
boa hep rannañ ger war-hed un tri-c'hant metrad bennak.
Degouezhet e camp d'un oufig bihan distro ha na c'helled
ket merzout eus ar gêriadenn.

- C'hwil 'wel ? " eme Gonomor. "Du-se emañ
magva ar c'hizhier em boa komzet anezhañ dec'h da noz."
E gwirionez, en ur bradenn vras, war ribloù
an oufig, e oa renket a steudadoù kavelloù bras en azil
daou vetrad uhelder, tri metrad led, tri metrad hed dezho,
toet gant kroc'henoù moc'h, hag en diabarzh pep hini anezho,
daou pe dri c'hazh, feiz, sioul awalc'h da welout, lart da
sabatuiñ - pesked a oa bet servijet d'o fred diwezhañ, a
verkis -, lufr o blevenn, ur bam, a oa kluchet, diseblant,
serr o daoulagad, pleget o favioc' arnok dindan o brusk,
o tommheolianañ, fur evel prederourion.

- Hag epad ar goañv," a c'houlennis, "e vezont
dalc'het amañ ? "
- Tamm ebet. Repu a gavont en dastumvaoù pe
zoken en tiez. Ar ouezidi a gemer kalz preder gant o saverez-
kizhier."

Ober a ris tro ar magva. Anzav a rankis o doa
ar ouezidi kalz a urzh. Bodet e oa al loened hervez liv
o foulinenn ; dispartiet mat e oa mat ar rummoù : ar re
wenn, ar re zu, ar re louet, ar re velen, ar re varellet,
ar re roudennek, hag ar re-mañ hervez o liv, a oa lakaet
a ziforc'h en o c'haouedoù. Merzout a ris avat e oa gwall

yaouank an darn-vuiañ eus al loened.

- Pegeit 'ta e viront anezho ? " a c'houlennis.
- O!" eme Gonomor, "ne viront ket anezho gwall
bell. Etre c'hwec'h ha seizh miz bennak e vezont lazhet,
kignet ha debret, alies a-benn kala goañv. Neuze eo e vez
gwragez ar "Fraspotch" o fogasiñ hag o vrabañsal gant o
brozhioù nevez... Hag ar re-mañ," a ouzhpennas Gonomor
a-greiz-holl, "sellit pegen koantik ez int..."

En em gavout a raemp dirak ar c'haouedoù diwezhañ,
ec'honoç'b eget ar re all, elloc'h edo ar mammoù gant
o zoradoù. N'oa ket da dortal, gant reizh e oa aozet ar
saverez-kizhier-se ha muloc'h a vri a zougis diwar neuze
d'ar C'hallaoud "Fraspotch". Danvez a oa enno, sur mat,
daoust d'ar pezh a rae Gonomor van da grediñ.

Dont a rejomp endro war hor c'hiz. Gonomor
a gendalc'has da brezeg diwar-benn ar ouezidi. Re ar reter,
emezañ, - hag an dra-se a ouien endev, - a oa kalz taeroc'h
ha kentidikoc'h war un dro. Ur sevenadur - ma c'heller
lavarout, a reizhas Gonomor, - disheñvel o deus. N'o deus
damesaet loen bet. Hemolc'hiñ a reont ar c'hon dreist-holl
hag en em wiskañ gant ar c'hrec'hin anezho. O anv rumm ez
eo "Fraspotcheñ", na petra 'ta, hag an dispriz brasañ o
deus ar "Fraspotch" evit o c'henouennidi eus ar reter petra
bennak maz eo ar re-mañ kalz kalonekoc'h egeto. Ret eo
resizañ eo disheñvel ivez o rannyezhoù : poan vras o deus
d'en em intent kenetrezo.

- Petra 'faot deoc'h ! " a glozas Gonomor.
"E-giz-se emañ natur Mab-den : pegen izel bennak e ve koue-
zhet ez eo laouen o kavout ur breur a zo kouezhet izeloc'h
c'hoazh egetañ..."

~~~~~

Pennad 16

Kimia diñ  
diouzh ar "Fraspotch"

Ur sizhun a dremenas. Krog e oan da gustumiñ  
ouzh va buhez nevez. Kemer a raen perzh bemnoz, war-dro  
c'hwec'h eur, er pred bras a vez aozet gant ar gwragez d'  
ar wazed (int-i a zebr da greisteiz) ur pred bras - n'eus  
nemet hennezh en devezh - a denn kentoc'h d'ur banvez  
hag a bad un eur pe un eur hanter bennak. Kalz amarduilhoù  
a vez ganto neuze, fur bepred avat, rak ne evont nemet  
dour egiz m'em eus lavaret deoc'h dija. C'hwil 'gompreno  
mat, avat, Morgan, ne gemeren tamm dudi er predoù-se rak  
n'oa ket evit heuliañ an divizoù ; flaez a oa ivez gant va  
c'hempredourion - n'en em walc'hont ket alies - hag, a-hend-  
all n'oa ket evit kas diwar va spored da nep mare an

nec'hamantoù a oa bepred ouzh va strafuilhañ. Daoubennet e oan dalc'hmat ha me oc'h en em c'houlenn ha klask a rajen adkavout Maria pe zistreiñ da vat d'an Enezenn.

E-kerzh va divizoù gant Konomor em boa esaet e lakaat da gompren n'en em blijen ket nemeur etouez meuriad peoc'hus ar "Fraspotch" hag em boa c'hoant bras distreiñ d'am mammvro. Evitañ da vezañ un den speredek e meur a geñver ha lennek bras war ar marc'had n'en doa ket Konomor awalc'h a faltazi hag a spiswelerezh evit gellout empennañ, a bell zoken, petra oa an Enezenn e gwirionez. D'e soñj moarvat ne oa ket houmañ disheñvel bras diouzh al Ledenez ; n'en em c'houlenne gwech ebet perak n'hor boa skoulmet nepred tamm darempred ebet gant e vro.

Konomor avat ne hete ket va c'himiad. Kemeret en doa un tamm mignoniezh evidon haplijet bras e veze o kavout ennon ur selaouer aketus, gouest da intent e yezh ha prest da gompren e venozioù. E-doug endervezhioù penn-da-benn e c'houzañven eta prezegennoù va c'havadad a zegouezh ; ar prezegennoù-se, gwir eo, a droe a-wechoù da glemmvanoù hirvoudus. Ar c'haezh den ne zeue ket a-benn da voazañ ouzh an harlu na d'hen degmer e nep doare.

Koun am eus e konte din un drovezh e oa bet ken gloazet ha taeret gant ar varnedigezh direizh a oa bet douget a-enep dezhañ ma oa erru e-touez ar ouezidi gant ar mennad start da ziorren ha da sevennat ar re-mañ, mar galle, a-benn o lakaat da zegemer e gelenndurezh a-c'houdevezh ha, neuze, war-lerc'h bezañ graet ur vroad unvan a veuriadoù ar "Fraspotch" hag ar "Fraspotcheñ", o isañ a-enep d'e genvroiz, tapout an trec'h en e vro dre sikour an estren ha tenañ dial en diwezh evel-se diouzh Ledeneziz digar.

- Gwir eo, atrouh, e vijen bet treitour d'am bro hogen, ne vern penaos, ha gwell a se e voe, e rankis dilezel ar raktres kaer-mañ. Asoupañ a ris ouzh ur skoilh spontus ; ar yezh. N'eus tu ebet da ziorren ar galleg, atrouh, na d'hen unvaniñ zoken.."

A-wechoù all e komze Konomor din eus e labourioù. - Daoust ma n'oa ket bet evit kas va levrioù o tont d'ober va annez amañ ez eus chomet ganin evelato un toullad mat a notennoù ha gellit em eus a-drugarez dezho Kenderc'hel da labourat en desped da bep tra, va mignon." (Abaoc an derc'hent e rae e vignon ker ac'hanon!) "Miz zo em eus peurechuet ur bennoberenn hag a ray trouz bras el Ledenez pa vezo embannet, a blanto droug eleizh e kalon veur a hini eus va c'henvreudeur e Loronan, me ' respont deoc'h. Da dalbenn he devozo ur ger hepken, tarzhus avat : "Ar c'hevala'. Gouest e vo al levr-se, spi am eus, da lakaat an dispac'h da sevel el Ledenez ; ennañ e vo diskouezet ne c'heller ket diorren un armerzh anez hen diazezañ war daou biler santel an arboellerezh : Korvo ha Kampi..."

E kuzulig e ouzhpennas :

- Emañ an dornskrid ganin ebarzh va lochenn. C'hwil ' vo an hini kentañ ouzh hen lenn. Lauen e vin o kaout hoc'h ali."

An daeroù a savas d'e zaoulagad.

- A! Keneil, tristat tokadur bezañ diouganer, dispac'her ha merzher war un dro ! "

Antronoz eta e tiskouezas Konomor din ar mell dornskrid en devoa savet abaoe ma oa o vevañ e ser ar "Fraspotch", c'hwec'h kant pajennad ennañ, skrivet munut gant ul liv fall en devoa aozet diwar huzhul. Chomet e oan da lenn anezhañ en e lochenn war beulioù, nepell diouzh va hini, hag a oa kempennet brav a-hend-all, gant pezhioù ar-rebeuri en devoa fardet e unan. Evit lavarout ar wirionez, Morgan, e oa moredus awalc'h ar seurt lennadur : Konomor n'en devoa graet tost da vat nemet ober ur c'hrennad eus pennañ oberennoù armerzhourion an eil riez. Tra ma oan o lenn avat e tiwanas a-greiz-holl em spered ur soñjezon gwidreüs a zlee hep mank lakaat Konomor da asantiñ d'am c'himiad.

Dont a ris war dreuzoù dor al lochenn.

- Konomor," a c'halvis a-bouez-penn.

Ar prederour a oa un tammig larkoc'h oc'h eveshaat e linenn. Abaoe abred er beure e oa o pesketa en e ganod.

- Deuit amañ," emeve, "ezhomm am eus da gomz ouzhoc'h.

Konomor a sakas tizh gant e roeñvoù. Ur momead war-lerc'h e krape gant ar skeul.

- Petra a zo c'hoarvezet ? " a c'houlennas.

- Konomor!" a respontis, "biskoazh n'em eus lennet ken kendrec'hus ul levr hag hoc'h hini. Ret mat eo hen embann.

- A vab!" emezañ, "me ' ouie mat az pefe gouezet barn reizh va labour. Erfin e adkavan un diskibl, e-kreiz ar gouelec'h."

Ha diwar an entan e lammas em c'herc'henn hag e vriatas ac'hanon.

- Hevelep oberenn a vez savet ar seurt dioutañ bep kant vloaz, a-boan," a ouzhpennis.

- Me ' soñj din," a gadarnaas Konomor gant gred.

- Setu," a glozis. "Ne fell ket din e chomfe dianav un den a ijin eveldeoc'h en e vro end-eeun. C'hoant am eus distreiñ da Loronan ha gant skoazell Lansoc'h, hor mignon deomp-ni, e tizhin lakaat embann al labour-mañ gant ar g.K.I.B.A.S. (Kreizenn Imbourc'h Broadel Ar Skol-veur).

Konomor a oa goursavet d'ar seizhvet neñv. Hogen damc'houde e teñvalae e zremm. Azezañ a reas war ur skabell ha skrabañ e glopenn moal.

- Siwazh," emezañ, "n'eus ket tu. Biken ne asanto ar "Fraspotch" d'ho lezel da vont kuit. Ma c'houlennit an dra-se diganto e vo anat dezho ne oac'h ket ur gwir repuad eveldeon ha disfizout a raint diouzhoc'h."

Hon diviz a echuas neuze.

Epad ar peurrest eus an devezh e peurlennis oberenn Gonomor, ar pezh a c'houlennas kalz a galonegezh diganin. A-hend-all ne wellis ket nemeur va c'henseurt betek dibenn ar sizhun : aet e oa da chaseal ha da besketa e-keit-se gant ar ouezidi ; jiboezus meurbet e oa ar ranngoadeg-se, peskedus ivez al lenn hag ar stêrioù tro-dro, ha d'ar c'houlz-se eus ar bloaz, pa stage an devezhoù da hiraat, e oa un dudi ergerzhout an argoured. Pa zistroe Konomor, diouzh an noz, hag eñ skuizh marv, na petra 'ta, e chome meur a wech evelato d'ober ur pennadig marvailh ganin kent mont d'e wele ; gwech ebet avat ne reas anv eus ar gudenn a drechale ac'hanomp hon daou, hini va disparti. Nec'het bras e oa, a gredan, ha war vordo etre daou c'hoant, hini mirout ur c'heneil en e gichen hag hini klask ur wech diwezhañ lakaat e venoziadeg da drec'hiñ en e vro. Gant ar mennañ-mañ avat ez eas an tu-kreñv en e greiz a-benn ar fin. E gwir, e deroù ar sizhun war-lerc'h e zisklerias Konomor din :

- Graet eo va soñj ganin, mab. Me ' gred ez eo ar gwellañ afez endro davet va c'henvroiz...
- C'hwil ' raio an dra-se evidon ? Trugarez!" a c'harmis gant al levezon.
- Dic'hoarzh e reizhas Konomor :
- Evidout, mab ? Tamm ebet ! E mad al Ledenez e soñjan, hepmuiken.
- Ha penaos e c'hellot va sikour ? Piv am arouezio a-dreuz an argoured ?
- Diwar-benn ar c'hudennoù-se holl em eus prederiet a-zevri en devezhoù-mañ p'edon oc'h hemolc'hiñ ar moc'h gant ar "Fraspotch", mab. Ar gudenn gentañ da ziskoulmañ eo lakaat ar "Fraspotch" da zegemer da gimiad. Me gav din em eus kavet an tu. D'an eizh a viz Mae e lid meuriadoù ar "Fraspotch" hag ar "Fraspotcheñ" o goul broadel. Da geñver ar goul-se e enoront o doue broadel "Dumur-Mekdlav".
- Piv eo Dumur-Mekdlav ? " a c'houlennis.
- War am eus komprenet ez eo anv o ri diwezhañ, en amzervezh kent an Drouziwezh pa oa o broad galloudek meur.
- Ha penaos e c'hellot Dumur va skoazellañ ? "
- Hama!" eme Gonomor, "goulennet e vo e ali diwar da benn, hag-eñ e tleez chom etouez ar " Fraspotch" pe zistreiñ davet Ledeneziz.
- Penaos avat e responto an doue-se," a c'houlennis abatuat.
- Dre hanterouriezh ur c'hilhog.
- Biskoazh c'hoazh!" a estlammis.
- Emichañs e ouzoc'h," eme Gonomor parfet a-grenn, "ez eo ar c'hilhog evn sakr ar "Fraspotch" koulz hag ar "Fraspotcheñ".
- Ganeoc'h her gouzon hiziv," a rankis anzav.

- Dizek ez oc'h war hengounioù hon ostizion, me ' wel mat.
  - Ma ! Ha ma tiskleir ar c'hilhog diouganer e rankan chom amañ ?
  - Konomor a droas war-du ennon en ur ober ur c'hoarzhig goapaus.
  - Den yaouank, beleg-meur Dumur-Mekdlav ez on deuet da vezañ abaoe maz on erru amañ, en abeg d'am deska-durezh. Hag e labous-diouganer a gomz dre va mouezh rak teurgomzer ez on. Evel-se e renan ar bobl hegreidik-mañ."
- Daou pe dri devezh war-lerc'h ar pennad kaoz-mañ en em gavas gouel broadel ar C'hallaoued. Da neizheur e oa bet aozet fest an hoc'h ; da veure ha d' enerv e oa bet diduamantoù a bep seurt, redadegoù ha kenstrivadegoù gwaregata ha me ' oa'-me. D'ur sadorn edod, soñj am eus. Glizhach ha glav a oa bet a varradoù e-doug an deiz. War-dro eizh eur hanter en em vodas ar wazed war ribl al lenn - ar marc'hed n'int ket aotreet da gemer perzh e lidoù kravez Dumur-Mekdlav - ha savet e oant war o bigi da dreuziñ al lenn : en ur gêriadenn all, war c'hlann enep al lenn-se, e vez kaset da benn lidoù an eizh a viz mae.
- Serrnoziñ a rae d'an ampoent. An oabl a oa lastret bepred a goabrennoù pounner ha disneuz ; er c'hornog avat, adreñv keñvioù ar gwez sonn evel pileroù, e troe an oabl da ouel ur c'hoariva marzhus, melen boull, dindan bannoù diwezhañ an heol o vont da guzh. Sellout a ris war va lerc'h : al lavagnon a luc'he-diluc'he da heul ar bigi ; an holl a dave ha trouz ebet ne glevet nemet strap kellusket ar roeñvoù lufri o skeiñ end-reol an dourioù krenus.
- Un engroez a dud a oa ouzh hor gortoz war ar ribl all, goulaouennoù rousin en o daouarn. Kerkent hor boa en em lakaet en hent war-du neved an doue ; a-hed ar wnodenn strizh e kammigelle steudad ar birc'hirined evel ur stêriad antanet dre deñvalijenn ar c'hoad.
- Pa voemp degouezhet d'ur frankizenn vras a oa pal hor c'herzhadeg e stagas ar ouezidi kerkent da fardañ ur mell tantad ; flammoù divent en em weas hag en em strinkas hep dale en ur strakal war-du bolz an neñvoù. Neuze eo e verzis ur poulvren skultet a oa heñvel awalc'h ouzh an hini a oa en e sav du-se, war leurgêr ar gêriadenn all.
- Setu Dumur-Mekdlav," a zisklerias Konomor din.
  - An delwenn-mañ - rak tennañ a rae mat d'un delwenn wirion kizellet gant ampartiz - a oa mennet da daolennañ doue broadel ar C'hallaoued "Dumur-Mekdlav". O tostaat e c'hellis merzout e oa un tamm brasoc'h eget hini Belvil, ar vourc'hadenn e oant bet o chom enni betek neuze ; war he fenn e oa sanket un doare kalabousenn ; an dremm anezhi a oa stummet gros awalc'h : bras ar fri, ledan an diskouarn ; divrec'h hir a oa astennet penn-da-benn ar c'horf. Ha setu penaos e oa livet : glas e oa



ar vrec'h hag ar skouarn dehoù,  
wenn ar fri hag an divjod, ruz av  
avat ar vrec'h hag ar skouarn  
gleiz.

Kentizh ha ma voent en em gavet  
er frankizenn e soublas renerion  
ar meuriad hir amzer dirak an  
delwenn. Goude-se e reas unan  
eus an henerion sin d'ur c'hrenn-  
nard a oa war e dro. Hemañ a redas  
kuit kerkent ; damc'houde e teue  
endro en ur zegas gantañ ur gaoued  
elec'h e oa serret evn diouganer  
ar "Fraspotch" : ur c'haezh kilhog  
displuet holl.

Ar peurrest eus al lidoù ne dalv ket ar boan taolennañ,  
Morgan. Awalc'h e vo din lavarout e c'hoarias Konomor e roll  
eus ar c'hentañ. N'ouzon ket petra en devoa kontet a ziagent  
da rener ar gêriadenn evit diskleriañ perak e oa ret goulenn-  
nata Dumur a-zivout va c'himiad. Pezh a zo sur avat eo e  
tegermas ar ouezidi a galon vat disentez o houe.

Kimiadiñ a ris diouzh va Gallaoued vat ur sizhun  
war-lerc'h. Glac'haret e voe an div c'hallez vihan a oa bet  
lodennet din evel priedoù da c'hortoz gant ar "Fraspotch"  
hael. Glac'haretoc'h c'hoazh avat e voe Konomor a zirollas  
da ouelañ dourek pa lavaris kenavo dezhañ. Ur frealz en de-  
voa da vihanañ e-kreiz e azrec'h : degas a raen ganin dorn-  
skrid e oberenn veur "Ar c'hevala" a zlee hep mank lakaat an  
dispac'h da darzhañ el Ledenez. An dornskrid-se a ranken,  
daskoriñ, hervez e ali, d'e geneil kozh, Abboell e Loronan  
kelenner ar Skol-veur war e leve, dezhañ plediñ gant an  
embannadur.

~~~~~

Pennad 17

Paket adarre
gant Ledeneziz

Dav eo din bremañ, Morgan, displegañ deoc'h
petra oa va raktres tec'hout. Goulennet em boa digant rener
ar gêriadenn Belvil pourchas din un arouezier da vont betek
an aod. Diouzh tu ar c'hreisteiz en em led an argouered betek
ar mor, etre Kêrelle ha Trehouarn, war un talbenn a ugent
kilometrad bennak. Bep an amzer ez a Fraspotch an diabarzh
betek ribloù an Atlantel da gerc'hat holen a dalvez dreist-
holl da salañ o fesked epad ar goañv. Va ratozh e oa, ur wech

erru di, klask sikour Penedourion an aod a vev ebarzh kevioù
war aod kreisteiz al Ledenez, egiz m'em eus displeget deoc'h, dre
en em dremen evit un den a gredenn ganto a-benn distreiñ tamm
ha tamm betek harzhoù ar reter, tost d'ar Ganol ; eno em bije
gortozet skoazell Omeur a vije degouezhet din tro pe dro en ur
stumm bennak, a soñje din.

Al lodenn gentañ eus va raktres a c'hellis kas
da benn didenn kaer. Pignat a ris ebarzh unan eus skafoù ar
ouezidi, a-gevret gant daou roeñver eus Belvil a ranke bezañ
ivez arouezierion din hag a-benn tri devezh e tiraerz un
aber, nepell diouzh Trehouarn. Eno avat e rankis en em zi-
luziñ va unan. Kerzhout a ris epad ur beurevezh, degouezhout
etal ar c'hamp-bac'h am boa merzet er bloaz arack ha chom
sac'het eno. Epad an endervezh e kantris en taolead-se o
klask ur penedour bennak d'am harpañ. Goullo e oa avat kevioù
an aod-se ; gouzout a ris a-c'houdevezh e oa bet harzet ar
benedourion er c'horn-bro-se dre ma roent re a drubuilh d'ar
pennadurezhioù. Pell amzer e oan chomet da arvestiñ ouzh
an doureier gwer ha lufi a rede kuit a-herr war-du ar meurvor,
en entremar. Da noz, peogwir ne greden ket en em ziskouez
diouzh an deiz, e ris va menoz treuziñ an aber diwar neuñv.
Gourlenn a oa d'ar mare m'en em lakais en dour. Goude bezañ
neuet epad ur c'hardeur bennak e tapis douar un hanter-lev
bennak uheloc'h eget kêr. Ranket em boa dilezel dornskrid
ar c'haezh Konomor war ar ribl all, gant un tamm morc'hed
e gwirionez hogen ne welen tu ebet d'ober e-giz-all. P'en em
gavis en tu all eta ez is d'en em guzhat en ur bern foenn
nepell diouzh ur vereuri. Eno e tremenis an noz ha me riellet
gant ur c'houer a oa o kas e saout war vaez. Kemeret en doa
ar hanon evit ur gouezad ker'het diouzh ur c'hamp pe ul laer
ha redet en doa betek kerreizhdi Trehouarn da c'houlenn
sikour. P'em boa gwelet ar waregourion o tont war-du ennon
em boa klasket tec'hout endro war-du an aber hogen skuizh
evel ma oan n'em boa ket gallet herzel outo. Paket e oan
bet, chadennet ha degaset betek kerreizhdi kêr ha dalc'het
eno.

En enkadenn-mañ, Morgan, ar frañ a chome din da
ober e oa diskuliañ didro kaer piv e oan. Sed pezh a ris.
E gwirionez e voe didaeret diouzhtu va diwallerion pa ouez-
jont e oan migon Lansoc'h, prometet da vrec'h Urien war ar
marc'had ; hegarat e teujont zoken da vezañ. Pennrener ar
waregourion a ginnigas din bod en e di zoken. Asantiñ a ris
d'e vennad. E gwirionez ne gav ket din e kredas da vat ar
vojen a ijinis evit diskleriañ perak ha penaos e oan en em
gavet e-kichen Trehouarn, d'an ugent a viz Mae goude bezañ
kuitaet Laniltud, ar gêr vosennet ur miz bennak arack. Seven
koniañ e voe bepred tra ma tezevellen va danevell, oc'h hejañ
e benn bep an amzer pa felle dezhañ diskouez e oa ali ganin

o terc'hel aliesoc'h war un tammig mousc'hoarzh pa veze re anat e konten sorbiennou dezhañ hag e klasken tremen lost al leue dre e c'henou. Goude m'em boe echu va danevell e roas Edern - anv ar pennkerreizhour e oa - berr-ha-berr un nebeut keleier. Da gentañ e ouezis e oa bet titouret diwar va fenn el Ledenez a-bezh adal ma oa bet sklaer e oan deuet a-benn da guitaat Laniltud. Kemennet e oa bet da holl gerreizhdiou ar vro chom war evezh, dreist-holl war harzoù ar vrool. Adarre e veizis, Morgan, e oan un den-gouestl ha ne vijen aotreet biken da vont kuit dre gaer diouzh al Ledenez. Lavaret e voe din ivez e oa paouezet ar vosenn en un taol e Laniltud e derou ar sizhun arack.

Pevar devezh war-lerc'h e errue Lansoc'h e unan d'am c'herc'hat e Trehouarn, en ur c'harr-post a-berzh-stad. Hep gortoz pelloc'h en doa va lakaet da bignat en e gichen ; kemmet hor boa ar chas e kondi kreiz Trehouarn. Hurennek e oa Lansoc'h avat ha rouez e gomzoù. Mall a oa warnañ distreiñ da Loranon elec'h edo o chom abaoe ma oa echu ar balvent e Laniltud. Kentizh eta hor bao kemeret hent ar gêrbenn. N'epred avat ne valae ar chas fonnus awalc'h da soñj o blenier a veze bepred ouzh o isañ.

Poanius ha skuizhus e voe ar veaj-mañ. Ne chomemp a-sav nemet evit kemm ar c'hon. Lansoc'h a chome dilavar dalc'hmat. Ur wech hepken e reas ganin ur pennad kaoz hir awalc'h a-benn kemenn din e oa marv e contr Tudi.

- Tizhet eo bet gant ar c'hleñved en devezh arack ma paouezas ar vosenn e kêr," emezañ, sec'h awalc'h e vouezh.
- N'eo ket chañs memestra," a zivegis, hep gouzout re vat peseurt gourc'henninnoù a gengañ va ranken ober dehañ. Re nebut em boa anavezet Tudi evit bezañ fromet don gant ar seurt kelou. Lansoc'h, avat, ddoust dezhañ ober van da chom distriañ dirazon, a oa gloazet ha glac'haret Kriz, ragav din. Me 'm boa dezrevellet dezhañ neuze penaos e oan degouezhet etouez ar Fraspotch ha penaos em boa kejet eno gant e vestr kozh Konomor. Va selaouet en doa Lansoc'h gant evezh da gentañ hogen a-benn ar fin en doa graet ur c'hruz d'e skoaz hep ober addispleg ebet.

Diwar neuze e oa chomet Lansoc'h ken mouzhet all. N'oa ket avat evit dianaout andon e zamani : marteze an enkreiz diwar dremenvan e contr, marteze ar c'herse diwar va zec'hadenn rak santout a raen mat em boa e douellet en ur stumm bennak o vezañ ma roe pep frankiz din a-hend-all. Ne vern penaos, ne sesacis mui toullañ kaoz gant Lansoc'h tamm ebet pa veizis ne oa ket techet da zivizout ganin.

Diraezet hor boa Loranon d'abardaez an eil devezh. Aet e oamp war-eeun betek ti Urien. Maria ivez a oa distroet d'ar gêr. Un degemer yen awalc'h he devoa graet din. Adarre e kave din edon dirak un estrenez. He mamm a oa bet a-boan seven ouzhin. Mantret a-grenn e oan pignet diouzhtu d'ar gambr.

a oa bet miret din pa oan degouezhet en tiegezh-se.

Lansoc'h en doa heullet ac'hanon. Pa voe bet serret an nor e stagas kentizh d'ober rebechoù c'hwerv din. Ne zlejen ket, emezañ, bezañ tec'het kuit en un doare ken dibocell diouzh Laniltud ; war var en em lakaen da vezañ barnet hervez lezennoù al Ledenez a zo strizh tre war ar poent-se, egiz renerion labouradegoù Laniltud end-eeun a oa bet nevez harzet hag a oa da vezañ barnet a-benn miz evit ar felladenn-se ha gwallverezh ar gwarezvaou.

- Ret eo distrobañ al Ledenez diouzh ar c'hlad-dalc'herion giz nevez-se a gemer o c'hargoù evit madoù a-berzh-tiegezh hag a nac'h beli ar stad a-benn ar fin," eme Lansoc'h. Evit pezh a selle ouzhin e ouzhpennas : "Poan am eus bet o virout ouzh an dud a lezenn a sevel ur prosez deoc'h. Arguet em eus avat e oac'h c'hoazh evit ar poent un estrañjour ha ne oa ket reizhet c'hoazh ho stad er vro-mañ."

Goude pashaat e adkrogas en ur dreiñ trumm war va zu.

- Kavout a ra din, Keralen, ne veizit ket mat e peseurt emgav emac'h. Gwiriet hoc'h eus hoc'h unan n' hoc'h eus chañs ebet da zistreiñ d'ho pro. Ur gouestl re brizius ez oc'h evit ma c'hellfemp aes ho lezel da vont. Me ' gred hoc'h eus komprenet an dra-se hoc'h unan a-hend-all."

Pashaat a reas adarre. Distronk e oa e zremm, a verzis neuze. Diviet a-grenn e oa bet gant ar skuizhderioù hag ar fromadennoù o doa e sammet epad ar balvent e Laniltud. Ur jestr faezh a reas kent kimiadiñ diouzhin.

- Hel lavaret em eus deoc'h endev, Keralen : ar gwellañ evidoc'h eo plegañ da vezañ unan ac'hanomp hiviziken, ul Ledenezad evel d'omp. Ha da gentañ perak ne gemerit ket Maria da bried ? An dra-se a ziskouezfe d'an holl re a zo a-enep deoc'h e fell deoc'h an em staliañ en hon touez hag a serrfe o genoù pa glaskfent ho tamall. Poan am eus d'ho tifenn a-wechoù dirak ar pennadurezhioù abaoe hoc'h arnod tec'hout diwezhañ. Evit ho mad e komzan rak gouest e vefe ar re n'ho karont ket d'ho lakaat da vezañ kraoulet en un toull -bac'h un deiz a-benn bezañ sur na c'hellot biken distreiñ d'an Enezenn."

Priediñ gant Maria ! E ziskan adarre. Prest e oan da respont dezhañ n'em boa urzh nag ali ebet da resev digantañ met dija e oa aet Lansoc'h diouzh ar gambre hep ouzhpennañ ger all ebet.

Pennad 18

Va emwel gant tad Maria

Betek poent koan e oan chomet da lonkañ soñjoù, Morgan. Gant Lansoc'h e oa ar wirionez, sklaer awalc'h e oa. Talañ a ranken ouzh un devoud ha n'oa dizarbenn ebet dezhañ: prizoniad e oan da dreist d'am galloud e oa distreiñ d'an Enezenn. Kenavo a ranken lavarout d'an hoal-vat, d'an eurvad aes, d'ar merc'hed didro ha dizrouk, ha klask aozañ eus ar gwellañ ar vuhez a oa degouezhet din. Ya, ar furañ e oa eurediñ gant Maria; neuze em befe da vihanañ un tiegezh a levezon d'am difenn. Padal em boa diegi o plegañ d'an dezo -se hag un tamm kas am beze ouzh Maria zoken pa soñjen e oan rediet koulz lavaret da zimeziñ ganti. Droukrañs a zalc'h en outi ivez drebenn a'n degemer yen o devoa graet din Maria hag he mamm goude va arnod tec'hout, petra bennak ma anzaven ouzhin va unan n'oa ket souezhus ur surl emzalc'h da heul un taol a ziskoueze awalc'h ne roen ket kalz priz d'am eured da zont gant merc'h Urien.

En devezhoù war-lerc'h evelato ez eas an traoù war wellaat. Hegeratoc'h e teuas Maria da vezañ daoust dezhi chom froudennek awalc'h: a-wechoù e selle ouzhin a-boan epad ar preoù ha ne responte ket d'am goulennoù. Kas a rae ac'hanon da sutal pa glasken tostaat outi el liorz, etal ar puñs, da skouer. Ne verne ket avat: tarzhet e oa va c'harantez a nevez em c'hreiz ha gant muioc'h a nerzh marteze eget kent e oan em staget ouzh Maria, an hini a oa tonket, a ouien bremañ, da vezañ va fried. Setu, evel ma n'em boa a-hend-all ode all ebet, en em grennis en diwezh da c'houlenn digant Urien dorn e vere'h. An emwel am boe gant hemañ, avat, e sell da se ne voe ket didrubuilh, egiz ma veizot hoc'h unan Morgan.

E deroù miz Gouere edod neuze. Graet em boa va soñj pignat betek mavdiernva an tirdempennerezh, e gwazva ar c'hehenterezh: d'ur sadorn enderv e oa ha gouzout a raen em bije e gavet e unan en e vurev. Diaes e kaven, na petra 'ta, komz outañ er gêr.

Marteze em aus lavaret deoc'h endev, Morgan, kalz a vri a zougen d'an den-se, bout ma ne oan ket evit tommañ nemeur outañ. Gouiziekl hag ampart e oa war e vicher hag, a-se, e pep degouezh, asur tre anezhañ e unan. Desket e oa war gement a c'helled bezañ el Ledenez; pleustret en doa dreist-holl hen lennegezh ar vro, hini an XXIVvet har ar XXIVvet kantved; gant kala a spered hag a skiant e komze eus ar skridoù-se a oa bet lennet-dilennet gantañ adal e yaouankiz. A-hend-all, hag a ziavaez zoken, e oa dedennus ivez. Maria a denne dezhañ, gwir eo: ar memes daoulagad pers hag he zad he devoa. Hogen ne gav ket din e oa dangorat a-grenn va merzad. En e emzoug

koulz hag en e neuz end-eeun e pare e startijenn diabarzh. Bez e oa anezhañ un den mentet bras, uhel e dal, ledan e vrusk, a denne gorrek e anal bepred, a roe deoc'h da soñjal en em gave dirazoc'h un den kempouezet ervat hag emvestr a-grenn. Ouzh ar perzh-se em boa taolet meiz dreist-holl, a gredan, rak, e mod all, e oa boutin awalc'h e zoare koulz hag e wisk; ne glasse tamm ebet en em ziforc'hañ diouzh ar re all; da skouer e touge ur barv ha blev hir awalc'h evel an darn vuiañ eus gwazed al Ledenez.

Un tamm abafet e oan eta o tont dirak an den-se hag en em c'houlenn a raen peseurt degemer a raje d'am mennañ.

Evel m'em boa rakwelet e c'hellis kavout tad Maria en e unan en e vredva e gwazva ar c'hehenterezh, war an torgennoù, tost d'ar mengleuzioù. Va c'hevare'het en doa a galon da gentañ hag an dra-se en doa roet fiziñs din. Neuze en doa va fedet d'azezañ. Diouzhtu e krogis da gomz.

- Moarvat hoc'h eus diskred eus an abeg am eus d'ober deoc'h ar weladenn dic'hortoz-mañ," emebe, "hag emichañs ivez e ouzoc'h diwar-benn piv ha petra eman o vont da brezeg ganeoc'h."

Urien ne responte ket. Parañ a rae warnon e selloù dic'hoarzh en ur rimañ goustadik e varv gell. E dal krizet a ziskoueze hepken gant pebezh evezh e selaoue ac'hanon. Pell amzer e komzis hep ma klaskje tad Maria sevel e vouezh gwech ebet. En diwezh em boa diskleriet e roje din va c'hoant birvidikañ m'am aotrefe da zimeziñ gant e vere'h.

Un tammaig mouc'hoarzh a oa deuet war vuzelloù Urien. Hejet en doa e benn en ur vrafiskellat un disterañ war e gador.

- Me 'wel, aotrou," a respontas din a-benn ar fin, "ez eo bet gouest va merc'h da zedennañ ho kalon ha stad a zo ennon eveljust o welout an dra-se. Hogen daoust ha soñjet hoc'h eus komz da gentañ gant Maria diwar-benn an dra-se?" Daoust ha va merc'h ho kar?"

Prim awalc'h e eilgeriis em boa kredet kompren hep fogasiñ e oa Maria douget din. "Hen diskouezet he deus din awalc'h p'edomp o vevañ e Kerneost," a ouzhpennis.

Urien en doa lakaet trumme e zaou ilin war an daol en ur bishaat ar selloù a droe war-du ennon.

- Dres, aotrou," emezañ, "kement-se a zo c'hoarvezet e miz Ebrel ha traoù a zo degouezhet abaoe, a soñj din, hag a dennfe awalc'h da brouiñ penaos...

- C'hwil fell deoc'h komz eus va zec'hadenn?" a c'harmis.

- End-eeun, aotrou..." Troc'het em boa e gomz outañ, ken taeret e oan. - Ar spont a zo bet kiriek d'an arnod tec'hout-se, nemetken, aotrou; an dra-se a zlejec'h bezañ komprenet pellzo."

Urien en doa hejet kreñv e ziskoaz, imor ennañ.

- Neuze, diskleriit din perak edoc'h oc'h en em guzhat paz oc'h bet dizoloet gant ar c'herreizh. O te-c'hout bepred dirak ar ouezidi-se e oac'h deuet ken mat dezho, war am eus klevet ? Lavarit."

Paket e oan ; n'em boa netra da respont. Daoust ha va c'hredet en defe Urien p'em befe diskleriet dezhañ penaos va c'hoant distreiñ d'an Enezenn ne vire ket ouzhin a garout Maria. Hemañ avata gendalc'he gant e gaoz ken feuls all.

- Aze n'emañ ket an dalc'h, aotrou. Goude holl, un tamm karantez a zleit kaout evit va merc'h a-benn goulenñ he dorn diganin. Rak va menoz don ez eo ne ufe va merc'h bezañ evurus o timeziñ gant un den a zo un estrañjour eviti. Sed pezh ez oc'h, aotrou, hag a zisofijit, war a hañval. C'hwil 'oar marteze piv omp ; ni avat ne ouzomp netra diwar ho penn, nemet ar pezh hoc'heus kontet hoc'h unan. Fellout a ra deomp awalc'h krediñ ez eo gwir bater ho komzoù hogen peseurt tu hon eus d'o gwiriañ ? A-hend-all, anzav a ran e komzit ervat hor yezh, ez oc'h un den seven ha moarvat kalz desketoc'h egedomp e meur a geñver. Evelato ez on nec'het gant ur gudenn a seblanto deoc'h dister meurbet marteze. Gouzout a rit ez omp kristenion evel an darn-vuiañ eus Ledeneziz. N'ouzomp ket peseurt eo ho kredennoù a-hont en ho rouantelezh isdouar, en tu all d'ar Ganol hogen klaoustre awalc'h a rafen ez int disheñvel bras diouz hor re-ni. D'ar c'houlz-se e c'houlennan ouzhoc'h, end-onest, aotrou, daoust ha gellout a rit bezañ degemeret en un tiegezh a seurt gant hon hini ? "

- Karout a rafec'h e trofen war-du ho kravez, pe e rafen van..."

Urien a reas ur sav taer d'e vrec'h.

- Doue ra viro, aotrou. Da briz ebet ne hetfen ober ac'hanoc'h ur pilpouz. Mennout a raen hepken reiñ deoc'h da gompren ne vin ket evit ho tegemer em ziegezh ma chomit un Enezad e don ho spered. Dav eo deoc'h degemer ho pro nevez hep distro ebet ha c'hoantaat da vihanañ bezañ a-unvan ganti."

Savet e oan em sav. Anoazet bras e oan bet gant komzoù re grenn ha didro tad Maria.

- Hevelep digareziou, aotrou, "emeve, "a zo koulz ha nac'hañ ho merc'h ouzhin."

Ha deuet e oan er-maez eus ar sal hep kevanc'hiñ tad Maria.

~~~~~

A r w e l a d e n n d a A b b o e l l

Gwall zoanius adarre e voe an devezhiou war-lerc'h, Morgan. Pa voe distanet ennon broud an ancoaz hag an daeroni e voen debret gant an enkreiz. Evidon-me n'oa mar ebet : ur pilpouz a glasked ober ac'hanon. Ne oad bet hegarat ouzhin nemet a-benn va zouellañ ha va lorbiñ gwelloc'h. Hogen, egiz ma lavaren deoc'h bremaik, gant an anken e oan krignet dreist-holl. E-pad pell amzer em boa kredet e c'helljen en em staliañ el ledenez hag en un taol e veizen e oa re ger ar priz a vije dav din paeañ e sell da se. An dimeziñ-se a hañvale din a-gent bezañ porzh ar silvidigezh a zeue da vezañ dreistdiraez din. Distaolet e oan adarre d'an arvar ha d'an diasur.

Ken strafuilhet e oan diwar va emwel gant tad Maria ma n'en doa ket mui fellet din a-c'houdevezh kejout gant ezel ebet eus tiegezh Urien. Van am boa graet da vezañ morglañv. "N'on ket deuet mat a-benn da drec'hiñ ar skuizhder a zo ouzh va sammañ abaoe m'on bet o kantren er goadeg," a zisklerien da neb a zeue da c'houlenn keloù. Tennet em boa digarez eus ar skuizhder a-hervez-se evit chom va unan penn. Ouzh Maria zoken em boa berzhet dor va c'hambur.

En degouezhennoù-se eo e soñjis mont da gavout Abboell, kelenner ha mestr kozh Konomor, a oa eveltañ eus ar gostezenn gevalagar hag enep-kravezel. Marteze e c'hellfe, a gave din, va skoazellañ en ur stumm bennak pe reiñ un ali din da vihanañ.

Ur sizhun bennak eta goude va emwel gant tad Maria, abred da veure, en em sillis er-maez eus va c'hambur hag en em lakaat a ris en hent war-du kouronkvaou-kêr, war an torgennoù, e kornog Loran. Er c'harter-se edo Abboell o chom ha n'em boe poan ebet da gavout e di gant an diskleriadurioù en devoa roet din Konomor abarzh ma kimiadis dioutañ. Ur mintinvezh kaer a viz Eost a oa anezhi, beuzet straedoù ar gêrbenn dindan bannoù an heol, ma klaske an nebeut tremenerion a oa war vale d'an eur-se un tamm disheol dindan gwez poultrennek ar riblennoù. Tregaset ha morc'hedet un disterañ e oan a-dra-wir o vont da gavout un den dianav din hogen a oa, a ouien, un enebour da gostezenn dad Maria; n'oan ket evit mirout a soñjal e oan o trañsañ en ur stumm bennak an hini a oa bet betek hen va danvez pried.

Da zek eur hanter en em gaven dirak ur c'henkiz e maen-krag ruz (egiz e Brewinun) klozet gant ul liorz vras. Kuzh e oa an ti adreñv ur c'haed tamariakl. Un denig

kozh sioul a zeus da zigeriñ an nor din, dezhañ ur bou-  
chig gwenn, disto e gloenn, evel e ziskibl Konomor, ha  
berrwel tre a-hend-all : bepred e veze o wignal p'edo o  
sellout ouzhin ; madelezhus kenañ e oa e zoare.

P'em boe lavaret dezhañ piv e oan ha penaos  
em boa graet anaoudegezh gant e ziskibl e lakaas ac'hanon  
prim da zont en e di goude bezañ graet tro-dro ur sell  
disfizius ha neuze e vorailhas an nor.

- Sur oc'h n'oc'h ket bet heuliet betek amañ?"  
a c'houlennas.

- Sur a-grenn," a eilgeriis d'e zispontañ.  
E gwirionez n'em boa ket soñjet gwiriañ hag heuliet e o  
bet pe get.

Abboell a dennas un huanad a zisamm hag am  
c'hasas betek e liorz adreñv anti, pell diouzh ar straed.  
Ec'hon e oa al liorz-se, aczet ha kempennet avat gant  
kalz a ampartiz. Dre greiz al letonennou marellet gant  
bodou roz ha lireu e kammigelle ur gouver boull ha sklin-  
tin war ar grouan glas.

- Amañ emañ va repu," eme Abboell. "Ne vez  
derenet amañ nemet an dud n'eus diskred ebet da gaout warno."  
Kroget hor boa da vale dre an alezioù.

- Neuze eta," a hiboudas Abboell, "bev eo  
bepred va diskibl kozh ha va mignon kaezh, Konomor ?"  
Displegañ a ris penaos em boa kejet gant e  
geneil er Gouezva.

- Yac'h pesk e oa," a ouzhpennis.

Abboell en doa pashaet un tammig. Dour a  
oa savet d'e zaulagad.

- Paour kaezh Konomor!" a hirvoudas. "Ur pa-  
otr mat e oa koulskoude, ha ken speredek! Pebezh planedenn  
drist en deus bet! Me 'm boa lavaret mat dezhañ ivez pa  
welen e troe e spered war-du kelennadurezhioù arvarus :  
war-bouez, war-bouez Konomor, Konomorig, Konomorig kaezh;  
re bell ha re vuan ez ez ganti ; re zispac'hus eo ar geva-  
laouriezh evit spletiñ ouzh ar vro-mañ a zo bet boazet  
a-viskoazh ouzh ar voutinelouriezh..."

Abboell a sec'has un daeraouenn e korn e la-  
gad.

- A! M'en dije va selaouet... Hogen n'en devoa  
furnezh ebet. N'en doa komprenet tamm ebet kentel an avo-  
rour a oa ac'hanon. Treuzveizet en deus va menozioù. Kono-  
morig kaezh n'en deus ket merzet ez eo ar verzhierinti micher  
an dud a gredenn ha n'eo ket hon hini. D'ar re a soñj dezho  
ez eus e lein an Neñvoù uh Doue bennak a c'halv hag a c'hopr  
anezho ez eo lakaat o buhez en argoll da zifenn pezh a anvont  
ar wirionez. D'ul louarn kozh a seurt ganin avat...

- Penaos avat," emezon o troc'hañ e gomz outañ,  
"e c'hellit bevañ e-touez tud ha na n'eo deus tamm ebet ho  
menozioù ? Dic'houzañvus eo kement-se!"

Ur mousc'hoarzh a drez e baras war vuzelloù  
Abboell.

- A soñj deoc'h, den yaouank ? Moarvat eo berr  
ho skiant-prenañ. An tammig bihan a frankiz am eus a zo  
awalc'h din. Daoust d'am menozioù ez on bet anvet da gelen-  
ner er Skol-veur. Bout maz eo berzet a-grenn gonit butun ha  
strilhañ alkol er vro-mañ em eus miret un nebeut pengennou  
eus va liorz d'ar blantenn vuzhudas-se hag ebarzh ur ski-  
ber, du-se, e-kichen ar voger e aozan ul lambig eus ar c'henn-  
tañ evit frealz va c'halon. Dav e vo deoc'h hen tañva."

Ur momedig goude edon azezet ouzh taol ebarzh  
sal-studi ar c'helenner mat, Abboell. Hemañ a oa aet kentizh  
betek e levraoueg hag a ziwar an astelloù en devoa tennet  
ur mell levr Keinet e ruz ma oa enskrivet warnañ e lizheren-  
noù du "Ar bibl santel" Hen degaset en doa betek an daol  
ha gant lid en doa digoret anezhañ : gant sebez e vorzis  
ne oa anezhañ nemet ur voest dic'hizet e stumm ul levr ;  
en don anezhañ avat, elec'h follennou, e oa kuzhet ur vou-  
tailhig odivi.

- Tañvait-ean, va mignon; gant avaloù va li-  
orz ez eo bet graet."

Diskenn a reas din ur banne a euvris gant  
diegi, a-benn bezañ seven ouzh va ostiz. Abboell neuze a  
dostaas e gador ouzh an daol hag a chomas da doumañ e we-  
renn etre bozioù e zaularn.

- Marteze e teuy hor c'hostezenn da vezañ  
trec'h un deiz, piv 'oar ? Ken gwidreüs eo an Istor !"

Klukañ a reas ur bannac'hig eus e lambig ha  
luc'hañ ouzhin.

- Ha c'hwi, den yaouank, petra a c'hoarvez  
ganeoc'h ? Anvek oc'h deuet da vezañ er vro-mañ hag ar brud  
a red penaos emaoe'oc'h o vont da eurediñ gant unan a verc'hed  
Urien. Va gourc'hemennou a ran deoc'h.

- En abeg d'an dra-se dres ez on deuet d'ho  
kavout, Mestr," a c'harmis, laouen o c'hellout komz eus pezh  
a drubuilhe va c'halon. Displegañ a ris neuze penaos e oan  
morc'hedet oc'h ober va d'zegemer ur gredenn hag a oa es-  
tren ouzhin a gwirionez. En diwezh e c'houlennas e ali :  
daoust ha va dellid a virjen o timeziñ e seurt doare ?

Abboell en devoa va selaouet gant evazh en ur  
hejañ e benn bep an amzer da verkañ e kompren ac'hanon.  
P'em boe echu gant va c'haoc'h e savas e zivrec'h er vann.

- Daoust ha dimeziñ a zleit pe get ? Biskoazh  
c'hoazh hevelop goulenn! Dimezit hardizh, va mignon. Gallou-  
dus bras eo ho tanvez tad kaer e Loron hag abarzh pell  
en devo diskoachet deoc'h ur plas gonidus ha divec'huis  
kenañ ebarzh unan eus e wazvaoù."

C'hoarzhin a reas Abboell en ur beurlonkañ  
e vanne lambig a-drez-kil. Frotañ a reas e zaularn ha  
gwilc'hat ouzhin.



- Hag an ebeulez ? N'eo ket divalav kennebeut. Klevit, va faotr, un den a furnezh a gomz ouzhoc'h : marc'had mat eo prenañ gant un ofereñn ken kaer koantenn ha gwall nay e vefec'h-c'hwil o chom hep tennañ ho mad eus kerkoulz tro-vat. C'hwil welo : d'am oad-me ne gavot ket ho keuz da breñañ, siwazh!"

Grizinkal a rae, an aneval, ken drev e oa. A-daol, avat, e oa deuet da vezañ parfet.

- Muic'h a chañs hoc'h eus eget a soñjit marteze, den yaouank. Lansoc'h an hini eo a

oa karet gant Maria Urien gwechall. War-nes dimeziñ e oant, graet an embannoù ha pep tra. Ha neuze, en un taol, e voe torret an dimeziñ. D'ar c'houlz-se e voe darbet d'ar paour kaezh plac'h treiñ sod gant ar glac'har. An hailhon-se avat..."

Abboell en doa kroget da zezrevell karanteziou Lansoc'h ha Maria gant munudoù e-leizh. Ken displejet e oan gant e zanevell ma oan tost da gleñvel. Egile avat ne rae forzh. Kredet e vije e vourre oc'h ijinañ an degouezhennoù a c'helle va gloazañ ar muiañ. A-benn ar fin en doa graet an neuz da verzout va melre.

- Petra a c'hoari ganeoc'h, va mignon ? N'emaoc'h ket war ho tu mat, kredapl? Dalit, kemerit c'hoazh ur banne lambig : an dra-se ho kenerzhzo."

Nac'het em boa en ur sevel en sav.

- Trugarez bras deoc'h," emve. "Dav eo din kimiadiñ bremañ."

Abboell en doa va amheuliet betek kael al liorz.

- Ha pa viot dimezet, paotr yaouank, na vankit ket d'ober ur gwel din ! " en doa taolet tra ma pellaen a-herr diouzh e di.

~~~~~

P e n n a d 20

B r e u t a e n n g a n t L a n s o c ' h

Dipitet, kerseet, glac'haret kriz e oan o tistreiñ d'ar gêr. A-benn ar fin e oa bet degaset din ar brouenn e oan bet touellet gant Lansoc'h en doa klasket va lakaat da grediñ ar c'hontrol eus ar wirionez : ne oa

ket bet dilezet gant Maria, egiz ma asure ; an eneb eo a oa c'hoarvezet. Lansoc'h en doa livet gevier. Goap a oa bet graet ouzhin.

En un hent-dall edon bepred ; ne oa di-soc'h ebet d'am enkadenn. Kendalc'het em boa da vouzhat. Epad pemzektez bennak e oan manet va unan penn ebarzh va c'hambr. A-benn kemm va menozioù e stagis da lenn ur rumm levrion em boa lakaet kerc'hat eus levraroeg kreiz kêr Loran hag a blede gant hanes al Ledenez er c'hantvedoù teñval, raktal war-lerc'h an Drouziwezh, pa oa bet yenaet en un taol hin ar rannved-mañ a zo sko ouzh Atlantel an Hanternoz ; neuze e veze skornet bep goañv aodoù ar vro ; a-c'houdevezh eo, pa oa bet digrizet ha klouaraet an hin, e oa bet aloubet douaroù bet strujus gwechall gant ar c'hoadeier hag ar paludoù ; Ledeneziz d'ar c'houlz-se ne oa anezho nemet un dekmiliad bennak a annezourion. En desped din em boa ranket estlamiñ ouzh kalonegezh ar bodennoù bihan-se a dud, a-skign a-dreuz al Ledenez, dibourvez ha dizifenn a-grenn, o doa tizhet dreistevañ e ken kalet emgav hag o doa gallet daoust da bep tra saveteiñ ar pep pennañ eus o sevenadur, o yezh peurgetket, o legadiñ d'o diskennidi.

Souezhusat tra, Morgan : al lennadur-se a reas vad d'am spered dre ziskouez din e c'helle Mab-den bezañ trec'h d'ar gwashañ gwalleurioù ha d'e netraidigezh koulz lavaret. Tamm ha tamm e sioulais ha deskiñ a ris dremmañ gant sederni ouzh ar stad m'edon enni. Kompren a ris e oa ret din en em aozañ ouzh ar bed e oa tonket din bevañ ennañ hiviziken.

War-bouez treiñ-distreiñ ar gudenn ebarzh va fenn e teuis da soñjal e oa ar gwellañ diskoulm evelato goulenn diskleriadurioù digant Lansoc'h e unan : goude holl n'ouien ket ha n'en doa ket Abboell kontet sorbiennoù din kerkoulz all (iskis e oa an den-se, a varna a-wechoù pa soñjen en e emzalc'h). Arabat e oa din eta divizout netra diwar herr.

Dres em boe tro da gejouet gant Lansoc'h d'ar merc'her war-lerc'h, e tro fin ar miz. Goude merenn e oan diskennet d'al liorz e ser dic'hourdañ va izili ; kroget em boa da vale goustadik dre an alezioù, etre al etonennoù hanter graz endev dindan heol grizias an hañvezh. Tomm e oa an devezh adarre ha klasket em boa disheol ha freskadurc'h etal ar puñs, adreñv ar gwezennoù pechez a greske tost d'ar voger. A-greiz-holl he doa storloket an nor e penn all al liorz ha piv a oa deuet davedon nemet Lansoc'h e unan, diskabell, rouzet e zremm hag e zivrec'h, gwisket gantañ an doare chupenn lien gwenn a vez douget gant kalz gwazed eus al Ledenez epad mizioù gor an hañv. P'em boa e sourmantet em boa c'hoantaet tec'hout da gantañ. Hogen dija ne oa ket mui tu : dilammet e oa Lansoc'h d'am bete ha kroget en doa

kalonek em dorn.

- Mouzhet oc'h eta ? " a c'houlenne.

Ken flour e komze ma teuzas va droukrañs kerkent.

Un tamm disfiz avat a vane e don va askre ha ne respontis ket dezhañ diouzhtu.

Bale a raemp en ur gichen dre an alezioù. Tos-taet hor boa ouzh an aoglenn elec'h e fofile gwenniget mibin; tro-war-dro e kreske elestr, heñvel o bleuñv ouzh balafenned; eno e plije din arsaviñ bewech ma teuen d'ober un dro el li-orzh. Neuze avat e oamp aet betek ur wezenn gistin yaouank nevez plantet gant ar vugale daou pe dri bloaz arak, hervez a oa bet lavaret din ha troet em boa a-benn ouzh va mignon hep rannañ ger. Lansoc'h en doa va aterset d'ar c'houlz-se.

- Klevet em eus e oac'h aet da gavout tad Maria.

Daoust hag en abeg d'an dra-se eo ez oc'h melkoniet ? "

Skrijet em boa o klevout anv tad Maria. Ar gounnar he doa peget ennon adarre.

- Gevier hoc'h eus troadet din," a dufis.

Lansoc'h a grizas e dal, nec'het ha divarc'het.

- Petra a fell deoc'h lavarout ? Biskoazh c'hoazh seurt tamall," a eilgerias, sec'h e vouezh.

- N'ho poa ket diskuliet din e oa Maria e karantez ac'hanoc'h. Asuriñ a raec'h din ho poa bet korbelle ganti ha se n'eo ket gwir ; an dra-se a ouzon bremañ, Lansoc'h."

Mouezh an trec'h a oa ganin, na petra 'ta! Lansoc'h avat a oa chomet difrom.

- Perak em bije kontet deoc'h dre ar munud kement a selle ouzhin hag ouzh Maria hepken goude holl," emezañ sioul da sabatuñ. "Echu e oa pep tra etrezomp abaoe pell paz oc'h degouezhet er vro-mañ. P'em eus ho kwelet a-gevret eo deuet da soñj din e oac'h graet an eil evit egile..."

- Aes eo deoc'h en em zidamall evel-se," a droc'his. "Me ' zo bet an tamm askorn a daoler d'ar c'hi pa vez disvoued, 'keta; Maria a zo deuet davedon a-benn ho ti-soñjal, traken! Touellet on bet!"

Lansoc'h a stouas e benn hag a chomas direspont epad ur frapad.

- Lakaomp," emezañ en diwezh. "Digarezioñ am boa evelato. Ho mad-c'hwi a glasken da gentañ ; a-hend-all, un tamm kablus en em santen e-keñver Maria..."

Skriñnal a ris.

- Sed pezh a lavaren bremañ. Karget e oan da frealziñ ar paour kaezh plac'h."

Ha dirollañ a ris da c'hoarzhin c'hwerv. Lansoc'h en doa graet ur c'hruz d'e skoaz.

- Evel-se, gwir eo, e oa lamet ar marc'hed a

ziaeze ac'hanon. Maria am eus-me karet ivez : pifilh on bet ganti zoken. N'ouzon ket petra a zo c'hoarvezet ganin a-benn ur pennad. Heugañ am eus graet tamm ha tamm. Ar fo a entane va c'halon a droe da ludu dre ma teue Maria end-eeun da donmañ

ouzhin. Heñvel e oan, Keralen, ouzh an den dall a c'hortoz ar sklerijenn. Deuet eo an deiz hag ar gouloù ha marzh ebet n'em eus kavet er gwirvoud a ziskulient din. Va sec'h-ed am eus torret hag ankouaet war un dro ; va baradoz a-boan tizhet a zo troet da ouelec'h."

E hegal a ris adarre : "Heugot e oac'h ha teurel a raec'h din ho restachoù!" Lansoc'h avat ne daole ket pled ouzh va daeadenn. Gorrek e prezege, prederiet e zoare.

- Marteze n'on graet evit eurvat ebet ; biken n'em bo va gwalc'h ; koulz e ve din moarvat dilezel un hemolc'h aner. Ne c'hellan karout maouez ebet hep he gwelout en he c'hozhni ha gouzout n'he c'harin mui un deiz. Perak ober leoù ha touiñ hep feiz ebet ! "

Deuet e oamp betek ar puñs. Aspledet en doa Lansoc'h ouzh ar rizenn.

- Petra a fell deoc'h eta a-benn ar fin ? " am boa garmet.

- Daoust ha ken aes se eo din gouzout ? Betek hen em boa kredet e c'hellfen reiñ ur ster d'am buhez o servijout va nesañ dre al lu hag o plediñ gant aferioù ar stad. Tud ar vro-mañ a zo dister hag izel e meur a geñver daoust d'o lorc'h, Keralen. Ar stad hepken a roe tu din d'o diraez ha d'o c'hemm. Me ' oar eo lous politikerezh ha brezel hogen, maz int ret, maz int didec'hus, daoust ha ne ne vefe ket laosk ha divalav eus va ferzh lezel ar re all d'en em lousañ em lec'h d'ober va silvidigezh va unan... Ha padal..."

- Ha padal ? " a c'houlennis.

- Ya, perak lakaat hon dellid en argoll evit sevenadurioù a zo tonket da vont da get ne vern penaos..."

Kenderc'hel a rae da gomz nemet n'oan ken evit heuliañ troidelloù e venoz. Ul luziadell digomprenus eo bet evidon bepred askre Ledeneziz zo, Morgan. Emberr, a-hend-all, en doa merzet Lansoc'h n'o doa e gomzoù ster ebet evidon. Ruziet en doa egiz p'en dije bet mezh en un taol.

- Emaon ouzh ho porrodiñ gant va c'hudennoù-me, eralen," emezañ. "Ret eo deoc'h va digareziñ. Skuizh on bet gant an daou viz am eus tremenet e Laniltud, evel ma ouzoc'h, ha gwall strafuilhet ha glac'haret gant marv va contr. Se ' zo kiriek d'am arvar hiziv, moarvat. Displegit din kentoc'h ho nec'hamantou ; ho skoazellañ a rin, mar gellan."

Laouen e oan bet o sentiñ ouzh e atiz. Diskleriet em boa dezhañ dreist-holl an divizoù a lakae tad Maria d'am eured gant e verc'h. Lansoc'h a selaouas ac'hanon gant evezh. P'em boe echu e lavaras din:

- Kompren a ran ho marc'hedoù, Morgan. Perak avat n'hoc'h eus ket lezet Urien da zisplegañ spisoc'h e soñj Ne gav ket dine c'houlennfe hemañ diganeoc'h ober van da grediñ pezh a nac'ho ho spered degemer hogen lezel e verc'h da zesevel he bugale hervez ar Feiz en doa roet dezhi..."

Epad ur pennad e prezegas Lansoc'h evel hen, flour ha sioul, evel ma oar ober pa gar. A-benn ar fin e voen kendrec'het ha dont a raen da soñjal e c'helljen evelato piacuañ Maria hep mont da bilpouz ha koll va enor. Evit lavarout ar wirionez n'oa ket evit empenañ mat e teufen da vezañ tad marteze un deiz hag em befe bugale da ziorren. Er Ranngér ne oa ar gerent nemet dedaolerion ha n'oa ket karget e nep doare da zesevel ar vugale a veze ganet diouto. Evel-se eta n'oa ket trubuilhet va spered tamm ebet gant an degouezhuster a oa meneget gant Lansoc'h.

~~~~~

Pennad 21

Penaos e teuis a-benn da c'ur edañ gant Maria

Da noz e tiskennis da goañañ gant an holl. E gwirionez ne ziserris ket nemour va genou epad ar pred hogen arvestiñ a nis awalc'h ouzh Maria a oa azezet e-skoaz din. A-boan avat e eskemmjomp un nebeut gerioù. Evel boaz e tec'he he he daoulagad diouzh va re. Padal, diouzh ar selladennoù prim a rae war va zu bep an amzer e oa anat e oa e chal ac'hanon. Liv ar glac'har a oa en he c'herc'henn a-hend-all, divi e seblante bezañ, ma teuis, hep mercout kaer din, da druezif outi : ar garantez a darzhas ennon ur wech ouzhpenn evel un eienenn o flistrañ a nevez war-lerc'h ur barrad arnev. Paz ejomp diouzh taol ha pa savas war-du ennon he daoulagad lent hag aonik da lavarout din "nozvezh vat" e voe ken anat din em c'hare ma ne gomprenen mui penaos em boa gelllet kaout an disterañ douetañs diwar-benn se.

Pep tra a hañvale din bezañ gallus adarre. Digor e oa an dazont endro. C'hwek e kouskis en noz-se. D'ar beure war-lerc'h, debret lein ganin abred er gegin, va unan penn, e oan aet, evel kustum, d'ober un tammig tro el liorz. War va fouezig em boa kantreet dre an aleziou, betek al lab, adreñ ar puñs, e penn pellañ al liorz, ha chomet e oan da sellout ouzh ar gaoved aczilh a oa a-istribilh ouzh an nor : eno e oa bet bac'het un torad beufiged bet kavet war maez gant ar vugale e-kerzh an nevez-hañv tremenet. Edon o klask c'hoari gant an evnedigoù p'em boa klevet dor an ti o storlok. Maria an hini eo a oa o tont en dro-mañ. Ne gav ket din he doa va gwelet. Chom a reas saouzanet p'en em gavas a-greiz-holl tal-ouzh-tal ganin. Emberr avat e tizhas derc'hel war he from ha stagañ a rejomp da zivizout didro kaer egiz pa ne vije c'hoarvezet netra biskoazh etrezomp.

- Aet oc'h eta da welout va zad, Keralen?" he doa

goulennet Maria.

- Ya," emeve. "Klevet hoc'h eus anv eus an dra-se eta?"

Maria a oa chomet dilavar epad ur pennad. - Gwir eo hoc'h eus nac'het selaou outañ ? Ne fell ket deoc'h dimeziñ ganin eta ?

- Maria," a c'harmis, "petra emaac'h o kontañ? Gouzout mat a rit ez eo va brasañ c'hoant bevañ en ho kichen a-hed va buhez."

Graet em boa ur c'hammed war-du enni hogen kilet he doa kerkent a zirazon.

- N'oc'h ket gouest d'ober ho tibab. Un den digalon ez oc'h."

Ken bras ezhomm anezhi a santen neuze ma plegis d'hec'h aspediñ.

- Arabat eo deoc'h bezañ ken garv ouzhin, Maria. Na c'houlennit ket diganin ar pezh a zo dic'hallus.

- Penaos e fell deoc'h em befe fiziañs ennoc'h, karedig," emezi en ur stagañ da ouelañ a-greiz-holl. "Paz oc'h erru er vro-mañ e kontec'h deomp e oac'h un tec'had. Ha va zad bremañ en em c'houlenn ha n'oc'h ket ur spier, egiz ma soñj da zarn."

Droug a oa aet ennon neuze.

- Ho tad ne oar ket pezh a lavar.

- Diskouezit dezhañ ez eo faziet dre reiñ

dezhañ e c'houlenn, karedig.

- Mat," emezon. Ur skuizhnezh vras am sammas.

"N'eus forzh peseurt priz a baein d'ho kaout, muiañ-karet. Dreist ho priz an gement a zo er bed."

Maria a oa dedostaet ouzhin neuze ; kroget em boa da flourañ goustadik he blev ; hi am leze da ober ; ha soñjal a raen gant c'hwervoni ha c'hwekted e oan bet trec'het gant an hini a garen.

- Me ' fell din e vec'h heñvel ouzh va c'henvroiz, karedig. Ne garfen ket bezañ dimezet gant un istrogell, gant un euzhvil bennak, pa lavaran mat."

Mousc'harzhin a rae a-benn neuze en ur stagañ ouzhin he sellou didaeret, flour da sabatuñ. Penaos n'em befe ket mennet tec'hout diouzh he c'hounnar ? Da briz ebet ne felle din anoazañ Maria. Re a levenez e oa o paouez reiñ din.

- Ho youl a rin penn-da-benn," em boa grataet en diwezh, kent stouñ war-du enni da bokat d'he diweuz.

Skoulmet e voe va zonkadur diwar neuze. N'em boa mui na spi na c'hoant zoken da zistreiñ d'an Enezenn. Dre zegouezh em boa klevet e-kreiz miz Gwengolo e oa douaret ur vannadell e reter al Ledenez, tost d'ar Ganol, elec'h em boa taolet va zroad evit ar wech kentañ war an tir milliget -mañ ; gant Maria e oa bet degemmet ar c'heloù-se din ;

a-hend-all, houmañ a voe dislavaret ha skañdalet gant he zad dre ma ne ouie ket derc'hel war he zeod. Bezet pe vezet, daoust m'em boa kavet en degouezhem-se ur brouenn ouzhpenn eus disfiz Ledeneziz em c'heñver ne oa ket deuet war va spered an disterañ dezo a implijout seurt aerdreizhi-dell da zistreiñ d'an Enezenn. Prizoniad a youl vat e oan deuet deuet da vezañ.

E deroù miz Here e emezelis da vat en iliz al Ledenez. Kelennet e voen gant ur beleg kozh, aet er-maez a garg, hag a oa mignon da diegezh Urien. Buan awalc'h e teskis va c'hentel ha gouest e oan d'hen dibunañ gant un ton gwirion awalc'h. Neuze e voe sevenet al lidoù a rae ac'hanon un den a feiz, a-hervez : ne rois ket muloc'h a bouez dezho eget d'ar re a oa bet sevenet dirazon gant ar ouezidi o unan arak din distreiñ davet Ledeneziz. Badezet e voen eta d'ur pevarzek a viz Here, en un iliz vihan, war ar maez, un tregont kilometrad bennak diouzh Loronan, e kornog Loronan, elec'h o doa an Urienoù madoù a-berzh tiegezh. Divizet e voe e vijemp curedet er memes iliz pemzektez war-lerc'h.

E-leizh a gerentioù a bep seurt a zeuas d'ar gouel, kendirvi ha kenitervezed, kevendirvi ha kevendervezed; koroll ha kaniri a voe betek hanternoz ; Maria hec'h unan gwisket ganti ur sae wenn hag ur c'hoef dantelezh a oa bet douget gant he mamm endev da geñver hec'h eured-hi, a ganas brav kenañ meur a son ; en em eiltoniañ a rae hec'h unan gant an dolenn ha souezhet e voen, boemet zoken, o tizoleiñ pebezh mouezh kaer he devoa. E-kreiz an ebet hag ar vourrusted, gant ar gwin hag an didoù alkolek a vez sotreet da geñver hevelep gouelioù, e ankounac'hañ un tammig va frederioù ha va nec'hamantoù. Salv m'em bije gouezet diouerñ an evajoù a oa servijet din en devezh-se, Morgan! Gant ar chistr hag ar mezeglen e teuas re link va zeod. Karget e oa va spered a zamani o soñjal e tilezen va zremened hep distro hag ezhomm am boa da rannañ gant unan bennak segredoù va c'halon. E-touez an ostizion em boa kavet un den yaouank a anaveze mat Lansp'h - hemañ ne oa ket deuet d'an eured - hag a gavis plijus meurbet. Hep teurel evezh, diwar varvailhat, e oan deuet da anzav outañ evit peseurt abeg e oan bet kaset d'al Ledenez : evit spial an annezerion anezhañ, termeniñ ar rez-sevenadur anezhañ, divizout a-benn ar fin ha talvezout a rae ar boan mirout ar vro-se, pe daoust ha n'oa ket koulz hen distrujañ diouzh-tu. Gant kalz munudoù am boa taolennet ha deskrivet holl-c'halloud hud an Enezenn ; tro am boa roet d'am prezeg, egiz ma c'hell hen ober un den a vez aet gantañ meur a vanne hag a vez tommet mat d'e benn. Abarzh pell avat em boa tavet. Ne oan ket mezv awalc'h evit chom hep merzout e oa saouzanet va c'hendivizer gant va c'haozioù.

- Perak, emezañ, "n'hoc'h eus ket diskuliet da dad Maria ha d'hor renerion e pebezh argoll emaint ? Evel-se

eta e tibenn buhez ha marv Ledeneziz diouzh youl-vat pe froudenn Eneziz!"

Dav e voe din anzav outañ e lavare ar wirio-  
nez. Neuze, en un taol, e veizis e oan aet re bell gant va c'hoñchennoù mezvier. E don o paouez en em damall va unan ha diskuliañ ar pezh am boa nac'het mui pe vui betek neuze. Pa voe aet va c'hendivizer diouzhin ez eas bihan va c'halon em c'hreiz o soñjal er mell sottoni am boa nevez graet. Gwall aes e vefe implijout va c'homzoù a-enep din diouzh ret. Diwezhat e oa avat klask en em zislavarout.

Ar soñjennoù hegasus-se a gontammas va holl levezon epad ar peurrest eus an nozvezh. Keuz ruz am boa d' am c'haozioù dievezh hogen va c'heuz ne oa ket mui da breñañ. Antronoz evelato em boa ankouaet va zregas etre divrec'h Varia. Da Gerneost e oamp aet kuit diouzhtu war-lerc'h an eured hag eno e oamp chomet epad pemzektez bennak. Daoust ma oa miz Du o tostaat e oa chomet klouar an amzer er bloaz-se : a-boan ma oa krog deil ar gwez da velenañ. Neuze em boa bevet devezhioù gwenvidik e ser ar vaouez a garen ; un eurvad dreistlavar am boa tañvaet. Sevenet e oa bet va holl c'hoantadoù ; netra ne rae diouer din. Da bourchas hevelep dudi, priz ebet ne oa re uhel, war va meno.

Pa oamp distroet da Loronan etre an dek hag ar pemzek a viz Du hor boa graet Maria ha me hon annez en un ti bihan e oa marvet ar perc'henn anezhañ en nevez-amzer arak hag a oa manet dizalc'h abaoe, dishêr ma oa an hini kozh a oa o vevañ eno war e leve. Ne oa nemet pevar fezh ennañ, gant nebeut a arrebeuri ; hogen war-grec'h e oa bet savet an ti, e krap ouzh tor un tarroz, ha diwarnañ, etre ar c'houronkvaou ha liorz ar Skol-veur, e tizoloemp kêr Loro- nan en he fezh, ha war an torgennoù enep maezioù ha koadoù krog mat da rouzañ e deroù an diskar-amzer. N'hor boa amezeg tost ebet hag hon digenvez a brizemp e-leizh d'ar c'houlz-se.

Gant va zad-kaer e oa bet pourvezet deomp al lojeiz-se. Hogen ur prof ken kaer all a reas deomp hep dale. Tapout a reas e vijen anvet da gelenner war ar fizik er Skol-veur ; e-kreiz miz Kerzu e krogis gant va c'hentelioù. Gwall zilorc'h ha gwall zidro e oa ar c'hentelioù-se, Morgan, c'hoarzhus ha truezus, mat evit bugale : n'em boa levr ebet da harpañ va eñvor, nag ardivink ebet da sveniñ arnodad ebet. Hogen ur garg hag ur bevañs a roent din ; dre ar plas-se e oan klenket e kevredigezh ar vro ha n'oa ket mui un harluad. Moarvat e kavis kalet va buhez dervezhiennoù zo, epad ar goañv, pa ranken mont d'am labour dre ar yennienn hag an deñ- valienn, bale dre hentoù leun a fank, kelenn ha komz diba- ouez epad curvezhioù hir ha distreiñ d'ar gêr, divi. C'hoar- vezout a rae ganin bezañ skoet gant barradoù digalon o soñjal er vuhez aes ha klet am bije bet ma vijen chomet en Enezenn. Hogen awalc'h e oa din mouezh ha mousc'hoarzh Maria evit skañvaat va bec'h ha skubañ kuit, diwar va zro, ar velkoni.

#####

Emvod ar Breudoù

Tonket eo na gavin peoc'h padus ebet el Ledenez, Morgan. Pemp miz ne oant ket peurdremenet abaoe ma oan dimezet gant Maria pa voen sammet adarre gant an trubuilhoù, d'ar mare m'en em vodas ar Breudoù e Loranon, e deroù an nevez-amzer.

Ret eo din diskleriañ deoc'h petra eo Breudoù al Ledenez. Bez ez eus anezho ur vodadeg-ouarn vareadek en em d'olp end-reol bep trede bloaz evit merat ha reizhañ aferioù ar vro, diskoulmañ kudennoù grevus zo a vererezh hag a stadlevierezh. Bep trede bloaz n'eo ket allies, a lavarot moarvat hogen ret eo d'erc'hel kont eus an diouer a gehenterezh el Ledenez : diaes eo c'hoazh beajiñ eus ur penn d'egile eus ar vro. Dileuriet e vez d'ar Breudoù-se kannaded dilennet gant ar bobl, a-hervez, pep kendrev pe vourc'h pe gêr o kaout ar gwir da gas ur c'hannad. Evel maz eo kaer gortoz, Morgan, ne vez dileuriet a-benn ar fin nemet renerion ar c'hendrevioù o unan, maered ar c'hêrioù, henaourion ar bourc'hioù, peurvuiañ, war un dro gant un nebeut tud vrudet, prederourion, skrivagnerion, arzourion pe ilizourion. Enk awalc'h eo a-hend-all ar frankiz vrudañ, egiz m'hoc'h eus merzet hoc'h unan.

Daoust ma n'eo ket ar gannaded evit seveniñ netra eus kement a ziferont ez eo pouezus bras o roll evelato dre m'emañ en o galloud divodañ stadlevierezh Loranon, penndiern ha mavdiern ar vro. Eus ar re-mañ e gwirionez ne vez ket graet anv allies. O labour a reont er gêrbenn, sioulik ha didrouz, evel kargidi avat kentoc'h eget evel renerion. N'int nag enoret na c'hopret dreist da Ledeneziz arall. Kement-se avat ne vir ket outo a vezañ labourerion aketus meurbet. Dre vras ez eo dilorc'h tre gouarnamant al Ledenez, ar pezh a zo marteze ur fazi rak dre se end-eeun e vank dezho beli da rañjennañ ar c'hladalc'herion a bep seurt a zo o kinnig rannañ ha dispenn ar stad ledenezat a-benn an diwezh.

En em dolpañ a ra ar Breudoù un tammig er-maez eus kêr, nes d'ar mengleuzioù, war dachenn ur redva-kon kozh. Eno, dindan an amzer, ez eus bet savet un doare c'hoariva graet a zereziou kelc'hiek o sevel an eil a-us d'egile hag o c'hronnañ ul leurenn garrezek ma komz ar brezegennerion diwar ar gorre anezhi. Aozet mat tré eo bet hokleverezh an daeldi-mañ - evel-se e ra Ledeneziz eus ar savadur-mañ - hag o komz diwar ar savenn emañ o paouez menegiñ e c'heller aes kenañ bezañ intentet gant ar selaouerion a zo azezet tro-dro war an dereziou. E grounvaen glas kaer tre da welout eo bet savet an daeldi ha d'am soñj, Morgan, e tiskouez ervat pegen ampart ez eo tisa-vourion al Ledenez.


Adal ar pemzek a viz Ebrel eta e stagas ar gannaded

da erruout. A bell bras e teuent a-wechoù ha lies a wech o doa lakaet meur a zevezh da ziraez ar gêrbenn. Evel ma n'eus nag ostalerioù na tavarnioù na tiez-degemer prevez el Ledenez e sav kudennoù e-leizh pa vez kel a lojañ ha magañ kemendall a dud, e tro seizh kant pe eizh kant a wazed. Bep tro eta e vez ret sevel etal an daeldi un doare bourc'hadennig a deltennoù. Eno e roer boued ha bod d' an holl gannaded-se. Epad div sizhun bennak, pa vezen o tiskenn d'ar Skol-veur d'ober va c'hentelioù, e kejis bemdez gant kouerion o vleniañ dre stradoù kêr tropelladoù deñved ha leueoù war-du ar c'hamp-se ; karradoù avaloù douar a veze charreet betek du-se ivez. Bemdez e veze chervad ha joa e-touez an holl dud vat-se ; darn anezho a chome diwezhat da gas trouz, da ganañ ha da goroll, rak Loranoniz, evel dres, a zeue d'o gweladenniñ. Banveziou bras a veze da sul dreist-holl ha, siwazh, daoust da reolennoù strizh al Ledenez e c'hoarveze gant hiniennoù kemer pochadoù gant dieoù kreñv berzet ha degaset dre guzh e diabarzh ar c'hamp.

Diduamantoù siriusoc'h eget ar re-mañ o devoa ar gannaded evelato. Da skouer, teir gwech bep sizhun, d'abardaez, en daeldi dres, e veze displeget pezhioù fentus ha reuziek, aet ar maout ganto epad kenstrivadegoù ar bloavezhioù tremenet. Meur a wech ez is gant Maria da arvestiñ outo ha n'em boe ket keuz rak dudius bras e oa an oberennou peurliesañ hag akuit meurbet an displegerion.

Ar mintinvezhioù avat a oa gouestlet d'al labour, adal seizh eur diouzh ar beure. En dalc'h-se o devoa ar gannaded da bleidiñ gant kudennoù kozh noe evel raktresañ al labour-douar hag ar greanterezh, stourm ouzh ar ouezidi, difraostañ ar c'hoadeier. Kudennoù nevez a glasked ivez diskoulmañ abaoe un hanter kantved bennak. Da skouer, er bloaz-se dres, e rendaele ar gannaded da c'houzout ha da e ve pe get sevel listri-dre-lien bras, gouest da herzel ouzh barradoù gwall amzer an Atlantel, da zougen pareoù bras a dud ha da chom war vor meur a sizhunvezh pe a vizvezh zoken. Tizhet e oa bet dija meur a wech aodoù ur rannved nevez en hanternoz al Ledenez, tost awalc'h e gwirionez, hogen n'o doa ket kredet ar vartoloded imbourc'hañ diabarzh ar vro : diaes bras e oa ergerzhout an taoleadoù-se a oa dalc'het gant koadeier stankoc'h kalz eget el Ledenez hec'h unan. Aon a oa ivez da gejout gant pobloù gouez a seurt gant ar "Fraspotch" hag ar "Fraspotcheñ". Boudet e oa faltazi Ledeneziz avat gant ar skridoù o devoa nevez dizoloet hag a roe diskleriadurioù e-leizh diwar-benn broadoù a oa kar d'o hini en hanamzer.

Hogen ne oa ket gant ar gudenn-se e oa strañuilhet ar muiañ Ledeneziz, gant hini va donedigezh ne lavaran ket, Morgan. Abaoe ma oan bet brell awalc'h evit diskuliañ epad nozvezh va eured petra oa an Enezenn e gwirionez e ouie Ledeneziz



e c'helle o bro bezañ distrujet a-grenn gant un enebour e oant manet dic'houzvez anezhañ betek neuze. Harzet e oant er reter gant ar Ganol ; bep an amzer ivez e verzent oablistri nevez o troellat endro d'an Tîr, sterlistri o sankañ e don an ec'honderioù ; tro pe dro e c'hoarveze ganto pakañ krog e bannadelloù pe nijadelloù dianket war o douar. Hogen vevl ma ne welent gwech dorn ar re a c'hovelie an ardivinkoù burzhodus-se e oant tost

da lakaat kiriek dezho an Natur hec'h unan pe a-hend-all boudoù marzhus arallvedel peogwir n'oant ket evit reif diskleriadur poellek all ebet.

P'o devoe anavezet avat gwir c'halloud an Enezenn, kennozadur ar C'hreñvlec'h, beli ha galloud Omeur koulz hag e vennadoù e-keñver o bro e voent spouronet mik. Rak-se e tivizjont ober un emvod a-ratozh da vreutaat diwar-benn ar gudenn holl-bouezus-se. Ha me a voe galvet eveljust da reif va ali. Ha daoust d'am c'hertri e rankis en em ziskouez dirak an dud-se.

Graet e voe an emvod-se d'ar sadorn war-lerc'h tregont a viz Ebrel. Un nebeut kannaded eus reter ar vro a gomzas da gentañ. Kinnigoù diskiant awalc'h a rejont, tud taer ha ma oant, evel maz eo peurvuañ, dre vras, paotred ar c'hendrevioù. Kavout a rae dezho e vije awalc'h fardañ un houarnwisk bennak d'ar soudarded evit gellout treizhañ ar Ganol salv ha dibistig. Din e oa eveljust ijinañ an houarnwisk-se. Krediñ a rae dezho ivez e vije gouest un armead a bemzek mil pe ugent mil a soudarded - ar muiañ a c'helle al Ledenez dastum hag armañ d'ar c'houlz-se - da aloubiñ ha trec'hiñ an Enezenn !

Deuet e oa va zro da gomz. Abalamour d'am zad kaer o devoa an holl fiziañs ennon. Pignet e oant eta war al leurenn-brezeg ha kroget em boa da zisplegañ pegen foll e kaven dezo an holl dud-se. Tra ma oant o tistagañ va frezegenn e savas rener ur gendrev eus reter ar vro en e sav a-daol-trumm hag eñ da c'harmañ :

- Peogwir ez eo ken fur an astroù Keralen, ra ziskulio deomp eta petra a zleomp ober en enkadenn-mañ. Laouen e vefen o klevout e guzuliou."

Hag azezañ a reas endro. Sioul mik e oa deuet ar kannaded da vezañ. An holl a oa o c'headal va ali a-benn ar fin. Em c'hreiz avat e oa aet va c'halon bihan en un taol : n'oan ken evit rannañ ur ger.

Tizhout a ris gwaskañ war va zrefu. Ha me da ziskleriañ penaos e oa dic'hallus krenn dont a-benn eus an

Enezenn ; n'oa ket sur zoken, a ouzhpennis, e vije tu zoken da ziraez ar C'hreñvlec'h.

- Bez e c'hellfemp aloubiñ ar Geoded da gentañ, a arguas va daeler. "War a lavarit hoc'h unan n'eus enni nemet tudigoù dinoazh."

War-nes fallgaloniñ e oant dirak kement a aheurteterezh.

- Ne viot ket gwell a se," a eilgeriis, faezh. "Omeur a c'hell kas da get ar Geoded evel ma kar. Un trapad e vije ar Geoded evidoc'h."

Ur vouezh rust a droc'has va c'homz adarre.

- Argadomp ar C'hreñvlec'h war-eeun eta!"

C'hoant a savas din tevel da vat ha diskenn diwar al leurenn, ken mantret e oant gant hevelep dallentez.

- Dic'hallus krenn, peurzic'hallus eo argadiñ ar C'hreñvlec'h, klevit ac'hanon," a griis en diwezh. "Lakaet e tizhfec'h anezhañ - dek lev a goadior, a oulec'hioù, a baludoù ho pefe da dreuziñ - e vefec'h distrujet war dreuzoù ar C'hreñvlec'h end-eeun."

An holl kannaded a roas peoc'h epad ur frapad.

- Evelato," eme unan anezho a-benn ar fin," o kas pemzek mil a soudarded..."

Hejañ a ris va diskoaz.

- E pelec'h e kavot bitailh evit kemendall a douaroù-se bet drastet da vare an Drouziwezh, kenvroiz, ne chom mui nemet plant, gwez, geot hag amprevaned."

Paouez a ris a gomz. Tud a oa o safarñ hag oc'h ober cholori e lein an daeldi. Huchet e voe warno :

- Roit peoc'h ! Selaouit anezhañ ! Hemañ a oar eus pezh a gomz hag anavezout a ra an traoù gwell egedoc'h.

Bez et lezet da genderc'hel gant e zisplegadenn."

E-doug ur pennadig e kendalc'his gant va c'haoz eta. Evit Eneziz, emeve, ne oa Ledeneziz enmet ampistu ; hep damant e vijent friket ha distrujet. Tavet e oa an holl da gentañ hogen abarzh pell e stagas darn eus ar kannaded d'ober un todilhon spontus war zereziou al laez. Unan anezho a savas war e skañv hag a youc'has :

- Mard eo ken kreñv se Eneziz perak n'int ket deuet o unan betek amañ ? Daoust ha spezoù a zo anezho ? "

Houmañ a oa un arguzenn direspont d'ar c'hentañ sell. Sebez et e chomis da gentañ. Start e oa displegañ o doa Eneziz fardet dezho o unan un amved nevez kevanaozel abaoe amzer an Drouziwezh ha ne oant ket mui gouest da herzel ouzh hin garv ar broioù noazh evel al Ledenez : prizoniet e oant ebarzh o C'hreñvlec'h pe o C'headed. Pa verzas ar kannaded avat ne c'hellen ober respont mat ebet dezho e krogjont holl gwitibunan d'ober un tousmac'h spontus, ma tiskennis a-herr diwar al leurenn ha ma tec'his er-maez da guzhat va mezh.

\*\*\*\*\*

D i s m a n t r

Gwall enkrezet e voen e-doug ar miz war-lerc'h. Divi e oan manet da heul abaden ar Breudoù. Fel-lout a reas din chom er gêr epad ur pennad da ziskuizhañ. Eno zoken, avat, ne voe ket roet peoc'h din. Deredek a rejod d'am c'havout da c'houlenn diskleriadurioù fonnasoc'h ha resisoc'h. Ar Penndiern, rener ar stad, am pedas da zont davetañ hag a zivizas ganin a-zivout ar c'hudennou-se. Eskob Loran a ziskouezas c'hoantaat kejour ganin ha, goude va c'hlevout, a zisklerias e oa ar C'hreñvec'h anez ar Drouk-spered. Eveljust ivez, hag ar pep poniusañ e voe, e teuas va zad-kaer d'am gweladenniñ meur a wech. Hemañ am aspedas d'ober va seizh gwellañ a-benn sikour Ledeneziz. Ret e oa lemel ar gourdrouz a oa o waskañ ar vro; emezañ ; bremañ ma sante Ledeneziz e pebez argoll edont ne c'hellent mui kaout diskuizh na distenn ebet kent na vije dilamet an ar-var marvus a oa o kinnig kas o bro da get dez pe zeiz. Hogen tro-wenn a reas va zad-kaer ha ne dizhas ket va c'hendrec'hiñ. E gas a ris da sutal a-benn ar fin pa voen aet faezh gantañ.

Ar wirionez eo ne oan ket harzet hepken gant ar soñj e oa dic'hallus trec'hiñ an Enezenn ; dalc'het e oan ivez gant ar more'hed a vire ouzhin a arnodiañ, pa ne ve ken, kas da get uhelañ sevenadur an hollved. An Enezenn, da vihanañ, he devoa evidon ur ster a glote gant natur an hollved. Al Ledenez n'he devoa ster ebet. Bewech ma ompenten e c'hellen tagañ ar vro he devoa va desavet ha va diorroet, graet ac'hanon pezh e oan, profet din an uhelañ gouziziegezh, e heugen ouzh va dianaoudegezh, va zreisoni ha va laoskentez. Awalc'h e oa din kounañ an devezhiou braouac'hus am boa bev et Laniltud, pe kaout soñj eus kredennoù dibzell Ledeneziz a ranken ober van da zegemer, evit meizañ pebez torfed dibardon a gasfen da benn ma plegfen da c'houlennou diskiant va c'henvroiz nevez. Enket war an tammig douar a oa dezho, hep sikour ebet a-berzh hini, n'o doa Ledeneziz, - lakaet o dije bet youl da se, - chañs ebet da dizhout ur rez-sevenadur a c'helljed keñveriañ ouzh hini an Enezenn. Er gwellañ degouezh e tleent kontañ war va galloud - martezeek - da gendrec'hiñ Omeur d'o lezel e peoc'h, ur wech m'em bije kavet an tu da zistreiñ d'an Enezenn. Evel ma oa hevelop darvoud diwirheñvel a-grenn d'an ampoent ne welen diskoulm ebet da enkadenn Ledeneziz. Anat e oa din hepken e oan war var da vezañ islonket va unan en Drouziwezh a skubfe kuit al Ledenez en un amzer-da-zont ha n'oan ket evit termeniñ.

Kement-se, evel dres, ne oa ket Maria evit kompren ha diwar neuze, Morgan, e tonaas a nebeudoù etrezomp un troc'h, ur faout a zispartias ac'hanomp muioc'h mui bemdez.

N'he doa ket kavet brav, na petra 'ta, an doare m'em boa kaset he zad diwar va zro. Abalamour da se e talc'has droukrañs ouzhin eveljust.

Hogen, abaoe meur a viz endev, abaoe penn-kentañ hon eured, e oa aet fall an traoù etre va fried ha me. Kerse am boa roet da Varia hep gouzout din. Ur wech ma voemp distroet diouzh Kerneost, p'hor boe graet hon annez en hon ti bihan etal ar c'houronkvaou, hon unan penn, e teuas Maria da vezañ melkoniet hep abeg ebet da welout. Da noz dreist-holl e tiskoueze bezañ doaniet p'en em gaven er gêr war-lewañ va labour. Diouztu goude koan en em denne ebarzh hor c'hamb ha prenañ a rae an nor war he lerc'h. Ne zibrenne anezhi nemet a-benn ur pennad hir a amzer. He c'havout a raen neuze azezet war ribl ar gwele, dispak be blev, kuzhet he fenn etre bozioù he daouarn, he- jet he c'horf gant difronkadennou. Pa glasken he flourañ e pellaet trumm diouzhin egiz pa vije bet skatet gant al lazig a felle din ober dezhi. Goulenn a raen outi perak e leñve ; ger ebet ne responte avat, nemet bep an amzer, war-lerc'h un hirvoud : "N'ouzon ket, n'ouzon ket,..." A-benn ar fin e vane kousket e-kreiz he daerou hep bezañ diskuliet a belec'h e teue dezhi ken kriz glac'har.

Antronoz veure e hañvale bezañ ankouaet pep tra ha ne greden ket hec'h aters diwar-benn ar barrad en deveze he sammet da reizheur. Seder ha karantezus e veze adarre hag a-benn ar fin em boa kavet gwel tevel ha chom hep ober van a netra. A nebeudoù e oa aet Maria war sioulaat ; paouezet e oa he c'haouadoù dic'hoanag. Padal, war un dro, e oa deuet da vezañ froudennek. Daoust din teurel an evezh brasañ e c'hoarveze ganin hec'h anozañ war ziga-rezioù dister meurbet. Droug spontus a oa aet enni un dro-vezh dre ma n'em boe ket degaset dezhi eus ar marc'had ar pourvezioù a bep seurt he devoa goulennet ; loc'het e oan re ziwzhat diouzh ar gêr ha pa oan erru war ar marc'hallac'h e traoñ kêr e oa serret endev an darn-vuliañ eus ar stalioù. N'oan ket gouest kennebeut d'ober war-dro an ti ; n'oan ket evit renta dezhi ar servijou a c'houlenne ha se a blante imor enni bep tro. Nac'het em boa evel-se liveañ ar sal-debriñ egiz ma felle dezhi : e sigur se he doa mouzhet ouzhin epad daou pe dri devezh. Divroc'hañ a rae buan awalc'h. En em adunaniñ a raemp, hogen, en desped din zoken, e talc'hen droug outi e-kreiz he fokoù. An eurvad c'hwek am boa tañvaet arnok ha nebeut goude va eured a oa steuziet neuze evel mogidelloù skañv ar beure debret gant heol ar c'hreisteiz.

Hep dale, Morgan, e kredis kompren perak e oa deuet ken mantrus kamm e tro-spered ar vaouez a lakaen enni va dudi holl hag am boa kavet gwel zoken eget kement a

c'helle Omeur grataat din. Bep miz e veze en gortoz d'en em gavout dougerez, ha bep taol e veze disouezhet. Epad meur a zvezh war-lerc'h e chome beunek ha tavedek, techet da huñvreal. Da noz e pede pell amzer kent mont da gousket. Awalc'h e oa dezhi pediñ evit ma roje Doue dezhi he goulenn, war a lavare. Ken hegaset e vezen ouzh he gwelout war he daoulin e-harz he gwele ma teuen er-maez eus ar gambr ha ma chomen da bazeal war ar straed ken na vije echu hec'h ardoù ganti. Aet e oa zoken d'ober ur pirc'hirinaj e-kreiz ar goañv betek feunteun ur sant a oa brudet da reiñ ar pare d'ar gwraez difrouezh, ul lev bennak diouzh kêr, e-kreiz ar maeziou. Klasket em boa he distultennañ hogen n' em boa ket he c'hendrec'het ha goude m'em boe nac'het hec'h ambroug e oa aet hec'h unan penn, dre ar yenijenn, dindan an erc'h a gouezhe neuze a valzennoù tev ha dall, betek Lanngroaz, ur gêriadenn dister elec'h edo savet ar feunteun etal ar chapel gozh dizalbadet. Hag he gortozet em boa neuze, jahinet gant ar morc'hed hag an anken war un dro, ken na oa distroet d'abardaez, serret an noz dija, hag hi skuizh divi, brudet en he c'hreiz, avat, evit ur pennad, ur goanag ha n'oa ket evit dioueriñ daoust da bep tra.

Hogen e don va boud e verve ar gounnar dre ma kreske melkoni va gwreg. Diaes e ve taolennañ pizh tro va menozioù a neuze. Bout ma rae Maria he seizh gwellañ evit bezañ tener ha karantezus ouzhin etre he barradoù damani ha digalon en em santen kiriek, kablus ha tamallet ; en abeg din n'he doa ket bugale ; m'he dije dimezet gant unan all he defe bet moarvat, - gant Lansoc'h, a ouzhpennan, ha losket e oan gant ar gourvenn ; ne oan ket eus he gouenn, 'keta. Dreist pep tra avat en em santen dismegañset dre ma ne oan ket awalc'h d'am pried, anat e oa : bugale a ranke kaout ; rak-se he doa va c'hemeret ; ur benveg e oan dezhi hepmui-ken. Un digoll da dreisoni Lansoc'h e oa bet hec'h eured ganin, ivez.

War an douar brein-se e tiwane ar warizi evel ur vleunienn a gontamm. Abaoe m'edomp dimezet Maria ha me ne zeue ken Lansoc'h nemeur war hon tro. Hogen ar soñj eus an diviz am boa bet gantañ a-ziagent a chome garanet e don va eñvor. Da noz, krog an anahun ennon, gourvezet etal va gwreg kousket, mut ha disant, estren ouzhin gwashoc'h eget biskoazh, e adveven dre nerzh ar faltazi ar pennad amzer am boa tremenet e ti Urien hag e Kerneost a-gevret gant Lansoc'h ha Maria ha strivañ a raen da gounañ darvoud pe zarvoud en defe diskouezet din n'o doa paouezet gwec'h ebet an daou garedig kent a en em garout e don o c'halon. Touiñ a raen din-me neuze e tennjen un dial kriz eus an daou-se o devoa va zouellet ha goapaet en un doare ken vil.

Emberr avat e kavas va gwarizi un danvez feti-soc'h d'he rambreadsnoù. En un ti tost d'hon hini e oa o

vevañ ur c'houblad priedoù dimezet nebeut amzer arazomp hag a oa o paouez kaout ur bugel. Adal deroù miz Ebrel e oa deuet an amzer da vezañ kaer ha tomm ; krog e oa ar bokedoù-laezh da varellañ ar pradoù ha war an torgennoù tro-dro e flammine al lann hag ar banal nevez digloret. D'ar c'houlz-se e oa kustum ar vaouez yaouank da zegas he babig ebarzh al liorzha ha da luskellat anezhañ en e gavell en ur ganañ sonioù ; fraezh o c'hleven diouzh hon ti pa veze an avel a-du. Alies, war-dro c'hwec'h eur, pa zistroen diouzh ar Skol-veur, e kaven Maria e ti hon amzeion hag hi oc'h estlamiñ ouzh an hini bihan. Da gentañ n'em boa ket taolezh perzh. Hep dale avat em boa meizet e kreske tristi-digezh Varia goude ar gweladennoù-se. Azezañ a rae war ur skabell er gegin hag elec'h aozañ boued e chome da huñvreal. A-boan e responte d'ar goulennoù a raen dezhi.

Se ne oa netra, Morgan. Disfiz avat a zeuas war va spered pa cuezis e veze an ozhac'h er gêr a-wechoù pa rae Maria he gweladennoù d'ar wreg yaouank. E deroù miz Mae em boe tro da gejour gant an den yaouank, Tivizio e anv, nebeut amzer goude ma voe bet klozet dalc'h ar Breudoù er bloaz-se. Tivizio a oa ur gwaz mentet bihan awalc'h, koujorn evel un tarv avat, un duard, gloanek e vlev un disterañ, dezhañ choulagad du krak ha drev, c'hoarzhidik, egiz pa vije bet bepred war an tire d'ober ur bourd bennak. Bagol ha sart e oa bepred hag hegasañ a rae ac'hanon awalc'h d'abardaez dre ma veze bepred o kanañ pe o c'hwitellat pa rae war-dro e liorzha ur wech erru eus e labour. Kalvez e oa diouzh e vicher ha, na petra 'ta, barrek e oa da gempenn pezhioù arreburi koantik tre da fitchañ e di, ar pezh a roe avi awalc'h da Varia a lavare a vare da vare en ur huanadñ he doa chañs he mignonez o kaout ur pried a sikoure anezhi da aozañ HE lojeiz, da vihanañ. Flemmet e vezen eveljust gant ar c'homzoù-se ha respontet a raen feuls, ha me dipitet hag anozet: "It 'ta da vevañ gant hemañ peogwir ez eo diouzh ho toare ! " Maria avat a eilgerie din neuze ken taer all : "Ma! Mont a ran peogwir e plij deoc'h!" Ur vunutenn war-lerc'h e vounte kloued al liorzha ha mont a rae da gavout Aziliz, he mignonez. A-benn ur c'hardeur, o tagañ gant an ernez, ez aen da gerc'hat va gwreg hag he d'havcut a raen gant Aziliz o nezañ pe o vrochennat hag hi oc'h ober bep ar mare mous-c'hoarzhoù bamet ouzh ar c'hrouadur gourvezet en e gavell en he c'hichen, gronnet en e bakoù. Pebez arvest lu, me ' respont deoc'h, Morgan. War an tire edon da bediñ Maria da zistreiñ d'ar gêr pa zegouezhe an ozhac'h, sichant evel boaz, eus penn all al liorzha, e rañ war e skoaz, hag eñ oc'h hopal din: "Neuze, paotr, deuet eur d'ober un tamm tro?" Ha me a ranke stardañ dorn an amprevan-se a roe doñjer din gant e varchodennoù livrin hag e zaouarn blevek a oa heñvel awalc'h ouzh krabanoù ul loen. Dav e oa din menel gantañ; komz a rae din eus e vicher, eus an arreburi en devoa graet a-hervez evit ar Skol-veur. E penn ul labouradeg vihan e oa ha pemp

micherour dieub a oa dindanañ. Hogen ne selaouen ket anezhañ. Evezhiet em boa en un taol e tenne Tivizio un tammig da Lانسoc'h ; an hanter uhelañ eus e zremm a oa heñvel ouzh hini va c'heneil. Neuze ne selaouen ket mui Tivizio ; Maria an hini eo a eveshan, antellet holl, o c'headal ar sell pe ar mousc'hoarzh a silje war-du ar gwaz postek-se a oa bet gouest da fardañ ur bugel d'e wreg. Peseurt karantez a c'helle magañ ouzh ar sio-c'han arallouenn a oa ac'hanon ? En diwezh e tizoloe Maria va enkreiz ha va c'hounnar war va dremm ha, morc'hedet pe spon-tet, e kinnige din diouti hec'h unan dont endro d'ar gêr.

Spez hor c'harantez a glaskemp en orged an noz-vezhioù. Hogen, pa veze troet an tan da ludu, e kave din e oan bet touellet gant va c'hoant ha va c'herse a vage muioc'h c'hoazh va droukrañs.

Ur stourm kuzh e oa deuet hon eured da vezañ.

Pa n'em beze ket roet he goulenn dezhi en em veñje Maria dre va hegal e pep doare. Kroget he doa e-kerzh mizvezhioù kentañ hor buhez priedoù da vrodañ din ur chupenn he doa aozet din hec'h unan (merc'hed al Ledenez a zo barrek da gempenn ha da fichtañ dilhad o gwaz hag o bugale) ha d'am daeañ, war n'ouzon peseurt digarez, e tisklerie din un deiz e oa o vont da zifoeletriñ ar chupenn-se d'ar beorion! Dav eo din lavarout e oa bet ezel eus unan eus ar c'hevredigezhioù madobererezh-se a zo ken stank e-touez merc'hed al Ledenez, a bled koulz gant ar geizh hag ar gozhidi. A-wechoù all e nac'he heulian ar c'hentelioù am boa kinniget reiñ dezhi e deroù hon eured diwar-benn an danvezioù a gelennan er Skol-veur : kavout a rae din em-bije tostaet anezhi ouzhin o rannañ ganti va gouiziegezh ha va skiant-prenet hogen goude bezañ pleget d'am froudenn aas awalc'h epad mizioù kentañ hon eured e oa deuet Maria da yenaat ha da heugañ zoken ouzh va mennad ha gant muioc'h-mui a ziegi he doa selaouet va c'hentelioù. Dre se avat hor boa en em gavet di-partiet donoc'h c'hoazh.

Er plegennoù-se eo em boa en em lakaet da bleus-triñ adarre ti Abboell, nebeut amzer goude ma voe echu dalc'h ar Breudoù. Borrodet e oa va fenn gant tamalloù ar vrogarourion. Digenvezet a-grenn e oan : abaoe meur a viz n'en doa ket Lانسoc'h taolet e droad ebarzh va zi. Ne gejen ket mui gant va zud kaer ; gouzout a raen hepken e teue Urien du-mañ bep an amzer, pa ne vezen ket er gêr, da froalziñ e verc'h, kredapl awalc'h, ha lavarout dezhi kemer pasianted : an torr-dimeziñ n'eo ket arveret el Ledenez. Ha kentoc'h eget distreiñ abred davet ur wreg vouzhet e kaven gwel mont da welout hini pe hini eus va c'henvreudeur e ser ober un tamm marvailh ha tremen an amzer. E tro miz Mezheven eta e oa deuet war va spered antreal e ti mestr kozh Konomor en em gave war va hent pa zistroen d'ar gêr. Un degemer karadek kentañ a oa bet graet din ; goulennet e voe ouzhin perak ne oan ket deuet abretoc'h ; moarvat e oan

sammet spontus gant al labour ; padal e oad prest d'am sikour diouzh ret, ha parañ a raed warnon selloù leun a vadelezh.

Da gentañ ne c'hoarvezas netra. Epad eur-vezhioù e chomemp da c'hlabousat ebarzh liorz Abboell. Hemañ a oa troet da gaozeal hag ouzh e selaou ne gaved ket hir an amzer. Da gentañ e c'houlenne koloù diwar va fenn hag o c'houzout pebezh trubuilhoù am boa er gêr d'ar mare-se e tiskoueze bezañ leun a drez ouzhin. Hejañ a rae e benn evel unan a gompren an traoù hag ouzhpennañ a rae : "N'eo souezh : temz-spered he zad a zo ganti penn-da-benn, kilvers ha fallakr eveltañ..." Ha stagañ a rae da zroukkomz eus Urien, ma oan souezhet o tizoleiñ pebezh kasoni a vage en e greiz e-keñver va zad-kaer. A-benn ar fin evelato e paoueze ha gant ur mousc'hoarzh gadal e kloze evel hon : "Evelkent, koantik eo an ebulez, ne gav ket deoc'h ?" Ha gwignal a rae ouzhin, kenwall hag acugus war un dro.

Peurvuiañ e veze anv gentañ eus an amzer gent, araok an Dispac'h milliget, egiz ma lavare, pa oa trec'h ar gostezenn vat, e hini, hag e lignez e barr he brud ; illur e oa e ouenn neuze, unan eus ar re henañ a oa er vro, perc'henn da nospet devezh arat er C'hornog, nospet penndeñved ha pennchatal, hep kontañ sklaved e-leizh o devoa dastumet er c'hoadeier. Ton al lorc'h a oa neuze gant komzoù Abboell. Siwazh, rivinet e oa bet e diegezh gant rannadur ha dasparzhadur nevez an domanioù kozh. Neuze e kroge Abboell da bismigat ar gouarnerezh nevez ; n'oa ket dav, emezañ, ober kement a freuz peogwir e oa diwanet el Ledenez a-bonn ar fin ur rumm brientinion nevez a oa gwashoc'h c'hoazh eget ar re gentañ ; n'oa nemet soñjal er prosez edod o prientiñ bepred ouzh renerion labouradegoù Laniltud. Ha d'ober goap e stage Abboell da ganañ gant ur vouezhig faos fentus ur ganaouenn a oa diouzh ar c'hiz d'ar mare-se e Loranon :

'Vel en amzer wechall,  
Atav memestra, memestra !

N'oa droug ebet e kement-se, Morgan. Evelato e teue sec'hed deomp war-bouez ober marvailhoù seurt se. Neuze e kinnige Abboell din kemer ur banne hag hep gortoz pelloc'h e rede betek al lab e penn al liorz ; alese e tegase ur voutailh vezeglen hag en ur wilc'hat ouzhin e tisklerie "Kemerit un tañva anezhañ : eus ar c'hentañ eo!" Hag en ur sevel e werenn e ouzhpenn : "D'hor yec'hed ha d'an amzervezh kaer : ar c'hiz kozh, ar c'hiz wirion, setu va ger-stur, keneil !" Hag a-drez-kil e lonkemp hor banne. C'hwek tre e oa an died-se, Morgan, ha disoñj kaer e c'hoar-veze ganin evañ meur a werennad lerc'h-ouzh-lerc'h, va unan e gwironez, rak egiz un ostiz mat ha ma oa ne vanke ket Abboell

da gargañ va gwerenn a-boan goulllo hag a-benn bezañ seven e lipen anezhi war an-taol. Abarzh pell, kaer eo gouzout, e oa tommet mat d'am penn : mezv e oan hogen evurus ; ne ouien mui em boa kollet va brientoù Enezad evit an avel hag ur vacuez na gare ket ac'hanon.

Distreiñ a raen d'ar gêr en ur drabidellat. Gwell a se ne oa ket pell ti Abboell diouzh va hini. War-dro dek eur noz e erruen d'ar gêr, an hik ganin, diskramailh, fuilhet va blev, kignet a-wechoù va daoulin ha va zal goude bezañ kouezhet war an hent. Prennet e oa an nor d'ar c'houlz-se. Epad pell e chomen da skeiñ ouzh an nor hag ar stala-fioù en ur c'houlenn digor. D'ober goap e tiskanen gant va mouezh vezvier raouliet ur c'hantik d'an "Itron Varia" am boa desket gant ar beleg kozh a roe kentelioù katekiz din araoek va eured. A-benn ar fin e kinnigen mont d'ober reuz e ti an amezelon. Neuze e tiskanen Maria war lost hec'h hivizh da zibrennañ an nor. Ha me, diouzh ma troe va imor, a stage da zifronkal pe da gunujañ anezhi. Pa vezen krog da huerniñ outi avat e tislohen a bep seurt viltañsoù. Ober a raen ur c'hast anezhi ; tamall a raen dezhi bezañ ruilhet he c'horf gant Lansoc'h gwechall ha kaout bremañ c'hoant d'ober kemendall gant Tivizio. Garmañ a raen, trelatet mik: "Kerzh 'ta d'en em frotañ outañ, ma planto dit ur bugel ebarzh da gof..." Hag a-greiz-holl e tirollen da leivañ. Maria a selle ouzhin yen / ha difiñv evel un delwenn, liv an heug en he c'herc'henn. A-benn ur pennad en em denne kuit sioul ha kraouiañ a rae dor hor c'hambur war he lerc'h. Klevout a raen anezhi o ouelañ d'he zro. Me a yae tre er sal-debriñ ; en em deurel a raen war ar pallenn-leur hag eno e kousken, e-kreiz va c'hwedadenp, evel un hoc'h.

Ha padal, Morgan, daoust pegen diaes bennak e vezo deoc'h krediñ, karout a raen Maria, n'oan ket evit tremen hepti. C'hoarvezout a rae ganin alies kejout gant merc'hed all ; da lod e oan deuet mat end-anat ; koulskoude ne vezen trivliet nepred ouzh o gwelout ; hini ebet anezho ne oa evit broudañ e don va askre an trid a ziwane ennon kerkent ha ma prize Maria gwennc'hoarzhin ouzhin. An dic'hoanag hepken am luske da lousañ ar vammenn a nac'he terriñ va sec'hed.

~~~~~

P e n n a d 24

R o z a b e r

Evel hon e padas an traoù betek miz Eost. Neuze e voe ehan-skol ha mont a ris gant Maria d'ober un droiad betek Kerneost. Ne welen ket mui Tivizio ha n'em boa ket mui

tro da vont da lonkañ gant hemañ. Ar vuhez war ar maez a reas vad din ivez. Va c'hempouez am boa adkavet hogozik pa zistrois da Loranon. War-dro ar mare-se e krogas prosez renerion labouradegoù Laniltud. An dra-se ivez a gemmas red va menozioù. Da gentañ em boe tro neuze da adwelout Lansoc'h ha, souezhusat tra, steuziañ a reas va gwarizi pa gavis an den e unan elec'h an tasmant en doa bevet ganin epad mizvezhioù. E vignoniezh evidon a oa ken splann, e eeunded ken anat ma rankjen bezañ bet dall ha foll evit o nac'hañ.

Kalz reuz a oa savet e kêr da gefiver ar prosez emañ o paouez menegiñ hag a atizas gred politikel Ledeneziz, darn o vont a-du gant an damallidi - war o meno ne oa ket tu d'o barn hep divrudañ ur c'henderead a dud he doa al Ledenez ezhomm bras anezhañ en abeg d'o barregezh ha d'o gouiziegezh - darn all avat, evel Lansoc'h e unan, o tiogeliñ n'oad ket dres evit lezel ur rumm a gargidi pegen akuit ha diziouerus bennak e ve da gemer ur galloud hag ul levezon dreist d'al lezennou anez e aotren da c'hoari a nevez er vro gwall-roll an dirberc'henned a gentaoù dindan ar gouarnerezh kozh. "Ar re-se," a lavare din Lansoc'h, a zeue alies awalc'h du-mañ d'ar mare-se (test pennañ ar prosez e oa), "a vez bepred o c'houlenn frankiz en o labour a-hervez, war zigarez ez int arbenigourion ha n'anavezomp-ni netra en o micher hogen o mad o deus graet eus ar frankiz-se end-eeun evit sevel ur stad e-kreiz ar stad, o nac'hañ beli ar stad e unan, oc'h adsevel ar sklavelezh e skeud stourm ouzh ar ouezidi. An dalc'h eo gouzout piv a vo mestr al Ledeneziz, pe ar re a zo gouest da empennañ ur sevenadur nevez ha da gempenn an diazezoù anezhañ pe ar re n'int a-benn ar fin nemet kalvezourion, n'o deus ken dremmwel nemet hini strizh tre o galvedigezh hag a zleje bezañ chomet e servij ar re o deus sammet warno bleniañ ar vro war-du ar gevredigezh peurlvat a zo gortozet gant an holl." Ha pa venegen arguzennou Abboell a-enep d'ar gouarnerezh nevez e oa awalc'h dezhañ hejañ e ziskoaz. "Abboell," emezañ, "a zo un den digalon. Kaset en deus e ziskibion war-raok ha sachet warno trubuilhoù; eñ avat a zo chomet er goudor ha paz eo bet graet prosez Konomor, da skouer, n'eo ket bet gouest zoken d'en em ziskouez." Goude-se eveljust n'em boa nemet tevel d'ober. "Troidellek eo anIstor," alavare Lansoc'h "hogen ne c'hell ket mont war-gil."

Echiñ a reas ar prosez e deroù miz Gwengolo gant ur varnedigezh didaer awalc'h. Dizornet e oa ar renerion eus o c'harg hogen n'o devoa ahend-all tell-kastiz ebet da baeañ. Hep dale e kavjont fird ebarzh embregerezhioù all gant o c'henvreudeur.

Betek fin ar bloaz em boa kendalc'het da labourat er Skol-veur hep trubuilh nevez ebet. Da vare ar goudezhioù avat em boa ranket paouez gant va c'hentelioù. Abae an hañv moarvat e oa aet an traoù war wellaat er gêr -



hogen, hep dale e oan bet gwas-
ket gant nec'hamantou all a bep
seurt. Abaoe ma oan pareet diouzh
si fall ar vezventi e oa aet va
yec'hed war fallaat. Ar velkoni
a veze krog ennon alies. Faezh
e oan ivez gant ar gweladennou
a veze graet din adarre gant tad
Maria ha Lansoc'h. Hemañ dreist-
holl a veze o terriñ va fenn gant
"kudenn an Enezenn" egiz ma lava-
re ; ha ne wele nemet un diskoulm
da houmañ : distrujañ an Enezenn.
Eñ an hini eo a empennas ar rak-
tres a voe kaset da benn a c'houl-
ter da dec'hout diouzh al Ledenez

ebarzh unan eus an aerdre hidelloù a veze daveet din gant
Omeur a-benn aotren din distreiñ d'am bro ; ur wech erru er
Rannêr em boa da zigeneren emgrefadurioù ar rannenezenn-se
ha, dre se, tamm ha tamm, re ar C'hreñvlec'h hag ar Geoded.
D'ar mare-se e seblante ar raktres-se din bezañ diblustrak
hag arvarus ha dalc'het e oan a-hend-all gant va morc'hedoù ;
nac'hañ a raen eta sentiñ ouzh kemennadurioù Lansoc'h. Trega-
set e oan evelato gant an holl zifraoù a oa graet war va
zro a-benn va c'hendrec'hiñ. Kement-se marteze a voe kiriek
d'ar barrad skuizhder am sammas adarre, evel m'em eus lava-
ret deoc'h, e deroù ar bloaz war-lerc'h. Gouennet em boa
neuze un ehan labour hag a oa bet aotreet din. Va zad kaer
a alias din distreiñ da Gerneost, na petra 'ta! Hogen n'em
boa c'hoant ebet da dremen ar goañvezh eno. Neuze e venegas
Lansoc'h e c'hellfemp me ha Maria mont da chom un nebeut
sizhonioù e ti mignoned dezhañ, en ur gêrig eus an hanternoz,
war ribl ar mor. Salv ma n'em bije ket e seloquet adarre,
Morgan, rak ar veaj-se a voe pennabeg da zrouziwezh an Ene-
zenn, egiz ma welot.

En em laket hor boa en hent eta e-kreiz miz
Meurzh. Krog e oa ar glasvezh da barañ el liorzhoù ha war
ar maezioù. Pignet e oamp eharzh kirri-skañv an daremprederezh
a-berzh-stad, stlejet gant chas, evel ma ouzoc'h. Gonczet
mat e oa ar rannvro a dreuzjomp neuze o skeiñ war-du ar
gwalarn ; stank e oa ar c'hendrevioù enni. A bell zo ne oa
mui gouezidi dre eno, a zisklerias din Maria, ha rak-se e
c'hellemp ober hent hep bezañ ambrouget gant soudarded. Da
noz hor boa kavet herberc'h en un ti-post a-berzh-stad.
D'ar mintin abred antronoz e oamp loc'het goude bezañ ster-
niet chas nevez ouzh hor c'harr. E tro an abardaez e tiraez-
jomp Rozaber, pal hon hentadenn.

Ur porzh bras awalc'h eo Rozaber, kelc'hiet gant
torgennoù ha tost d'un aber, evel ma tiskouez e anv. Listri

bras a vez konstruet eno, darn anezho gouestlet d'an aocherezh
endro d'al Ledenez. Bez e oa ivez un niver vras a vigi pes-
keta a oa eoriet er porzh en devezh-se rak sul a oa anezhi
pa zegouezhjomp. Ne oa den ebet war ar straed kennebeut,
koulz lavaret ; an darn-vuiañ eus kêriz a oa en iliz d'an
ampoent evit an oferenñ noz. Maria a fellas dezhi mont
hag en dro-mañ, tuet mat ha ma oan, hec'h ambrougis en ur
chapel vihan, tostik d'ur beg-douar, er-maez eus mogerioù
-kêr.

War-dro seizh eur hanter e oa ha serret an noz
abaoe ur pennad amzer pa skojoomp ouzh dor mignoned Lansoc'h.
Degemennet e oa bet dezho hon donedigezh hag un degemer
hegarat a rejont deomp. Boued ha bod a zleemp kavout en o
zi epad ur mizvezh bennak. Gant gred e klevjont ar c'heleier
a rojomp dezho a-zivout Lansoc'h ha Loronaniz dre vras,
peurgetket diwar-benn ar prosez.

Ur pred lipous a oa bet aozet deomp. Goude koan
avat ne chomjomp ket pell a-gevret rak skuizh divi e oamp
gant hor redadenn ha digarez a c'houlennjomp digant hon os-
tizion da vont da gousket.

Ar seitekvet a viz Meurzh a oa anezhi antronoz,
gouel-berzh e Rozaber, gouel kêr hag ar bastell-vro a zo
stag outi. Setu, berr-ha-berr, Morgan, e sigur peseurt dar-
voud e voe ensavet ar gouel-mañ. Kant-pemont vloaz arak e
oa bet gronnet ha taget kêr gant daou-vil bennak a ouezidi
armet deuet er-maez eus ar c'hoadeier a zalc'he d'ar c'houlz-
se an hanter eus ar rannvro-mañ. Evel ma n'o doa ket tizhet
diskar dorjoù kêr na krapat dreist d'ar mogerioù o doa di-
lezet ar seziz a-benn eizh deiz bennak ha kroget o doa d'en
em dennañ d'o c'hoadeier goude bezañ preizhataet ar c'heria-
dennoù hag ar bourc'hioù a-skign en ardremezioù. Armead Le-
deneziz avat he doa heuliet ar vandennad-se betek ur saonenn
strizh war lez an argoured, seizh lev e mervent Rozaber. Ar
ouezidi - eus ar rumm "Fraspotcheñ" e oant - a oa bet kelc-
hiet ha serret eno, lazhadeg betek an hini diwezhañ. Ne-
pred a-c'houdevezh n'o doa gallet ar C'hallaoued kemer nerzh
endro evel a-ziagent ; tamm ha tamm e oant bet damesaet ha
kaset da get evel poblad distag en ur ober hanter-kant vloaz
bennak. er rannvro-se.

Brav e oa an amzer d'al lun-se ; n'edo ket pell
ti Salaun - anv hor mignon e oa - diouzh an aod. Goude merenn
eta e oamp aet d'ober un tammig tro war an traezh. Lugerniñ
a rae an heol en oabl digatar ha klouar awalc'h e veze an am-
zer pa ne c'hwezhe ket an avel rip eus ar biz. Glas mouk,
hogozik limestra e oa ar mor ; lufrennaouiñ a rae er c'hreis-
teiz ; en hanternoz, er-maez un tammig, endro d'ar c'herreg,
e ruihe en ur spoumañ ar gwagennoù kribennet a eon ; skreved
a nijelle en diabell, damhevel ouzh deliennoù gwenn sammet
gant an avel ; tost d'un enezennig e spluje mervet du e don
an tonnoù.

Seder e oan d'ar c'houlz-se, Morgan. Divizout a raen dibreder gant Maria hag hor mignoned. C'hoarzhin a raemp evit disterchoù, evel bugale ; avizet awalc'h e oa hon ostizion evit chom hep ober goulnenn amzere ebet ouzh va fried diwar-benn he stad. Maria, a-hend-all, a oa dinec'h ha dichastre : mignoned Lansoc'h hag int dimezet gwerso n'o devoa kennebeut bugel ebet ha skañvoc'h a se e oa dezhi he dic'hañs. E gwirionez hor boa lezet adreñv deomp ar melreoù a oa ouzh hon heskinañ ha Lansoc'h a drugarekaen em c'hreiz a vezañ pourchaset deomp un dro da ankouaat evit ur pred broud an enkreuz her c'hriage peurvuañ e Loranon.

Tra ma fistilhe ar merc'hed etrezo e oan aet un tammig en arak gant an ozhac'h. Kuitaet hor boa an tevenn hag hedañ a raemp neuze ur c'harront a gase war-du an douarou ; a ziwar wel en em astenne ar parker bihan hag ar pradeier enk dispartiet gant kleuzioù ha mogerioù meinizel. Amañ hag a-hont e oa strewet tiez ar gouerion e-kreiz ar maezioù stoul.

- Perak n'eo ket bodet an tiez amañ evel e reter al Ledenez peurvuañ ? " a c'houlennis.
 - N'eus ket mui a ouezidi, " a zisklerias va ostiz. "Rak-se o deus klasket ar gouerion tostaat ouzh o farkoù."

Degouezhet e oamp nes awalc'h d'ur vereuri a-hend-all. Damwelout a raen, adreñv ur stignad gwez, ur savadur hir, izel awalc'h - ne oa solieradur ebet -, pre- nester ledan dezhañ, e greunvaen ar mogerioù, toet gant plouz avat. Gant an doenn blouz-se e oan souezhet ha p'em boe goulnennet ouzh Salaun perak ne raed ket er rannvro-mañ gant sklent evel e Loranon e tisplegas din e oa re bell ar menleuzioù sklent evit gellout dezougen aes mein-glas betek rannbarzh Rozaber, daoust ma oad krog da emporzhiañ anezho dre vor abaoe un nebeut bloavezhioù. "Kement-se," a ouzhpennas, "n'en deus ket miret ouzhimp a gas da benn savadurioù brav ha start, koulz ha re ar gêrbenn. Gwellet hoc'h eus ilizoù Rozaber dec'h, moarvat. Tiadurioù all a c'hellfen diskouez deoc'h avat... Dalit," emezañ o treiñ war e giz da sellout ha dont a ra ar merc'hed da heul," e Brewenn ez eus bet savet un ti-kêr nevez dek vloaz bennak a zo, war bilerou greunvaen uhel..."

Ar merc'hed o doa tapet ac'hanomp a-benn neuze.
 - Eus Petra edoc'h o komz ? " a c'houlennas Maria.
 Graet he doa ur gurunenn gant barroù banal ha lakaet anezhi war benn he mignonez d'ober fent. "Setu ez oc'h fichet evel rouanez ar goueziadezed," emezi.

- Edomp o komz eus ti-kêr Brewenn, karedig," eme Salaun d'e wreg. "Me ' lavare e talvez e ar boan mont d'her gweladenn. Daoust ha ne c'hellfemp ket ober un dro du-se warc'hoazh d'enderv hag hen diskouez d'hon ostizion ? Padout a ra ar gouelioù betek dimerc'her ha da veurzh, bep

bloaz e vez graet eno ur gorolladeg vras ma tered di holl yaouankizoù ar pastell-vro. Perak ned afemp-ni ivez o Pell- zo n'on ket bet eno. Marteze e vefe laouen hon ostizion oc'h ambroug ac'hanomp.

- Moarvat," a c'harmas Maria. "Didu a c'hellomp kemer evit ur wech, 'keta, karedig," a c'houlennas prim, he daoulagad o luc'hañ gant al levnez.

Asantiñ a ris, Morgan, eveljust. Perak em befe nac'het ? Evel-se avat e voe siellet va zonkadur.

~~~~~

P e n n a d 25

U r m u n t r

Da noz e oamp chomet er gêr diwezhat awalc'h da ober marvailhoù ; Anna, gwreg Salaun, hon ostiz, a ganas un nebeut gwerzioù kozh eus ar c'horn-bro ha war-dro dek eur hanter ez ejomp da gousket.

Antronoz vintin e vanas Maria hag he mignonez er gêr. Me a yeas gant Salaun da weladenniñ un nebeut ken- drevioù tro-dro da gêr. Darn anezho a oa oberiant tre, an hini a rae war-dro diuzouennerezh ar moc'h hag ar saout, da skouer. Dedennet e voe va evezh ivez gant ur greantti boued- mir : ober a raed gant pesked disec'h dedailet gant martolod- ded ar c'horn-bro evit prientiñ un doare bleud a veze kuzumet gant ar boblañs tro-aze. Ul labouradeg vihan a farde horola- joù a weladennjomp ivez.

Merenn a voe servijet da un eur. Hor mignoned n'o devoa matezh ebet, galc'hmat evit ar memes abeg : ne oa ken a ouezidi er rannvro. O vezañ ma oant chomet o unan penn, hep bugel ebet, ne oant ket diaezet gant an dra-se. Neuze, pa voe bet distallet an daol ha diac'hubet ar sal vras e kinni- gas gwreg hor mignon adarre ober un tammig sonerezh. Mont a reas da gerc'hat he zeleñ. En dro-mañ e kanas ur werz-veur a oa bet savet er c'hantved tremenet gant ur barzh, Keran e anv, hag a zezrevelle kurioù al labourerion-douar o doa dis- karet koadeg-veur an hanternoz en ur argas ar ouezidi hag o doa digoret tachennoù divent d'ar c'honideion.

Padout a reas ar gouel e-doug an deiz hag en endervezh ez ejomp da arvestiñ ouzh ar c'hoariadegoù azet gant poellgor-gêr evit diduiñ annezourion ar c'horn-bro da geñver an devezh-se. Da gentañ e tibunas bugale ar skolioù ; dic'hizet e oant evel en amzer an difraosterion ha dougen a raent war o skoaz bouc'hili bihan heñvel ouzh re ar wastadourion -hont o devoa trevadennet ar rannvro er c'hantvedoù tremenet.

En em waskañ a rae an dud war riblennoù ar straedoù da sellout ouzh o bugale o tibunañ en ur ganañ.

Pa voe echu an ambrougadeg e tiskennjomp betek an aod. Eno war un draezhenn hir, e oa redadegoù kirri dre lien - sakañ a raent tizh da sabatuiñ war ar jibl kompez hag int lusket nerzhus gant avel ar gwalarn, Morgan, - neudadegoù ha bageadegoù a voe ivez daoust d'an amzer c'houyenn. Abardeziñ a rae pa zistrojomp da di hor mignoned.

Faezh awalc'h e oan ha chomet e vefen awalc'h er gêr. Maria avat n'he doa ket bet he gwalc'h a zeverrañsoù, kredapl eo, rak gwaskañ a reas warnon evit m'hec'h amheuilhfen betek Brewenn. Daoust d'ar c'hinnig a oa bet graet deomp gant hon ostiz ne oan ket tuet tre da vont da vale en noz-se. Kement e talc'has warnon avat ma plégis d'he froudenñ a-benn ar fin. Sevel a rejomp ebarzh daou garr a feurmjomp en arsavva an daremprederezh ha setu ni aet araok. An hent a hede an tevenn da gentañ ; ul lev hanter bennak war-lerc'h avat e kemerjomp un hent all strishoc'h a gese da Vrewn dre an douarou. Serret e oa an noz pa zegouezhjomp da Vrewn.

Kaer awalc'h e oa ar savadur, petra bennak ma ne c'hallis her merzout nemet dindan sklerijenn al loar. An diabarzh avat, dreist-holl ar sal-emvod bras elec'h e teuajomp tre, a oa bet kinklet a zoare ; goulaouennoù koar a oa bet enaouet hag a daole o sklaerder melen penn-da-benn ar sal. Dija e oa krog ar yaouankizoù da goroll ; un nebeut tud war an oad a oa azezet war vankoù etal an nor.

Pa baouezas ar c'horoll kentañ e voemp gronnet kerkent gant ur maread paotred ha merc'hed yaouank a c'houlennas ouzhimp a beban e teuemp. Plijet bras e voent o c'houlzout e oamp erruet eus Loronan un nebeut devezhioù kent. Va aters a rejont neuze dinec'h ha difoeltre awalc'h a-zivout ar pezh a c'hoarveze du-hont, evel dres diwar-benn ar prosez diwezhañ. Kalz anezho n'o doa ket bet tro da vont betek ar gêrbenn. Evelato o doa klevet komz ivez eus va donedigezh ha pa voe bet diskuliet dezho piv e oan e trojont o selloù ranell war va zu ha stagañ a rejont d'am goulenñata a heligentañ. Eus va gwellañ e respontis dezho ha me abafet awalc'h o santout an dud oc'h en em waskañ endro din. Gwell a se e adkrogas ar c'horoll adarre. N'anavezen ket dañsoù al Ledenez ha kavout a ris gwell chom va unan e-kichen ar re gozh, nes d'al laz seniñ - ur guchedenn paotred yaouank a sone un doare fleüt hir e metal - ha me enoeet awalc'h, kollet etouez estrenion.

An amzer a dremenas. Stankoc'h-stankañ e oa deuet an engroez da vezañ. Maria ha va ostizion a oa steuziet e lanvezhad birvidik an dañserion a droiella endro din, hep teurel an disterañ perzh ouzhin. D'ar mare-se eo e c'hoarvezas un dra iskis ganin, Morgan ; ankeniet hag elfek e teuis da vezañ. Abaoe un eur hanter ne oa ket deuet Maria war va zro. Aon am boe en un taol da vezañ kollet anezhi. Va faltazi a grogas da virviñ hep ma c'helljen herzel outi ; va dilezet he doa ;

aet e oa gant un all. Sevel a reas endro d'am spered ar c'houn eus hec'h imor kintus epad ar mizioù araok. Kerse am boa roet dezhi ; n'he doa ket bet bugale diganin ; n'oan ket an hini a gare ; dre zesped e oa deuet davedon, peogwir n'he doa ket gallet kaout Lansoc'h, an hini nemetañ a gare a-greiz he c'halon moarvat. Ha soñjal a raen adarre ne oan ket eus he gouenn. N'eus forzh pehini eus ar baotred a oa eno a c'helle reiñ he gwalc'h dezhi kalz gwell eget a rajen. Ar menozioù-se, ar rambreoù-se am boa maget epad miz-vezhioù, Morgan ; krediñ a rae din em boa ankouaet anezho hag a-daol-trumm e aloubent va spered endro hep ma c'helljen o dizarbenn.

En diwezh ne d'hellis ken padout. Dav e oa din mont da glask Maria, kas anezhi pell alese, d'ar gêr endro. Foll e oan bet o kuitaat Loronan. Ha me d'ober va zreuz dre ar gorollerion en ur lakaat kroz da sevel endro din. Van ne raen avat. Erfin e verzis Maria. Hogen ne zañse ket mui. Edo azezet war ur sakañ, e-harz ar voger hag hi o tivizout gant ur paotr a oa en e sav en he c'hichen. Sevel a rae he dremm war-du he c'havandad ha gant ernez, Morgan, e verzis liv al levenez en he c'herc'henn ; gant dic'hoanag ivez, rak an hini e oa oc'h ober marvailh gantañ a oa ur gwaz kaer, ur melegan berr ha rodellek e vlev, nerzhus e enebrez, moan ha kigenet kreñv ; daoulagad gell ha flour a oa en e benn ; brasoc'h egedon e oa a-hend-all. Kounañ a ris ar paotr a oa o klask toullañ kaoz gant Maria e porzh ar Skol-veur p'edon o paouez meizañ e oan e karantez anezhi.

Ep ad ur pennad e chomis en entremar, seizet gant ar gounnar hag ar gasoni. Abalamour d'ar c'hast-se eta em boa dioueret brientoù an Enezenn, aberzhet va feurbadelezh hag e oan deuet da vezañ unan eus an astud-se, an ampistu-se a oa da vezañ distrujet hep truez ebet. Bremañ e tisprize ac'hanon ha c'hoarzhin a rae goap ouzhin.

Damguzhet e oan adreñv ur piler ha spial a raen an daou-se, antellet holl va c'horf, tost da granañ, evel ma c'hell bezañ un hemolc'her war api. N'ouzon ket pegeit e vanis da c'headal. Bepred edon eno pa savas Maria diwar ar sakañ ; un dastum a reas d'he sae da vale aesoc'h hag hi neuze da skeiñ, lijer, war-du an nor, ambrouget gant egile ; me a yeas war o seulioù. Erru dirak an nor e chomas Maria a-sav, en ur ober ur sell tro-dro, en amzivin, egiz pa vije bet war glask unan bennak. Goude bezañ termet epad ur pred berr e teuas er-maez war ar straed, heuliet bepred gant an den yaouank.

N'ouzon ket petra a droas ennon, Morgan. Di-boellet e oan hep mar ebet. En em strinkañ a ris war-lerc'h Maria. Tarzhet e oa ennon ar youl da lazhañ. Tapout a ris krog en ur geunedenñ en em gave war al leur e-harz va zreid.

Al loar-gann a sklaerie ar blasenn digenvez.

Daou skeud a zamwelen dirazon. Daoust ha tost e oant an eil ouzh egile ne c'hellen ket diverzout. A ziadreñv, sioul sibouron, evel ur c'hazh, e oan denesaet ouzh an den yaou-ank ; a dro jouiz em boa darc'havet un taol war e gilpenn. Ur c'harmadenn vras a glevis : Maria, braouac'h et, an hini a yude. Ur c'horf a oa kouezhet. Neuze e oan tec'het kuit hep sellout war va lerc'h.

\*\*\*\*\*

Pennad 26

Diviz gant ar wrac'h

Redek a raen evel ul loen e breskenn. Difara-goellet e oan a-hed pantennoù serzh an tarroz ma oa savet Brewenn el lein anezhañ. Diraezet em boa un aber ha staget em boa da vale a-hed ar ribl kleiz anezhañ etrezek ar mor. En ur c'hoad pin en em gavis hep dale ; kenderc'hel a ris da gerzhout etre kefioù ar gwez. Divadaouet mat e oan a-benn neuze ; a-greiz-holl e santis e oa yen an amzer ; boudal a rae an avel e bleñchoù ar pin, evel ur vouezh divent. An anken am boa anavezet ergentaou, pa oan nevez erru el Ledenez, a grogas da grignat va c'halon adarre. Ur wech c'hoazh e oan al loen handeet a vije paket abarzh pell.

Epad div eur e kerzhis war-raok hep ehanaf ; neuze e tizhis aod ar mor. Ur goudor klet a gavis en un oufig disavel. Dre an deñvalijenn e ragache an houlennoù o ruilhal war an traezh. Krenet em boa gant ar riv: gourvezet em boa, divi, o klask an diskuizh d'am izili brevet hogen abarzh pell e oa bet intret va dilhad gant glebor ar jibl. Sevel a ris em sav ha krapat betek lein an tornaod. A-dreuz sklerijenn vrizh ar gouloù-deiz e tamwelis begoù-douar du, heñvel ouzh euzhviled divent, o trebarzhiañ an dourseier. E neb lec'h ne bare na ti nag annez.

Ur barr dic'hoanag am sammas a-daol-trumm. Dirollañ a ris da ouelañ evel ur bugel ; difronkal a ris ken e oa hejet va c'horf gant ar sklañkadennoù. Kollet em boa Maria da vat, an hini nemeti a garen, an hini nemeti a c'helle reiñ din peoc'h hag eurvad, an hini nemeti marteze he doa bet evidon un tamm karantez bennak. Bremañ ma oan divezvet e oa deuet an dra-se anat din en un taol. Daoust ha n'em boa ket huñvreet ? Lazhet em boa evit netra, diwar ur weledigezh, egiz pa vijen bet e dalc'h un droukspered epad ur par berr. Evel un den dall em boa en em strinket en islonk a oa digor dindan va zreid.

P'em boe paouezet a leñvañ en em gavis gwelloc'h. Neuze em boe naon. Savet e oa an heol a-benn neuze. Izel ha louet e oa an oabl karget a goabrennoù pouanner trema ar reter. Pell en hanternoz e c'houwelen pennoù-tir goloet gant koadoù.

Er c'hornog en em astenne ar mor, louet ha gwer, oc'h eonen-niñ endro d'ar c'herreg ha d'ar bazennoù. Re serzh e oa an tornaodoù evit ma kredfen hedañ anezho. Skeiñ a ris war-du an douaroù dre greiz al lanneier. Ur c'hardlev pelloc'h, e don ur stankenn, war ribl ur wazh-dour, e tizolois ur foukenn ; nepell alese e oa ur vuoc'h o peuriñ en ur prad. Sempl en em gaven dija gant an disvoued hag ar fromadennoù. Goude bezañ termet epad ur pennad en em grennis da c'houlenn digor. Ur wrac'h kozh bihan ha krommet en em ziskouezas e toull an nor, gwisket e du, gant ur skerb ruz endro d'he fenn. Rouzet e oa he dremm : kaer e oa an tresoù moan ; un damskleur seder a skede e don he daoulagad glas dislivet gant an oad. Dispont e selle ouzhin, egiz pa ne vije ket bet saouzanet an disterañ gant va gweladenn dic'hortoz.

- Petra hoc'h eus ezhomm ? " a c'houlennas.  
- Un tamm boued, mar plij ganec'h," eme.  
- Deuit tre hag azezit," a lavaras o tiskouez din ur skabell etal an oaled.

Sentiñ a ris outi. Ar vacuez a zegasas un nebeut krampouezh hag ur skudellad laezh trenk. Placuliañ a ris va fred. P'em boe evet ur banne dour ouzhpenn e atersis va ostizez.

- Hoc'h unan emaoc'h o vevañ amañ ?  
- Ya," emezi.  
- N'oc'h ket bet atav emic'hañs ?  
- N'on ket bet. Gwechall e oa va gwaz o vevañ ganin.

- Pellzo eo marv ? " a c'houlennis.  
- Penzek vloaz bennak a zo ez eo marv," a respontas ar wrac'h. "Pesketour e oa. E vag a beñseas epad ar goañv. Ur barr-amzer, du-hont, en tu all da Rozaber," a zisklerias en ur ober ur jostr war-du ar c'hornog.  
- Hag ho pugale ?  
An hini gozh a roas peoc'h e-doug ur frapad.  
- Daou vab am boa," emezi. "Tri bloaz war-lerc'h ma voe beuzet va gwaz int bet sammet gant an droukskevent... Alo!" a gendalc'has, "na chomit ket aze ; tostait ouzh an tan da dommañ d'ho korf, mar karit. Riellat oc'h bet war an aod d'ar c'houlz-mañ bloaz emic'hañs."

Mont a ris em c'hoazez etal an oaled. Ar vacuez kozh a daolas briñsennoù ha keunaud e-kreiz an tan hag a reas ur c'horadenn. Gant dud e stousis war-du ar flammoù da dommañ d'am izili.

- Marteze hoc'h eus naon c'hoazh ? " a c'houlenne ar wrac'h. "En ti-mañ ne vez ket graet tinell vat alies, siwazh."

- Trawalc'h am eus debret evel-se," a respontis. "Trugarez. D'ober petra a-hend-all ?..."  
Ar gerioù diwezhañ-mañ am boa distaget a vouezh izel, evidon va unan. Deuet e oa din ar soñj ne oa ket mui

dav din bevañ. Treiñ a ris ouzh ar wrac'h.  
 - Gwall gozh oc'h erru, maouez, " emezon.  
 "Penaos hoc'h eus gallet bevañ war-lerc'h ken kriz kañvou?  
 - Kaer eo ar bed-mañ," emezi. "Ne skuizhan  
 ket o sellout outañ. Ha berr eo an termen a ziogelo din an  
 teñzorioù a gollan bamdez."  
 Un analadenn a ris.  
 - N'hoc'h eus ket aon rak an Ankoù eta ?  
 Strap an arc'h serret a glevis. An hini gozh a oa  
 o lakaat ur skudell war an daol.  
 - Bet em eus," emezi. Diskenn a reas din ur  
 banne laezh fresk.  
 - Evit ur banne all ; an dra-se a ray vad deoc'h."  
 Deuet e oa ar vaouez d'azezañ e-skoaz din.  
 - Poanius eo pep ganedigezh," emezi. "An tre-  
 men a ra aon din. Hogen perak e rit hevelep goulenn, va den?  
 - Lazhet em eus," a eilgeriis, "ha bremañ e  
 fell din en em lazhañ."  
 Ar vaouez a oa chomet dilavar epad ur pennad.  
 - Hag e soñj deoc'h e kavot ar peoc'h er marv?"  
 a zic'hwezhaz en diwezh.  
 Klask a ris he sell hogen en amc'houloù ne  
 ziverzen nemet ur skeud.  
 - Ya," emeve, "Skuizh on."  
 Santout a raen e pare warnon selloù disgwel  
 an hini gozh.  
 - En an' Doue," emezi, "n'en em zistrujit ket.  
 N'en em daolit ket evel-se etre daouarn an Hini hoc'h eus  
 nac'het a-hed ho puhez."  
 Skrignal a ris.  
 - N'eus Doue ebet," emeve, "a-drugarez Doue!  
 An Netra a zo hor chañs diwezhañ. Ya, ar c'houk."  
 Tevel a reas ar vaouez. mouslavarout.  
 - Netra n'eo deomp, mab, nag hor buhez nag  
 hor marv. Er bed-mañ hepken e c'hellit serriñ ho taoulagad  
 ha disoñjal a-wechoù."  
 Hejañ a ris va diskoaz ; hegaset e oan ; an  
 dic'hoanag a oa o sammañ va spered adarre. Evit ar re-se ne  
 oa ar marv nemet un traped ouzhpenn.  
 Mouezh ar wrac'h a oa savet a nevez.  
 - Gwell e ve deoc'h en em zaskoriñ, mab. Di-  
 skiant oc'h bet. Didamallet e vlot."  
 Youc'hal a ris.  
 - Degemer barn an astud-se a zisprizan ? Kentoc'h  
 mervel eget hevelep dismegañs."  
 Ar vaouez a chome difiñv atav.  
 - Un estrañjour ez oc'h, va den. Ho pouezmouezh  
 n'eo ket ac'halen.  
 - Bez ez on," emeve. "N'on ket eus ho kouenn.  
 Biken ne vin.  
 - Ya," emezi. "Me 'wel mat."

Reiñ a rejomp peoc'h hon daou. Ar vaouez a  
 savas en he sav.  
 - It da gousket, mab. Aesoc'h e vo deoc'h  
 ober ho soñj pa vlot diskuizh."

~~~~~

Pennad 27

Enti - bac'h

Kousket em boa war ur c'holl'hedad plouz,
 etal an oaled, betek kreisteiz tost-da-vat. Neuze em boa
 dihunet. Kentizh e oa bet karget va spered a zoan gant
 koun an drougeur a oa koezhet warnon.
 - Ret eo din mont kuit bremañ," emeve d'ar
 vaouez.
 Astenn a reas din un tamm bara segal gant
 keus.
 - Doue d'ho tiwallo," emezi. "N'en em salvot
 ket hoc'h unan."
 Pellaat a ris diwar herr. Gouzout a ouien e
 oan va unan penn ha ne c'hellen kontañ nemet warnon va
 unan. Steuziet e oa ar barr-digalon en doa va gwasket en
 derc'hent. Dezevout a raen e c'hellfen un deiz marteze
 tizhout ar goadeg kreiz en tu all da Laniltud hag adkavout
 Konomor en diwezh. Goude e vije gwelet. Dreistvevañ a ran-
 ken evit ar poent, hepmuiken. Diot e kavis an diviz edon o
 paouez kaout gant ar wrac'h ha c'hoarzhin a ris goap ouzhin
 va unan.
 Ober a ris va menoz treuziñ gourenez Rozaber
 etrezek ar mervent. E-doug an deiz e kerzhis hep ehanañ, dre
 lanneier ha parkeier, oc'h en em guzhat adreñv ar c'hleuzioù
 bewech ma teue unan bennak war wel. War-dro an abarbaez e
 pakis an aod adarre, e kreisteiz Rozaber, nepell diouzh an
 hent hor boa heuliet Maria ha me un nebeut devezhioù kent.
 Dont a ris war ur c'hro didud ha me d'azezañ war ar grouan
 gros. C'hwezhañ a rae an avel eus ar gwalarn ha gronnet e
 oa an oabl gant ur pallennad koabrennoù du. Garv e oa an
 houlennoù gwer a darzhe hep paouez war an aod-se, kreñn ha
 pounner. En diabell, e-mesk ar gwag o spoumañ, e koulle
 ur vag-dre-lien dister, gant he div ouel ruz. Ar gwel-se
 avat a reas aon din ken ez is da glask repu adrek an erin.
 Pa voe dianadet ar vag en tu all d'ar beg-douar, war-du
 Rozaber, e tistrois war an draezhenn ha stagañ a ris da zas-
 tum bigolos da zebriñ d'am c'hoan. Un darnenn vara segal a
 yeas ganin ivez. Serrnoziñ a rae pa voe echu va fred.
 D'ar mare-se eo e voen harzet, Morgan. A-greiz-
 holl e tregernas harzhadennoù chas nepell diouzhin. Mont a



Iaveza war-lerc'h.

ris kercent em sav ha pignat betek lein an erin. Neuze ez eas bihan va c'halon em c'hreiz: ur vozennad warded, o chupennoù ler ruz mouk euzhus endro d'eo c'hori, a oa o redek war-du ennon, bletiet gant o chas:advevañ a raen va donedigezh el ledenez. Ur vunutenn war-lerc'h e oan harzet hag ereet; rankout a ris bale war va c'hiz betek Rozaber. A-boan erru eno e voen saket ebarzh ur c'harr serret, stlejet gant ejened ha dezouget da Loronan elec'h e tegouezhis pevar

Kraouiet e voen neuze en ti-bac'h am boa merzet oc'h erruout da Loronan. Etre daou wareger e oan betek kaset betek ur sal-ward elec'h e oa bet marilhet va anv war ul levr bras. Daou ziwallor o doa kroget ennon neuze ha va stlapet o doa dizamant ebarzh un doare kav, ur c'hell a zek metrad karrez bennak, gant un darzhell uhel el lein. Noz a oa anezhi d'ar c'houlz-se ha teñval sac'h e oaer c'hell. A-dastorn e klaskis ul lec'h da c'hourvez rak skuizh divi e oan. Ur c'holc'hedad plouz mouest a gavis dindan an darzhell. Warni en em astennis: skuizh marv e oan.

Daoust da se avat ne c'hellen ket kousket. Va daoulagad a chome digor en deñvalijenn ha dirazo e tibune darvoudoù va buhez kent, kej-mesk, hep ere ebet etrezo, hep penn na lost; bep an amzer e pare trumm spezoù mut Maria ha Lansoc'h, goude-se hini an den am boa taget ha lazhet moarvat, bev da sabatuiñ, dilavar bepred avat. An daeroù a zeve va daoulagad neuze, daeroù a gerse hag a zio'hoanag, Morgan, rak morc'hed na keuz ebet n'em boa; hañval e oa ganin em boa sevenet va gwall-daol e-kreiz un huñvre, hep kemer perzh gwirion ebet ennañ. Hemolc'het e oan bet gant un enebour hag a-benn ar fin e oan kouezhet er griped en doa stegnet ouzhin.

Pa darzhas an deiz war-lerc'h un nozvezh diziwezh e verzis e pebezh toull edon. Goudourif a rae ar mogerioù lor; un tammig sklerijenn en em sille dre an darzhell strizh. En ur bez e oan bet stlapet, Morgan, ez ver.

Ne oa fin ebet d'ar mintinvezh. Den ne zouas d'am gweladenniñ. N'em boa ket debret abaoe ouzhpenn un devezh ha krog e oan da zoujañ na vijen lezet da zizeriañ gant an dienez ebarzh va c'hell pa voe digoret trumm un draf e lein an nor war-dro kreisteiz; ur skudellad soubenn hag un tamm bara a voe astennet din. Klask a ris debriñ daoust ma n'em boa ilboud ebet. P'em boe echu va fred ne

ouezis ket mui petra ober. A-benn terriñ an anken a save em c'hreiz e stagis da redek tro-dro d'am c'hell, evel ul loen diskiant. Abarzh pell ne c'hellis mui gouzañv ar di-drouz; ha me da choual ha da ganañ. Bep an amzer e roen peoc'h da glevout ha n'oa ket unan bennak o vale en trepas er-maez eus va c'hell. Hogen dison mik e chome an ti-bac'h. Kredet e vije bet n'oa nemedon ennañ. En un taol e tiwiskis va botez ha kregiñ a ris da skeiñ a bep tu war ar mogerioù gant ar spi e vije respontet din gant prizonidi all. Hogen mut e chomas ar mogerioù. Gwashaat a reas va ezeved.

War-nes sodiñ da vat e oan pa voe divorailhet trumm dor va c'hell d'abardaez. Dont a reas tre un den a lavaras din e oa anezhañ rener an toull-bac'h. Bihan ha kofek awalc'h e oa, gant ur barv du ha daoulagad beskellek hanter serr, gwisket a-hend-all evel soudarded ar vro-se, gant un hobregon ha bodreoù ler. Lezet en doa an nor damzigor war e lerc'h en ur zont tre er c'hell; krediñ a ris e c'helljen achap. Moarvat e komprenas egile va dezo rak diwar goap e lavaras din:

- It, me ho ped, va mignon."

Erru war an trezoù avat e spurmantis un toullad soudarded a oa war-c'hed e penn all an trepas.

- Kemmet hoc'h eus ali, Keralen? " a c'houlenne neuze rener an ti-bac'h, sioul.

Distreiñ a ris ebarzh ar c'hell.

- Me 'wel mat n'on ket evit herzel ouzhoc'h," emezon, c'hwerv. " Daoust ha bez e c'hellfec'h diskleriañ din petra a vo graet ac'hanon? "

Ur c'hoarzhig see'h a zeuas gant va c'hendivizer.

- Re a c'houlenniñ diganin, va mignon. N'eo ket din ho parn, d'ar varnerion end-eeun ne lavarar ket. Dilavar e vanis da gentañ.

- Da besurt kastiz e vin kendaonet, a gav

deoc'h? "

Egile a skrigne bepred.

- Mall bras a zo warnoc'h da c'houzout, 'm eus aon. War-bouez, war-bouez, va mignon, warc'hoazh e vo deiz."

Skleur ur mousc'hoarzh goapaus a oa paret em e zaoulagad damserr a stage ouzhin didruez, o spiañ war va dremm liv an dic'hoanag. Troet em boa kein avat ha sellet em boa ouzh ar vogar. Aet e oa kuit neuze va heskiner.

An devezhoù war-lerc'h e chomis va unan peaz adarre. N'em boa darempred ebet gant den. Da vintin ha da noz hepken e veze degaset boued din dre an draf e lein an nor. Debrif a raen hep ilboud ebet, digalon ha ma oan e vevañ e-kreiz al loustoni, oc'h en em choulenn, enkrezet, petra a c'hoarvezje ganin.

Evit tremen an amzer em boa goulennet levrioù. A-benn ur pennad amzer e oa bet roet din va goulenn hogen

ne oa bet degaset din nemet levrioù kravez, unan a oa e anv "an aviel" en o zouez. D'ar mare m'em boa emezelet en iliz al Ledenez em boa damlennet pennadoù zo eus ar skrid diwezhañ-mañ. Ar wech-se e peurlennis anezhañ. Adarre e veizis n'o doa an alioù hag ar goanagoù a oa displeget el levr-se ster ebet euidon. Dic'hallus e oa din krediñ, egiz ma lavarent. Re anat e oa din ne oa er bed a-bezh netra er-maez eus hor c'horfoù. An danvez hepken a c'hell kaout darempred gant an danvez. Dassorc'hiñ korfoù, korfoù ha n' oant ken korfoù, er-maez a bep istor, en ur beurbadelezh difiñv, kement-se n'oa nemet amodaj ha dezevout e c'helle darn kaout feiz e kement-se am lakae da vroueziañ.

Rak ouzh ar vuhez-mañ e vagen ur garantez di-vent, ar vuhez egiz ma oa, egiz m'hen anavezet ; er bed-mañ e felle din tizhout an eurvad hag en em salviañ ; va c'hoante-gezhioù ha va zrivliadoù a oa diazez va fersonelezh ; o dioueriañ a oa asantiñ da vont da get, en em zaskorfañ elec'h en em sevel.

Seul grisoc'h a se e santen ar stad reuzeudik m'edon enni : va holl joa a lakaen en ur vaotez hag houmañ a oa diframmet diouzhin ha, gwashañ ' oa, war va gwall an hini e oa ; va holl levneze a laken er vuhez hag houmañ a vije lamet diganin marteze ; fellout a rae din tec'hout diouzh an netra hag evelato e oan barnet d'an Netra. Adarre e oan paket ha ne oa dor ebet digor din.

A-benn ar fin e oan aet skuizh o lenn al levr diskiant-mañ ha deuet e oan da c'hourvez war va c'holc'hed. Ur bann heol a ziskenne ebarzh va c'hell dre an darzhell. Gant trugar e santis gwrez an heol o tommañ va izili, ouzh va flourañ ha va c'hennerrzhañ, evel lazig ur vamm. Epad un eurvezh hanter e chomis moredet er glouarjenn. P'em boa digouket avat e oa steuziet an heol ; teñval e oa ar c'hell ha yen e oa din. A-greiz-holl e oantaget da zifronkal ; biken ne zeujen er-maez eus ar bez-se elec'h edon sebeliet ; biken ne adweljen mui maezioù kaer al Ledenez, dremm genedus Varia ; hep dale ez ajen va unan da goll.

Torret e voe ar barrad-mañ pa voe dibrennet dor va c'hell a-daol. Daou soudard a oa ouzh va gortoz er-maez. Ober a rejont sin din dont d'o heul. Neuze e voe degenennet din e oa erru unan bennak d'ober ur weladenn din. Talmiñ a reas va c'halon em c'hreiz pa glevis ar c'heloù-se. Ha vefe deuet Maria, a soñje din, m'he defe pardonet din ! hogen n'oa ket evit krediñ da vat en hevelop burzhud.

Padal e oa gwir va huñvre, Morgan. Pa voen bet derenet en ur sal vihan sklaer e lein un tour em boa merzet va gwreg aezet ouzh un daol etal ur prenestr barrennet. Distronk ha kastizet e oa he dremm. Gwisket e oa e gwenn evel un intañvez. Pa oan degouezhet er sal e oa deuet davedon

en ur redadenn ha va briataet he doa en ur zirollañ da leñvañ. Va c'halon a deuzas gant an deneridigezh o santout divrec'h Varia endro d'am gouzoug. Hec'h adkavet em boa Ne glasken ket kompren perak na penaos. Adarre e c'hwezhe ar goanag ennon.

- Ned i ket mui kuit, karedig," a zistagis gant nerzh.

- Siwazh," emezi, "te ' oar mat e rankin da guitaat tuchañtik."

- Te hepken a c'hello va saveteiñ, muiañ-karet," a respontis.

Parfetaat he doa graet Maria neuze. Aet e oa d'azezañ war ur bank etal ur prenestr all ; alese e oa gwel war gêr Loranon a-bezh hag ar maezioù tro-dro, hanterkant metrad izeloc'h, dreistdiraez ; sellet he doa a-benn ouzhin ha yen awalc'h ha doa diskleriet :

- Etre da zaouarn-te emañ da silvidigezh, Keralen," (evel-se e rae ouzhin pa veze imor enni daoust din da vezañ degemeret an anv a bPol pa oan bet badezet).

Disouezhet e voen.

- Penaos ? " a c'houlennis. "Te ' oar mat ez on bet diskiant awalc'h evit lazhañ un den abalamour dit ha bremañ e rankan paeañ : barnet e vin..."

Maria a savas prim en he sav.

- Genaoueg!" emezi. "Peseurt prozez a vo gelllet ober ? Peogwir n'eus test ebet d'ar pezh a zo c'hoarvezet, nemedon va unan. Ha prest on da ziogetiñ e oan heski- net gant an ampouailh-hont hag e oa poent dit dont war va sikour. Ne vo prozez ebet zoken. War un diviz avat..."

- Peseurt diviz ? " a c'harmis. Hogen dija e trouksanten peseurt goulenm e oad o vont d'ober ouzhin.

- Dav e vo dit asantiñ d'ar c'hinnigoù a oa bet graet dit p'o doa en em vodet ar Breudoù warlene. Dit eo aozañ ar raktres a gaso da get an Enezenn..."

- Gouzout a rez ez eo dic'hallus, karedig," a zic'hwezhis. "Displeget em eus dit perak." Desevet e oan.

Brumennet e oa daoulagad va gwreg gant an anken.

- Da aspediñ a ran, muiañ-karet. Hennezh a zo an tu nemetañ d'en em gavout a-gevret ha d'en em garout.

- Evit pegeit ? " a daolis o soñjal gant c'hwer- voni ne chome din da vevañ nemet un nebeut bloavezhioù berr abaoe ma oan bet diframmet diouzh an Enezenn. Maria a gomprenas ac'hanon.

- Petra ' vern ! " emezi. "Hiziv e hañval ar vuhez a zo ouzh hor gortoz bezañ ur beurbadelezh."

Hejañ a ris va diskoaz.

- Ur bugel out, Maria," a lavaris. He dedennañ a ris war-du ennon hag he briata. Gant joa e santen he c'horf klouar a stok ouzh va hini, he diweuz flour tost d'am re,

hec'h anal fresk mesket gant va hini.

- Te a zeuy ganin du-hont kentoc'h, Maria. Bevañ a raimp da viken a-gevret. Ar baradoz a zo ouzh hor gedal."

Maria en em dennas a dre va divrec'h. Dour a oa savet d'he daoulagad.

- Ne fell ket din, Pol," emezi. "Biken ne rin. Gouzout mat a ouzout."

- Ne chomi ket er vro reuzoudik-mañ elec'h e ren an Ankoù," emeve. "Peseurt keñver a zo etre ar bed a splannder a ginnigan dit hag an ifern a zo ho lod amañ? Hep dale e vi kozh ; ne vi ket mui gouest d'am c'harout zoken, Maria!"

Hi avat a nac'he, kilvers.

- N'on ket evit da heuliañ a-hont, karedig. Broud ar Serc'h eo an Ankoù, ur chañs a zaonedigezh marteze hogen ivez ur chañs a silvidigezh. Me ' fell din c'hoari va buhez ; ne ginnigez na goll na c'honit, an enoc ne lavaran ket, hepmuiken."

Goude tevel a ouzhpennas .

- Ne vi biken awalc'h din, Pol. N'eo te an

hini am salvo...

- Deus ganin, " a adlavaren.

Hogen merzout a ris e selle ouzhin gant Kas diwar neuze. Tec'hout a ris kuit endro d'am c'hell hep kredif zoken pokat dezhi.

~~~~~

Pennad 28

Heskiner ez h

Prennet e oa bet an nor war va lerc'h. Gant disamm en em santis va unan. Barr e oa va spered gant an dispil. Epad ur pennad e souras ennon adarre ar youl d'en em zistrujañ. Ober a ris tro va c'hell, diskiantet, dalc'hot a-grenn gant ar gwall-vennad a oa eginet em c'hreiz endro hogen dillo e komprenis na c'helljen biken kas va menoz da benn. Kontell na laonenn na gorden ebet ne oant bet lezet em c'herz evel-just. A-hend-all, e pelec'h em befe skourret ar gorden. Brizh-c'hoarzhin a ris va unan.

Skuizhañ a ris en diwezh. Ha me d'azezañ war ribl ar c'holec'hed da brederiañ. Paket e oan ha paket war va gwall. Ma ne vijen ket bet diboell awalc'h evit plegañ d'an doug am sache davet Maria em biije miret va brient a Enezad. Pellzo e vijen distroet du-se. Gallet em befe drom-mañ ouzh ur bezoud peurbad dizoan. Maria a gomze eus silvidigezh ha kollidigezh ; en Enezenn hepken o devoa ar gerioù-se

ur ster bennak. O tistreiñ d'an Enezenn, va unan penn diouzh ret, em biije en em salvet ; oc'h ober ar c'hontrol em boa en em gollet.

War-dro teir eur d'enderv e voe degaset boued din. Neuze e voen actreet d'ober ur frapad bale en ur porzh. Va unan penn edon bepred. Pa saven va sellou war-grec'h e kave din e tamwelen daoulagadoù dianav ha digarantez ouzh va spiañ adreñv barrennoù an tarzhelloù ha dont a ris buan da c'hoantaat distreiñ d'am c'hell. Gwashoc'h e oa ar bezañsoù dihegar-se egèt va digenvez kent.

Gant un tamm joa em boa adkavet va c'hell ugent munud goude eta. Hogen ne chomis ket va unan penn pell amzer. Rener an ti-bac'h a zegouezhas kentizh.

- Gwelet hoc'h eus ho kwreg, a gredan. Daoust ha graet eo ho menoz ganec'h ?

- N'eo ket graet tamm ebet," a respontis sec'h awalc'h va zon. "Laoskit ac'hanon e peoc'h, mar plij."

Rener an ti-bac'h a grizas e dal.

- N'oc'h ket e tailh d'am daesañ, den yaouank,"

emezañ. "Arabat eo deoc'h ankouaat emac'h em dalc'h penn-da-benn hag e c'hellan ober ac'hanoc'h ar pezh a garan. An holl brizonidi a zo o vevañ amañ a c'hellan kastizañ hervez va frouden. O mestr ez on."

Ur mousc'hoarzh kalet a serras e c'henoù epad ur pred.

- Gouest e vin d'ho lakaat da gemm ho soñj."

Ur c'hardeur goude e teuas daou ward da gerc'hat ac'hanon. Sachet e voen a-hed trepasoù teñval, dre ziriou diziwezh, betek ur c'hav dibrenestr ka ken izel ar sel anezhañ ma n'oan ket evit chom em sav. Delt e oa al leur, gludek, ma heugen o rankout gourvez warnañ. Ar gwashañ avat e oa adarre an didrouz pe kentoc'h an dilavar. Ne gleven nemet hiboud ur vammenn o verañ ingal dibaoez, mouezh den ebet avat evel ma c'hoarveze ganin a-wechoù ebarzh ar c'hell elec'h edon a-ziagent. Aon am boe d'ur c'houlz da chom hep gellout herzel ouzhan digenvez-mañ spontusoc'h kalz eget an hini all. Eus va c'hreiz avat e oa tarzhet ur youl arloupet da stourm ouzh va heskinerion. Arabat e oa din pennfolliñ. Ezhomm o doa ac'hanon. Ne c'hellent ket va lazhañ. O spi nemetañ e oan zoken. Awalc'h e oa din padout evit bezañ trec'h. Ober a ris va soñj reiñ un emell bennak d'am spered. Gant va daouarn e stagis da gontañ ar mein a yae d'ober mogerioù va c'hell. Tizhout a ris an nor evel-se. E prenn pounner e oa, sparlet gant barrennoù houarn. Merzout a ris e oa brein an diaz anezhi. Bruzhunañ a rae ar c'hoad dindan va bizied. Gwak e oa ivez an douar dindan. Kerkent e kellidas ur spi foll em spered : kleuziañ ano un toull ledan awalc'h evit gellout tec'hout. Ne felle ket din empennañ e vije marteze dek dor all da ziskar war-lerc'h houmañ. Ar pal berr-dermen-se a rae din tu da devañ. C'hwilliañ a ris a doastorn endro din da gavout

ur beveg bennak. En diwezh e tizhis diskolpañ un tamm maen lemm diouzh ar voger. Stagañ a ris da duriat. Da gentañ e oa bet aes awalc'h al labour ; traezh ha grouan a oa da dennañ. Hep dale avat e tegouezhis gant kailh ha kalz startoc'h e voe va zrevell. Trouz am boa graet avat, emichañs, rak a-benn ur reuziad e voen direnket gant un evashaer a dostaas goustadik ouzh va c'hell, ur c'houlouenn en e zorn. Abarzh nemeur e chome a-sav dirak an nor. Edon en gortoz en dije digoret ; dija e kleven stirlink an alc'hwez er morailh ha, dav eo din hen anzav, hiraezhiñ a raen da welout dremm ur boud bev, goude ma vije hini ul loen mut. A-greiz-holl e oa difloupet en deñvalijenn ur c'hoarzh direol. Neuze, war-bouez, e oa pellaet endro ar c'hammedoù ; skleur ar c'houlouenn a oa steuziet. En em gavet e oan adarre en noz, kerseet ha disammet war un dro.

Ne echuis biskoazh an toull am boa kroget da gleuziañ. Emberr e oan bet faezhet gant ar skuizhder. Chomet e oan kousket. Pa zihunis ne ouien ken ha deiz pe noz a oa anezhi. N'em boa ket mui kalon ebet da vennout netra. N'ouzon ket e gwirionez pegeit e voen lezet en ifern-se, Morgan. Pezh a zo sur eo ne zeuas den ebet da zegas boued din er c'heit-se. Semplaat a ris tamm-ha-tamm diwar ar yun-se. Abarzh pell n'em boe ket mui nerzh d'ober an disterañ fiñv. Kouezhañ a ris en un doare morvor daztroc'het gant huñvreoù hag hurlinkoù a bep seurt. N'oan ket mui gouest da soñjal na da gounañ netra. Gant un dudi iskis e risklen a nebeudoù ebarzh an nann-voud, evel en un islonk. A-benn an diwezh n'em boa ket mui da stourm.

D'ar c'houlz ma kreden e oa echu ganin e teujod d'am c'herc'hat - a-benn pegeit a amzer ne oufen lavarout, Morgan, - ha stlejet e voen betek va c'hell kozh endro. Diwar neuze e voen maget evel araok ha buan e teuas va nerzh din endro. Dre ma wellae din avat e save em c'hreiz kounnar ha kasoni ouzh ar re am gwallgase evel-se hogen re wan e oan c'hoazh evit darc'hel pell hevelep trivliadoù taer. A-wechoù e egine em spered ar soñj e oa dibocell herzel ouzh ar re a oa trec'h din peogwir e oan re laosk evit en em zistrujañ. Dont a raen zoken da hetifiñ e ve ar wirionez gant brizh-kredennoù Ledeneziz : neuze e vefe reizh distrujañ an Enezenn.

Ar gwashañ evidon, a-benn neuze, e oa ar gwe-ladennoù stank a rae din rener an toull-bac'h, a-gevret gant daou ward. Bepred e nac'hen reiñ an disterañ skoazell d'ar re a venne tagañ an Enezenn ha distrujañ anezhi. Goude bezañ bet seven er penn-kentañ gant ar menoz moarvat e oan prest da blegañ dezhañ goude bezañ aprouet ment e veli warnon en doa adkroget an hailhon-se abarzh pell da gunujañ ha da c'hour-drouz ac'hanon. Neuze ne echue ket e letanioù. Epad kardeur-vezhioù e chome da gomz e unan : "Me ho flastro egiz un amprevan," a yude, ar glaour e korn e vuzell. "Plegañ a reot pe ho terriñ a rin..." Feurvuiañ e vanen difrom dirak seurt barradoù;

kinviañ em aheurterezh a raen kentoc'h ha c'heant am boa zoken d'ober goap outañ.

- Perak em befe da sentiñ ouzhoc'h ? " a c'houlennenn-me. "Peseurt beli hoc'h eus warnon ? "

Ar rener a jestraoue hag a c'harme evel un den foll. Un aridennad leoù-touet a zeue gantañ. Klozañ a rae evel hen :

- Un torfetour ez oc'h. En abeg deoc'h e c'hell mont da get holl Ledeneziz un deiz."

Eilgeriañ a raen dezhañ.

- Perak e rankfed mirout ho sevenadur pilpouz?

- Daoust ha kristen ez oc'h-c'hwil ? "

Divarc'het e oa bet va c'hengomzer epad ur par berr. Amlavar e oa chomet. En diwezh en doa grozmolet :

- An dra-se ne sell ket ouzhoc'h. Goude holl, gwir eo, hen anzav a ran, n'oa ket kristen. Dav eo d'ur vro avat kaout ur gredenn bennak. Houmañ a zo koulz ha n'eus forzh pehini."

Diwar ar c'homzoù-se en devoa troet kein ouzhin. Gras am boa kavet o chom va unan.

Epad un nebeut devezhioù ne oa ket deuet ar Rener war va zro. N'ouzon dare avat peseurt soñj a oa en e benn war-lerc'h an tamm diviz hor boa bet a-gevret da zivezhañ. Marteze en doa soñjet e oan dedennet evelato gant gredenn gristen hag e oa eno un tu d'am lakaat d'ober e zisentez en diwezh. Pourchas a reas din levrioù a-zivout kravez al Ledenez. Darn anezho am boa damlennet endev ; evel m'em boa goar, na petra 'ta, d'ar c'houlz-se, e renis va va amzer oc'h adlenn anezho a-zevri.

Evit gwir e voen digalonekaet buan awalc'h. Ar c'healioù a oa termenet el levrioù-se n'oa doa diazezh gwirion ebet. Evit tud a zo bet stummet evel d'omp da gredifiñ er pezh a zo anat, hewel hag arnodadus ne oa reizhadurioù ar brederourion-se netra nemet belbiachioù, ken difetis hag ur ventoniez, ken froudennek hag ur vojenn a wechall gozh. Hag hevelep amedajoù a ranken lakaat da wirionezioù ! Kaer am boa ober ne oan ket gouest.

Ha padal, tamm ha tamm, dre ma tremene an deizioù, e teue va soñjoù da gemm hep gouzout din. Pep tra a hañvale din bezañ dibocell en hollved a-bezh, en Enezenn zoken. Du-se e oamp deuet a-benn da vestroniañ ar bed hag an danvez hogen ar bed hag an danvez-se a chome estren ouzhimp, didreuzus, divoull, teñval, anebus : ne oa ket a wir ere etrezo ha ni. Ur c'hoari bugale hor boa graet gant an danvez. Pezh hor boa krouet diwarnañ a oa tidel a-grenn ha n'en doa e gwirionez ster ebet.

Nag ar beurbadelezh a oa profet d'an dibabidi? Daoust ha touell ne oa ket ? Ne c'helled he zizhout nemet war-bouez un emezadur ken strizh ouzh an amva ma c'helle bezañ

distrujet gant an disterañ direnkadur.

D'ar mare-se, Morgan, em boa santet pegen diasur e oa ivez kement a oa kinniget din en Enezenn, penaos moarvat e oa tonket ar bezoud peurbadus a spien da vont da get deiz pe zeiz. Petra a verne ma vije a-benn mil, daou-vil pe dri-mil vloaz ? D'ar mare ma oa bet anat an dra-se din e oa aet ur c'hwezenn yen dre va c'horf. Preizh d'an Ankoù e vijen n'eus forzh penaos.

Va gwander a anavezez, Morgan. N'on ket bet biskoazh evit degemer soñj ar marv, da lavarout eo soñj an dianav, ar c'hevren, an arvar, an argoll. Un hiraezh divent am boa d'an diogel ha d'ar silvidigezh, d'ur silvidigezh ha n'oa ket evit reiñ din va unan, d'ar bezoud ha d'ar vuhez da viken, dreist-holl er stad reuzeudik m'en em gaven ennañ d'an ampoent-se siwazh : eus ur gwarez a ziwar laez em boa ezhomm. Omeur a roe anezhañ din a-gent hogen ne oa ket mui aze. Un doue n'on ket goude holl.

Evel-se eo e teuis d'en em voazañ ouzh kra-vez ha kredennoù Ledeneziz, Morgan, da zegemer anezho tamm ha tamm en diwezh.

Perak pouezañ war se ? Diwar neuze e oan prest da blegañ e gwirionez. Ne voe ket dav d'ar Rener gwas-kañ kalz warnon evit va lakaat da blegañ. Goude bezañ va gogezet epad teir sizhun bennak e oa aet skuizh adarre gant va emzalc'h amsklaer. War e urzh e oan bet taolet ebarzh kevrenn - B - an ti-bac'h elec'h e veze serret torfedourion adfellat ha dezvorrerion diwellaus ; ar re-mañ a oa kraoulet ebarzh kacvedoù dir, chadennet daou ha daou. Eno ne voen ket gouest da herzel, Morgan. Goulenn a ris kaout un emwel gant ar Rener ha grataat a ris ober kement a c'houlenned diganin. Daou zevezh war-lerc'h e oan divac'het. Maria ha Lansoc'h a oa deuet da ziambrong ac'hanon.

~~~~~

P e n n a d 29

A n d i s t r o d ' a r g e r

Graet e oa bet va frosez e deroù miz Mezheven. Didamallet e voen dreist-holl a-drugarez d'am zad-kaer a dizhas diskouez d'ar varnerion e oa bet gwall-horjellet va yec'hed abaoe ma oan erru el Ledenez. A-hend-all, daoust d'ar pezh a ziskreden, n'em boa graet nemet gloazañ an den am boa taget ; pareet e oa a-benn neuze. War wall ur barrad diskiantegezh e voe lakaet va gwall-daol e Brewenn. Egiz m'em eus lavaret deoc'h ivez, un den a levezon e oa tad Maria, brudet ha doujet, helavar tre ; kendrec'hiñ a ouezas ar var-

nerion ; o fromañ a c'hellas ivez o tisplogañ pebezh poanioù en devoa diwasket en ti-bac'h. Taerif spontus en doa graet o c'houzout pebezh emzalc'h en doa bet rener an ti-bac'h em c'heñver. Goulennet en doa groñs e ve graet un enklask pizh diwar-benn pezh a c'hoarveze en ti-bac'h-se. Pa voe bet embannet an danevellskrid e voe dec'halvet ar rener irak ur poellgor-reizhañ ha dizornet diouzh e garg. Divizet e voe ouzhpenn kompenn an ti-bac'h ha gwellaat ar barnerezh el Ledenez dre vras. Evel-se, Morgan, ne voe ket didalvez va foanioù da vihanañ.

Me a oa diseblant kaer ouzh kement-se d'ar c'houlz-se. Dinerzhet krenn e oan bet gant va bac'hidigezh ha blin meurbet e oan manet. N'oa ket mui gouest d'en em chalañ na da gounnariñ diviet ha ma oa va zrivlierezh. A-benn diskuizhañ e oan aet da dremen mizioù an hañv en ur vourc'hadenn vihan war aod kreisteiz al Ledenez, e-touez paluderon. Bourrañ a raen, soñj am eus, oc'h arvestiñ epad eurvezhioù ouzh karrezonnoù lufr ar poullou-holen, oc'h houliañ em c'hreiz valgorioù dizivezh. Tamm ha tamm e oa steuziet diwar va c'houn ar gwall-eñvoradoù a zalc'hen diwar an amzer dremenet en toull-bac'h hag un tamm peoc'h spered am boa gounezet a-benn ar fin. Sikouret e oan bet a zoare gant va gwreg Maria a ouezas ober war va zro gant kalz a denarded. Gwellaet e oa d'he zro-spered abaoe ma oamp bet sammet gant trubuilhoù. Da vihanañ he doa meizet e talc'hen dezhi hag anaoudegezh-vat he devoa evidon en abeg da goment-se. Diduet e oan ivez a-hend-all gant doare ar c'horn-bro ma oan degouezhet ennañ hag a oa diseurt awal'h : Gwennborzhiz o devoa kustumoù ha gwiskamantoù espar awal'h. Ar gwagez, da skouer, a zouge saeoù gloan ruz ledan gant ur c'hoef e lien gwer a dape o diskoaz ; an intañvezed yaouank a c'hoantae addimeziñ avat a zizoloe o gouzoug. Ar baotred a oa gwisket gant un doare paltok mouk hag a laboure start en o farkeier koulz hag en o faludoù. An iskisañ e oa a-hend-all o arrebeuri e prenn kistin livet e ruz. Ar gweleoù a oa aczet war bostoù uhel, ma ranked krapat gant ur skeul betek enno, serr ivez gant stalafioù kizellet. Ur ouenn gaer a dud a oa o vevañ e Gwennborzh, Morgan, ur ouenn a dud jentil, hag un eñvor vat kenañ a zalc'his eus va chomadenn en o zouez.

E diwezh miz Gwengolo e oan distroet da Loranon. Graet em boa va annez endro ebarzh hon ti kozh, war laez. Eno e chomen peurvuiañ da lenn ha da studiañ. Lansoc'h a zeue di alies awal'h d'hor gwelout ha gant plijadur e kejen gantañ : kalz en doa skoazellet va zad-kaer a-benn va diframañ a-dre krabanoù ar barnerezh ledenezat. A-hend-all e oa atav ken distabil e galon ; a-benn neuze en devoa paouezet a zaremprediñ Gwenn ; houmañ - ha gwel l a se e oa - n'oa ket bet nepred gwall zedennet gant Lansoc'h ha n'oa ket bet re nec'het gant an droukverzh a oa c'hoarvezet ganti. Va c'honeil avat a anzave ouzhin a-wechoù na grede ken nemeur

e ve da dezhañ dimeziñ un deiz. "Gwelloc'h e vo evel-se emichañs," a lavare din. "N'eo ket mat bezañ strobet gant ur wreg ha bugale pa reer war-dro politikerezh." E gwirionez e oa savet bec'h e Loronan etre dalc'hidi e strollad ha re ar gostezenn a-enep e-kerzh an hañv ha gloazet e oa bet en ur c'hadabuilh bennak war ar straed.

A-benn neuze em boa en em grennet da vat da vevañ el Ledenez ha gortoz a raen bezañ pareet klok araok distreiñ d'an Enezenn hag arnodin distrujañ anezhi evit harpañ va c'henvroiz. Arvariñ a raen evelato diwar-benn gwirdalvoud va mennad bep an amzer ha reiñ a raen neuze va douetañsoù da anaout da Lansoc'h. Hir vrentaat a raemp neuze. Moarvat e oan deuet da soñjal e oa di-istor Eneziz, ar c'hempouez termenus diraezet ganto koulz hag ar Marv e unan hogen dre skiant-prenet e ouien e oa an Istor pasion an denelezh, un hentañ diziwezh a vad hag a fank. Neuze e responte Lansoc'h din e c'helled kroueriañ aour ha mein-priuz diouzh al lec'hid hag ar pri.

Evidon-me em boa komprenet e oa didalvez bevañ ur vuhez na c'hoarvezje netra enni. A-dreuz va foanion korf ha spered em boa tizhet goveliañ va boud. Dre ar striv hag ar bec'h, o wall-stourm da chom hep bezañ flastret dindan ar samm em boa embreget va frankiz ha gounezet va rezid. Deuet e oan da vezañ un denen diwezh. An den ne oa ket da wellaat. Ne c'helled e wellaat nemet dre e zistrujañ.

Padal n'houlen ket en em zaskoriñ penn-da-benn. Natur al Ledenez evel m'hen anavezen a hañvale din bezañ forc'hellek hag amsteriek. Daoust ha ne oa ket disoc'h al Ledenez an Enezenn hec'h unan ? Daoust hag ar stourm a-enep d'an dizurzh n'en doa ket da bal en diwezh Urzh an Enezenn end-eeun ? Ne c'hellit ket mirout hoc'h unan un tamm bennak a zireizhded hag a zidreñ a-benn diwall intrudu ha rezid an hiniennou, a zisklerien da Lansoc'h.

Hemañ a selaoue ac'hanon gant kalz a habaskted. Hejañ a rae goustadik e ziskoaz.

- Ar pal-se a zo pell c'hoazh, keneil. N'on ket sur e vo tizhet biken. Dre zegouezh, drebenn a'n Drouz-ziwezh, eo bet savet an Enezenn. Perak avat en defe an Istor un dibenn ? Perak e tlefe kavout e ster en dibenn-se ? Ne vo baradoz nag arvezañs-Doue ebet war an douar-mañ ha donedi-gezh Doue a vo bepred dic'hortoz kaer. Brav awalc'h e vo bet an Istor p'en devo roet tro da galz trec'hiñ en ur ziskouez o rezid, da zibab ha da garout Doue ha d'en em salviñ en diwezh."

Tevel en doa graet Lansoc'h epad ur fapad.

- Ned eo an Istor nemet ur c'herzh dibaouez war-du ur pal ha na vo diskuliet biken d'hon daoulagada vremañ." Hogen tenn e oa din bepred degemer menoziou

Lansoc'h.

- An diaesañ din eo soñjal ned eo ar bed-mañ nemet ur c'hoariva e meur a geñver, ned eo ar boan hag an droug nemet touell hag huñvre peogwir n'int ket termenus. Pep tra a zo faltazi, a-benn ar fin, evidoc'h. Re e kredan er vuhez-mañ ha rak-se e seblant din madelezh Doue, a-hervez, bezañ goap. Penaos e c'hellfen karout an hini mut, an hini dall, an hini seizet ? Me gav gwelloc'h c'hoazh e ve divizet va buhez gant un ardivink digalon eget gant ur Boud a anavezfe ac'hanon hag am barnfe d'ar washañ poanion hep abeg ebet."

Neuze e responte Lansoc'h :

- Peseurt keñver a zo etre Doue hag an den ? Daoust hag hemañ ne vuzuilh ket e c'hoantou diouzh ar galloud en devez d'ur mare d'o gwalc'hañ ? Ma vije dall an holl dud piv a glemfe eus e zallentez ? An den a ziviz e unan e boan hag e joa. Er bed-mañ avat n'eus poan na joa da-vat. Moarvat e fell da Zoue e asantfemp da c'hortoz ar pep penañ dioutañ. Pezh na reas ket Eneziz a lakaas ar vuhez-mañ da wirvoud nemetañ, o nac'hañ krediñ ha fiziout e Doue, oc'h en em serriñ warno o unan, oc'h en em zistagañ a-grenn diouzh an hollved ken e teuent da vezañ estren outañ.

Hejet en doa e benn abarzh adkregiñ :

- Setu d'am soñj dalc'h ar c'hoari, Keralen: daoust hag an dud a vo distroet diouzh an Doue a zo danvez o rezid peogwir Hen dibabont en un doare diskiant, e-kreiz an deñvalijenn, pe get ? Kemm a zo etre an dud, Keralen ; n'int ket holl eus an hevelep gouenn. N'eus Denelezh ebet. Mesket e vo da viken dreog ha gwinizh. Hogen ar gwashañ eo dres e c'hellfemp en em heñvelaat ouzh ar re e stourmomp a-enep dezho, ouzh ar re a ra traoù eus an dud, - dre implijout o hentennou-int. Ya, setu ar gudenn washañ evidon ha n'on ket deuet a-benn d'hen diskoulmañ."

Evitañ e unan e ouzhpennas :

- A Zoue, biken ne vimp glan awalc'h evit distagañ da anv. Hag hor youl-vat a droy bepred da wall-skouer."

Ret eo lavarout, Morgan, e skuizhan buan o vrentaat gant Lansoc'h. Hemañ a daere aes awalc'h a-wechoù ha re a levenez am boa bet oc'h adkavout anezhañ evit gwastañ al levenez-se gant tabutoù didalvez. N'eus forzh penaos e ouien ne vije aet biken an arvar diouzhin.

Buan eta e trois da gomz eus ar c'hudennoù pleustrek a selle ouzh va distro d'an Enezenn. Gant Lansoc'h e prientis ar raktres a zlee aotren da vadoù soudarded al Ledenez treizhañ ar Ganol ha tostaat ouzh ar Rannêr hag ar Geoded. Degaset e voe din ar binvioù pellzaremprederezh a oa bet bannet evidon a-berzh an Enezenn ha gante e c'hellis dont a-stok ouzh ar C'hreñvlec'h ha Chiangmi. Sebezet e voen o verzout pegen hegredek e oa hemañ, ma oan morc'hedet o touellañ

anezhañ. Dizael kaer e lonkas kement sorbienn a gontis dezhañ. Goulennet em bca distreiñ dre an hevelep hent ha ma oan deuet ha lemél e sell da se gourizad skinoberius ar Ganol : roet e voe din va gouleñn kerkerent. Evel-se e c'hellas rannoù-lu al Ledenez teurel o zroad war dachenn an an Enezenn. Kerkerent hag erru er Rannêr e krogis da ziempañ kenereadurioù tredanennek ar c'hontrolva-kreiz. D'ur c'houlz e voen souprenet gant daou Ijinour-eweshaat. Dav e voe din en em zizober diouto. Goude-se e rankis difraeañ. Gwell a se e voen skoazellet gant Rannêriz a oa aet faezh a werso ouzh beli-warez ar C'hreñvlec'h.

Etretant e oan bet dec'halvet gant Omeur a felle dezhañ kemer anaoudegezh eus va danevellskrid ha klevout va ali. E-giz-se e c'hellis kas da benn an eil lodenn eus va c'hefridi. War-bouez nebeut avat e voe darbet din c'hwitañ rak dizoloet e voe direnkadur kontrolvaoù ar Rannêr abretoc'h gret a soñjen. Me ' oar e c'hellen kontañ war ho skor, Morgan, hogen gwell e oa ganin chom hep kaout ozhomm anezhañ. Ur wech ma voenduet a-benn da lakaat ur bagad soudarded eus al Ledenez da zont tre er C'hreñvlec'h end-eeun, betek an Neved, e oa deuet an trec'h ganin. Dieubet ha disammet en em santis neuze. Sentet em boa ouzh va zonkadur war var va buhez; sevenet em boa ar pezh e oan bet graet evitañ. Deuet e oa peoc'h ennon.

Setu penaos, Morgan, eo c'hoarvezet ganin kemer penn al lu en deus aloubet an Enezenn, a-gevret gant Lansoc'h. Evidon-me, gouzout a ouzon, n'em eus mui da c'hortoz nemet ur vuhez verr hag an Ankoù abarzh pell hogen n'em eus ket keuz da vezañ paeet gant ur bezoud goular ar predoù a vuhez leun ha klok am bo tañvaet abaoe m'em eus dilezet an Enezenn, Morgan.

K L O Z A D U R

Tevél en doa graet Keralen. Azezet e oa war ar geot, tost da voger sonn ar Ganol. Edo an deiz o tarzhañ er Reber. Gwennaat a rae an dremmwel a nebeudoh a-us da vleñchoù ar gwez. A-greiz-holl e treluc'has an deil dindan bannoù an heol nevez difoupet ; er c'hreisteiz hag en hanternoz e taskrene doureier roz ar Ganol dindan anal ar beure.

Tregernet en doa an trompilh a-daol-trumm ha soudarded hanter diwisk a oa deuet er-maez eus an teltlennoù. A-unanoh e skoent war-du ur vammenn a darzhe war lez ar c'hoad d'en em walc'hiñ. Distreiñ a raent en ur c'hwitellat. Re all a oa krog dija da blegañ an teltlennoù ha da bakañ

dafaroù ha stalikerezhioù. Un hanter- eur war-lerc'h e oa echu al labour. Renket e oa ar soudarded a vagadoù o c'hortoz e vije roet urzh da loc'hañ.

Keralen a oa chomet da brederiañ. Bremañ ma oa savet an heol e klaske selloù Morgan a oa gourvezet en e gichen war e gravazh. Serr e oa daoulagad an Ijinour. Keralen a savas en e sav hag a dostaas outañ : a-boan e tenne e anal.

- Morgan ! " a c'halvas.
- An Ijinour a dridas un disterañ.
- Kousket oc'h ? " a c'houlennas Keralen.
- N'on ket," a respontas an Ijinour.
- Selaouet hoc'h eus va hanes ? "
- Gant plijadur," a eilgerias adarre Morgan.

Klask a reas dibradañ e benn un tammig hogen ne zeuas ket a-benn.

- Petra a soñjit anezhañ ? "
Ur mouc'hoarzh a-vec'h heverz a zigloras war ar muzelloù disliv.

- Klev, mab. N'eo ket mui poent din kemm va ali diwar-benn buhez ha bezoud. Re verr an eilvedennoù a chom din da vevañ. Soñjal a ran avat el Ledeneziz-se ec'h eus komzet ken hir diwar o fenn. Gwell eo dezho kemer da vestr Doue o faltazi a zo unan ganto. Atav e vint dieupoc'h egedon-me a sentas betek ar penn ouzh ar falsdoue a gasaen..."
Morgan a glaskas prezeg c'hoazh hogen son ebet ne dreuze mui e vuzelloù glas. E c'henoù a oa damzigor; un doare hik a zeuas gantañ. Neuze e tiflakas ar c'horf ha chom difiñv ha mut da viken.

Keralen a c'halvas Lansoc'h neuze. Hemañ a zeredas hag a chomas da sellout ouzh ar c'helan. Moan eston e oa, hogos treuzwelus.

- An dra-se a oa tonket," emezañ. "Me ' ouie mat n'en dije ket gallet padout pell. Ne vije ket bet gouest d'en em aozañ ouzh hor bed-ni, te ' oar mat," a ouzhpennas o treiñ war-du Keralen. "Re gallet e vije bet evitañ..."
- Keralen a roas peoc'h epad ur pennad. Dour a oa savet d'e zaoulagad.

- Mat eo bet evidon gwechall,"
- Neuze e c'houlennas Lansoc'h.
- Petra a vo graet eus ar c'helan-mañ ? "
- Keralen a respontas :
- Koulz e ve douarañ anezhañ diouzhtu amañ."
- Lansoc'h a reas sin da zaou soudard a oa o c'hortoz e urzhioù nepell dioutañ.
- Kemerit ar c'helan-mañ," emezañ, "ha toullit ur bez."

An daou soudard a sentas. Pa voe echu o labour

e c'hronnjont ar c'horf ebarzh ul lienenn-deltenn ha lakaat anezhañ goustadik e don ar foz.

Keralen ha Lansoc'h a oa pellaet.

- Ar wech-mañ eo aet an Enezenn da get da vat," eme Geralen. "Ur c'hevrin zo ne vo mui adkavet birviken." Huanadiñ a reas.

- Alo!" eme Lansoc'h o kregiñ en evrec'h, "n'eo ket dav dit en em chalañ. Sell : prest eo hor soudarded. Deus ganeomp."

Damc'houde e ouzhpennas:

- A-benn ur sizhun pe bemzektez e adkavi Maria."

Ur barr-levenez a gargas kalon Geralen.

- Gwir eo," emezañ, "ne vin ket bet pell er-maez eus ar gêr... "

An deizioù berr e c'hortoze a oa dezhañ koulz hag ar beurbadelezh en un taol.

Mall warnañ e stagas da ziskenn war-du ar Ganol, dre frailh ar voger.

====+

